



Dr Chamberlay

Wife Dr Koz



Koz. My. 10
©mezheyer
1960



oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
 niverenn: 10 mae 1960.
 numéro : 10 mai
 ooooooooooooooooooooooooooooooooooooo


Dastumadenn drimiziek a Gelennouriezh .

Rener : Armañs Ar C'halvez, Skol Sant Erwan, PLOUEG-AR-MOR.

Priz ar c'houmanant : 10 L.N. Priz an niverenn voutin : 2 L.N.

PRIZ AN NIVERENN-MAN : 4 L.N.

Kont-Red Post : REVUE SKOL, PLOUEZEC, C.D.N. RENNES 1911 06.



Revue trimestrielle de Pédagogie ,


dirigée par l'Abbé Armand LE CALVEZ, directeur Skol Sant Erwan,
 Plouézec, C D N ,

publiée sous les auspices de l'Association Bretonne d'Education
 Nouvelle .

Prix de l'Abonnement Annuel : 10 N.F. Prix du numéro ordinaire: 2 N.F.

PRIX DE CE NUMERO : 4 N.F.

Prière d' utiliser le C.C.P. ci-dessus .



Annual Subscription : 10 New Francs , about 15 shillings ,

to be sent to : Armand LE CALVEZ, Barclays Bank,

Llanrwst, North Wales .

Renew your subscription as soon as possible and g'Ve notice to
 the Editor : Revue SKOL, PLOUEZEC, C.D.N. Brittany .



Koumanantit ivez da WANIG HA WENIG , 1,50 LN.KR.P.Rennes, 1705 96.

Lennit en niverenn diwezhañ ur pezh-c'hoari berr savet gant
 unan eus hor skolidi : "Mont-dont d'Al Loar ", gant E.KERVELLA.

Skol Sant Erwan a gendalc'h

kendalc'hit ivez da gas ho skoazell !

EZHOMM BRAS HE DEUS ANEZHAN EVIT HERZEL OUZH AN DISPIGNOU

K.R.P. : Abbé LE CALVEZ, dr Skol St Erwan, PLOUEZEC.

Rennes , 863 85.

DASTUMAD S K O L :

Prenit an niverennoù kozh : darn anezho a vo diviet hep dale !

<u>RUMMAD KOZH</u> : niv.1 : Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre	2 L.N.
2 : Kelennadur ar Frizeg	2
3 : Douaroniezh Vreizh,gt A.Guilcher , Kelennet er "Sorbonne"	2
4 : 300 Divinadell	2
5 : Rimadelloù hag Unangomzoù	2
6 : Kudennoù ar Skolioù er Slesvig	2

<u>RUMMAD NEVEZ</u> : niv.1 : Skol Sant Erwan (hogos diviet)	2
2 : Nedeleg en Breizh (4 fezh 'hoari gant Jarl Friel	3,50
3 : Danevelloù diwar-benn ar Eleuf-Brug e Treger ha Skol St Erwan	2
4 : KONTADENNOU KOZH HA NEVEZ ,ul levr klok da gelenn ar yezh er gêr hag er skol,savet gt A.Ar C'halvez ,120 p.	6
5 : Danevelloù a bep seurt	2
6 : Daou Vloavezhiaed e Skol Sant Erwan	2
7/8 KRENNAVARIYOU,dastumet ha renket gt F.Kervella 112 pajenn	6
9 : KANAOUENNOU SANTEL ha KOMPLIDOU AR SUL gant MAOZEV GLANNDOUR	4

(distaol evit ar skolioù hag ar parrezioù) .

E GWERZH E TI SKOL :

Merc'hig ar Rozenn	1,50 L.N.	Istor Meudig	1,50
Pactr e Varv Glas	id.	Ar Goantenn e Koadid.
Robino Kruzo	1,80	Luduennig	id.
Ar C'hemenet Bihan	id.	Kabellig Ruz	id.
Ar C'hazh gt Heuzoù.	1,50	Gwenn-Erc'h	id.
Kistinenn	2 L.N.	Gwennig ha Gwenola	2 L.N.
An Ti Satanazet	3,50	Labous ar Wirionez	4,00
Alanig an Tri Roue	4,00	Marvailhoù ar Vretoned	2,50
Lommig	3,50	Bisousig	1,50
Tour Ar Bleiz	1,00	Ali-Baba,	1,80
C'ho aFiva Brezhonek	3,00	Notennoù d.w.b.ar Gelt.	8,00

La langue Bretonne et ses Combats,gt Roparz Hemon:3,50 .

RAKLAVAR

Ar studiadenn-mañ a zo bet ganin pevar bloaz war ar stern . Met,e gwirionez, n'em eus labourer warni nemet e-pad ar vakañsoù bras . Dastumet em boa dielloù e Kreisteiz Kembre e miz eost hag e miz gwengolo 1956 ;hag e Hanternoz ar vro,e miz gouhere hag e miz eost 1958.An danevell a zo bet skrivet e 1959,e Bad Kreuznach , ha peuraozet e-doug vakañsoù Pask 1960. (1)

Studiet ha lennet pizh - div wech a-wechoù zoken - am eus an holl oberennoù meneget el levrlennadur . Karet em befe bet embann e-giz stagadennoù pennadoù anezho ken talvoudus o c'havan evidomp ni e Breizh.Siwazh n'em eus ket bet .zer a-walc'h d'o zreiñ ha mall a oa warnon echuiñ ul labour hag a oa risklet da chom bloavezhioù c'hoazh war ar stern.Ur wech bennak en em gavo un den dezhañ muioc'h a amzer vak hag a c'hello , diwar an diazev savet amañ , sozañ un oberenn glokoc'h .

N'em eus ket meneget al levr " Welsh in Education and Life " en danevell daoust d'al lec'h nemetañ en deus kemeret en istor kelennerezh ar C'hembraeg (2) . N'eo ket bet fellet din tamm ebet sevel istor met kentoc'h taolennañ ar c'helennerezh a glasker seveniñ pe a vez sevenet bremañ zoken

Setu perak eo bet dielfennet ha diverret ganin penna - doù talvoudusañ " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " . Un oberenn dibar eo sur-mat diwar-benn kudennoù an Divyezhegzh. N'eo ket ret toniañ ganti bep tro , met ret eo meuliñ resisted an ensklaskoù , lealded an danevellerien , donder ar menozioù ,fur - nez ar barnadennoù , uhelder ar mennadoù ha kaerder ar palioù .

Ur gwir danevell eo eus kelennerezh ar yezh , met daoust da se n'eo ket bet dibouez gwelout a-dostoc'h ar pezh a vez graet en un nebeut kontelezhioù ,er re a zo e beg ar stourm . Amañ c'hoazh em eus graet implij eus danevelloù.Gweladennet em eus ivez skolioù ha goulnataet tud ,mistri-skol a bep seurt dreist-holl . Karet em befe bet gweladenniñ muioc'h a skolioù : ne oa ket bet posubl din hen ober en abeg d'ar vakañsoù , a vez kemeret e Kembre e miz eost .Ar skolioù a gloz o dorioc e dibenn miz gouhere evit o addigeriñ e derou gwengolo.

(1) E 1956 e chomen e Llangynwyd ,e-kichen Maesteg,Morganwg; hag e 1958,e presbital Llanrwst,Sir Ddinbrch - e parrez an Tad Trebaol, O.M.I. ,Done d'e bardono ! - hag e presbital Prestatyn . An Tad Trebaol a oa bet eno evel misioner a-raok ar brezel-bed kentañ ;ar c'hentañ beleg katolik abaoe ar Reform .

(2) Ul levr rouez-kenañ eo bremañ ha n'emañ ket em o'hers .E gavet em boa - hag e lennet en ur adskrivañ notennoù puilh - e levracueg va c'hambred e Coleg Sant Mair en Aberystwyth war-un-dro gant ul levr all hag a glasken lenn pell ' oa ivez : " Canlyn Arthur " gant Saunders Lewis.

Ur wir danevell eo an eus klasket aozañ : displegaf ar menozioù ha dezrevell ar fedoù an eus kejet ganto. A-wechoù marteze e seblanto d'al lenner bezañ koezhet war un dezenn, dezhi ur pal re- sis; evit bezañ leal em eus roet da glevout mouezh an holl, met dises e oa din chom hep diskouez a-du gant piv e oan dedennet : a-du gant ar politikerezh a ziogelo amzer-da-zont ar yezh hep nozout ouzh amzer- da-zont an dud.

Setu perak em eus displeget va soñj peurluviañ en notennoù: evel un den hag a arvest ouzh ur gevezadeg hep kemer perzh enni.

Bodet em eus en dibenn, e giz stagadennoù, un nebeut pajen - nadoù. Peurluviañ ez int a-bouez met n'e ket bet fellet din o lakaat e korf ar studiadenn evit na vefe ket digempouezet ganto.

N'em eus ket klasket neozh sevel un oberenn a lennegezh. Gouzout a ran mat n'eo ket disi va labour. Daoust da se ez on laouen ouzh e ginnig d'ar vretened a gar yezh. Pelloc'h eo bet war ar stern eget va labourioù all hag en em c'houlenn a raen alies ha chom a rafe diembann : ne dalvez ket ar boan moulañ studiadennoù diamzeret.

D'an eil, gouzout a ran e vo deuet mat gant lennerien Skol. Mar gwelfent arc'hoazh " ar Brezhoneg er Skol " ne oufe ket al lodenn vrasañ eus ar stourmerien petra goulenn, petra d'ober. Goude bezañ lennet an nebeut pajennoù-mañ e welint sklaeroc'h moarvat, ha goude bezañ sunet menozioù diazezet-mat e c'hellint d'o zro ivez kinnig mennadoù.

Ploueg-Ar-Mor, 28 a viz ebrel 1960.

An. ar C'hahol

A N A O U D E G E Z H V A T .

Fellout a ra din trugarekaat amañ an dud o deus va skoazellet da gas va enklask da benn, dreist-holl :

- an Ao.Ao.T.C.PHILIPPS, eil-rener an Deskadurezh e kêr Cardiff ;
W.J.JENKINS, H.M.I. (Her Majesty's Inspector), Y Rhyll, Sir Y Fflint.
Jack DANIEL, H.M.I. Bodfari, Sir Ddinbych.
L.G.ANGELL, Inspector of Schools, kontelezh Morgannwg.
LEWIS, Aardwyn Grammar School, Aberystwyth.
Pastor DFNALLT OWEN, Strathmore, Aberystwyth. (Doue d'e bardono!)
an Dll Jennie THOMAS, urzhierzh kelennerezh ar c'hembraeg e kontelezh Caernarfon.
Norah ISAAC, kelennerez e skol normal Y Barri,
an Ao.Ao.Gwyn M.DANIEL, sekretour U.G.A.C. ha rener-skol e Caerdydd.
Raymond EDWARDS, sekretour Kevredigezh Kerent ar Skolioù Kamb. rener kevrenn gembraek ar B.B.C.e Caerdydd.
Ivor OWEN, Tj'r Yagol, Llanuwchllyn, Sir Feirionnydd,
rener ar gelaouenn skeudennacuet HWYL.
Pastor Geraint OWEN, kadoriad Kevredigezh Kerent ar Skol Gembraek e Maesteg,
an Itron Geraint OWEN, e bried, skolaerez.
an Dimezell CASSIE DAVIES, H.M.I.
an Ao.Ao.Caradog WILLIAMS, rener-skole Trelogan, Sir Y Fflint.
Dafydd Parry, mestr-skol, eus llanrwat, Sir Ddinbych.
HAYES, mestr-skol, skol gatolik, Maesteg, Morgannwg.
Rener ar Skol Gatolik, Maesteg.
Rener ar Skol Gembraek, Aberdâr.
an Dimezell Renerez ar Skol Gembraek, e Nantffyllon, Maesteg,
hag ar vistri-skol.
an Dimezell Renerez ha Mestrezed ar Skol Gembraek, Y BARRI.
an Itron Mestrez Skol Gembraek ar Vugaligoù, Y BARRI.
an Ao.Ao.J.D.MILLER, rener-skol e Nantffyllon, MAESTEG.
Sekretour YR URDD, Lluest, Aberystwyth.
Sekretour " Glamorgan County Youth Committee " , e PEN-Y-BONT AR OGWR.
an Ao. hag an Itron David DAVIES, MAESTEG.
Renerien an " ENTENTE CULTURELLE BRETONNE ", 3, str.F.GARNIER,
Paris, 17^e, evit ur yalc'hâd-studi e 1956 ;
ha mar em eus ankounac'haet unan bennak e c'houlennan digantañ va digarezif.

LEVRLENNADUR.

Diwar-benn kudennoù an Deskadurezh e Breizh - Veur : priz:

"Education in Britain", London, 1955 . 2/
 "The New Secondary Education", London 1947 . 2/6
 "Becoming a Teacher", London 1955 ?

Diwar-benn kudennoù an Deskadurezh e Kembre :

Rummad Gwer embannet gant Ministrerezh an Deskadurezh:

"Education Administration in Wales" "Gweinyddiad Addysg Yng Nghymru", 1948 1/3

"The Future of Secondary Education in Wales" "Dyfodol Addysg Uwchradd Yng Nghymru", 1949 3/0

"The Place of Welsh and English in the Schools of Wales", 1953 12/6

"The Place of Welshsummary, 'Lle 'r Gymraeg a'r saesneg" crynodeb, 1953 3/

(al levrig-mañ a zo un diverradur divyezhek eus an Danevell ofisiel meneget a-us)

Rummad Ruz embannet gant Departamant Kembreat Minis. an D.:

"Language Teaching in Primary Schools" "Dysgu Iaith yn yr Ysgolion Cynradd" N° 1 1945 0/9

"Education in Wales" Pamphlet N° 2 1948 1/3

"Education in Rural Wales" "Addysg Wledig yng Nghymru" n° 3 1949 1/6

"Bilingualism in the Secondary Schools of Wales" "Y Broblem Ddwyleithog yn yr Ysgol Uwchradd yng Nghymru" N° 4 1949 1/

"The Library in Wales and Welsh Studies" N° 5 1951 3/ (n'em eus ket studiet al levr-se ha n'avezean ket e dalbenn e Kembraeg)

"The Curriculum and the Community in Wales" "Y Cwrs Addysg a'r Gyndeithas yng Nghymru" (a gemer lec'h al levrighigoh 1 ha 4 meneget a-us) N° 6 1952 5/

An holl levrigoù-se a zo e gwerzh e ti :HER MAJESTY'S STATIONARY OFFICE, LONDON & CARDIFF.

Danevelloù embannet gant

Awdurdod Addysg Sir Gaernarfon-Caernarvonshire Education Authority

"Trydydd Arolwg Iaith - Third Language Survey"
 Cyflwynwyd i'r Awdurdod Addysg Lleol, Mehefin 1952.
 Presented to the Local Education Authority, June 1952.

"Pedwerydd Arolwg Iaith - Fourth Language Survey"
 Mawrth March 1960

(an div zanevell a-us a zo bet aczet gant an Dimezell Jennie Thomas, urzhierz kelennerzh ar yezh er gontelezh)

Awdurdod Addysg Morgannwg - Glamorgan Education Authority

"The Teaching of Welsh as a Second Language in Primary Schools"
 "Dysgu Cymraeg Fel Ail Iaith Mewn Ysgolion Cynradd"
 Education Memorandum N° 4, February 1949.

Cyngor Cymdeithas Sir Gaernarfon o Undeb Cenedlaethol yr Athrawon
 The Council of the Caern. County Association of the N.U. of Teachers

"Awgrymiadau Athrawon Sir Gaernarfon mewn Atebiad i Gylchlythyr 182"
 "Suggestions on Language Teaching in Caernarvonshire,
 The Reply of Caernarvonshire Teachers to Circular 182
 of the Ministry of Education" s.d.

Cwmni Urdd Gobaith Cymru

"Beth Ydyw Ysgol Gymraeg?" (Petra eo ur skol kembraek ?) s.d. /6

Undeb Rhieni Ysgolion Cymraeg

"Yr Ysgol Gymraeg" (Ar skol kembraek) s.d. /9

Kelac'hennoù : BANER AC AMSERAU CYMRU, broadelour, sizhuniek,
 savet e 1857,
 embannet e Dinbych, Swyddfa 'R FANER.
 Y CYMRO, rannvroelour kentoc'h, sizhuniek.

BILINGUALISM IN WALES, by R.E. Davies, M.A., Ph.D. Professor of English Language and Literature in the Potchefstroom University, South Africa, Juta & Company 1954.

"Skrijet eo bet en ur yezh sklaer hag eun ha kavout a reer ennañ un daolenn resis ha gwir eus stad ar yezh e Kembre hiziv"
 eme an Dr Ceinwen Thomas en Y FANER, 15.9.54. Priz 10/6

(Prenet em boa al levr hag e lennet e 1954, met a-ratozh kaer n'em eus ket bet sellet outañ abaoe na graet implij anezhañ em studiadenne: felle ket din bezañ levezonet e stumm ebet gant barnadennoù ur sa-trañjourez da Vro-Kembre daoust m'he doa tramenet eno kalz muioc'h a amzer - roet e oa bet dezhi div yalc'had, unan a 500 lur saoz hag unan all a 120 lur saoz - ha m'he doa gwalet muioc'h a dud hag a skolioù.

TAOLENN AN ANVIOU - LEC'HIOU

Anvioù ar C'hontelezhioù :

Sir Fôn	: Anglesey	Sir Feirionnydd	: Merionethshire
Sir Frycheiniog	: Breconshire	Sir Fynwy	: Monmouthshire
Sir Gaernarfon	: Caernarvonshire	Sir Drefaldwyn	: Montgomeryshire
Sir Aberteifi pe Ceredigion	: Cardiganshire	Sir Benfro	: Pembrokeshire
Sir Gaerfyrddin	: Carmarthenshire	Sir Faesyfed	: Radnorshire
Sir Ddinbych	: Denbighshire	Caerdydd	: Cardiff
Sir Fflint	: Flintshire	Merthyr	: Merthyr
Sir Vorgannwg	: Glamorgan	Casnewydd	: Newport
		Abertawe	: Swansea .

Anvioù un nebeut kêrioù :

Aberpennar	: Mountain Ash	Biwmaris	: Beaumaris
Abertawe	: Swansea	Merthyr Tydfil	: Merthyr Tydfil
Y Barri	: Barry	Pen Y Bont Ar Ogwr	: Bridgend
Caerdydd	: Cardiff	Y Rhyl	: Rhyl
Caer	: Chester	Trelawnyd	: Newmarket
Casnewydd	: Newport	Y Wyddgrug	: Mold
Caerdybi	: Holyhead		

An anvioù all a zo heñvel mik, pe damheñvel en div yezh :

I. MERADUREZH AR SKOLIOU.

An dra gentañ da studiañ pa glasker pleidiñ gant ur gu - denn bennak eo al lezennoù-diazez hag ar meradurezh.

E Breizh-Veur, al lezenn-diazez anvet " Education Act " 1944, diwar-benn an deskadurezh a lez kalz a frankiz gant ar c'hontelezhioù hag an tiegezhioù. War an dachenn-se, ar c'hontelezhioù n'int ket kepken meradurezhioù karget da seveniñ dre ar munut lezennoù strizh votet gant ar Parlamant pe goure'hemennoù aozet gant ar Gouarnamant. Evel ma vo gwelet a-hed ar studiadenn-mañ, kalz a frankiz o deus war dachenn an deskadurezh en ur chom e-diabarzh ar stern bevennet gant al lezenn. (1)

Kalz re, d'am soñj, ha da soñj meur a hini e Kembre, moarvat. Diouer a ra ur greizenn c'halloudus e Kembre. Va lennerien hen santo a-walc'h hag abred; evit ar mare e venegin ar gudenn hepken.

E penn an deskadurezh e Breizh-Veur en em gav Ministrezh an Deskadurezh ha Pennadurezh Lec'hel ar Gontelezh.

E karg ar Ministrerezh eman lakaat al lezenn da dalve-zout dre hantererezh an Departamant Kembreat, ar " Welsh Department of Education ", krouet e 1907. (2) E labour a seblant bezañ meradurezhel hepken. E vurev pennañ a zo e Caerdydd, met ur sekretourva en deus e Londrez. An Ensellerien H.M.I. (" Her Majesty's Inspector "), a vez anvet gant ar Ministrerezh.

Pennadurezhioù Lec'hel an Deskadurezh a zo Kuzulioù ar c'hontelezhioù, anezho 13, hag ar c'hêrioù bras, anezho 4 : Caerdydd, Merthyr Tydfil, Casnewydd, Abertawe. Int eo a anv Renner an Deskadurezh hag an Ensellerien Lec'hel, " school inspector ", hag a bled gant holl aferioù ar skolioù. (3)

Meur a Guzul a zo bet krouet e-doug an hanter-kant vloaz diwezhañ evit aliañ, harpañ, unvaniñ ar c'hontelezhioù hag evit klask unvaniñ diouzh ret.

E 1946 ez anvas ar Ministr ur strollad a 17 a dud da studiañ kudenn Kenguzul an Deskadurezh (" Joint Educational Committee ", pe " Cyd-Bwyllgor Addysg Cymreig "). An danevell, peurechuet e 1947, hag embannet e 1948, a erbedas krouidigezh ur seurt kuzul hag a bled-

(1) Arabat ankounac'haat n'eo ket bet c'hoarvezet e Breizh-Veur an Dispac'hoù o deus graet gant Bro-C'hall unan eus broioù kreizennetañ ar bed.

(2) Va fal a zo studiañ kelennerezh ar C'hembraeg ha nann meradurezh ar skolioù e Kembre. Met evit kompren don ar c'hentañ ez eo ret, anañ eo, kaout un alberz eus an eil, hag a-wechoù un anaoudegezh klok a-walc'h.

(3) E 1956 e oa 47 enseller e Kembre ; 41 anezho a gomze Kembraeg, hervez an Dll Casie Davies, H. & I.

fe gant : arnodennoù ar skolioù-etre ;
 stummidigezh ar vistri ;
 ar yezh hag ar c'hudennoù kulturel ;
 an enklaskoù war dachenn an deskadurezh . (1)
 Bez ' e vefe ennañ 112 ezel ; 84 anezho dileuriet gant kuzulioù ar
 c'hontelezhioù ha 28 gant ar vistri-skol, ar gelennerien, ar skolioù-
 meur hag un nebeut ensavadurioù all. (2)

Ar ministrerezh a bae 60 % eus an holl dispignoù -100 %
 evit ar skolioù-mistri - hag ar c'hontelezhioù , 40 %. Al levrioù ivez
 a vez kinniget d'ar skolioù, zoken reoù ar relijion hag ar c'hembraeg.

Evit skoazellañ embannerezh al levrioù kembraek evit ar
 re yaouank ez eo bet krouet ar " Welsh Language Publishing Scheme ".
 Dre an emglev-se o deus prometet pennadurezhioù an deskadurezh pre-
 nañ bep bloaz evit 15.000 lur saoz . Lodenn pep pennadurezh a vez je-
 det diouzh niver ar skolidi a studi ar c'hembraeg. E 1956, he doa kêr
 Caerdydd 960 lur saoz - d'ar mare war-dro 1.000.000 a lurioù gall -
 da zispign e levrioù kembraek, pezh a rae ul lur saoz evit pep bugel.
 Ar skolioù a c'hell bezañ rannet ha renk et evel-hen : (3)

Kentañ derez : "nursery schools", ar skolioù habiget, rouez a-walc'h
 e Breizh-Veur .

Primary schools :
 Infant school pe infant department (5-7)
 gant 2 "standard" pe glas .
 Junior department (7-11) gant 4 "standard" .

Eil derez : Secondary grammar school a dalvez evit hor skolioù
 klokaat hag etre .
 Secondary modern school : enni e kaver ar skolidi n'o
 deus ket tremenet an arnodenn evit
 ar skolaj teknikel pe ar "grammar
 school". (4)
 Secondary technical school : ar skolidi a dremen an
 arnodenn gant berzh war-dro 12 vloaz ;
 klotañ a rafe gant hor skolajoh tek-
 nikel. (5)

Derez Uhelañ : skolioù-mistri (training colleges), skolioù uhel,
 skolioù-meur . (5)

- (1) E Breizh-Veur hag e Kembre ne vez graet netra diwar skañv. A-raok
 divizout e vez azoet un enklask ha, peurvuiañ , e vez embannet an di-
 soc'hoù.
- (2) "Educational Administration in Wales - Gweinyddiad Addysg yng
 Nghymru" , p.p.21-24 pe p.p.50-53 e kembraeg.
- (3) Kendiviz gant an Ao.T.O.Philippe, eus Caerdydd, eil-rener an deska-
 durezh.
- (4) Kour Uhel hor skolioù izel a c'hellfe klotañ gant ar skolioù-mañ
 mar ne vefe ket ret kouchañ kentelioù e speredoù ar skolidi evit trem-
 men ar C.E.P.(testeni-studi) hep gounid gwirion ebet.
- (5) Un daolenn hiroc'h a vo kavet e SKOL, niv.1, rummad kozh, p.22.

II . AR POLITIKEREZH OFISIEL .

A. AR POLITIKEREZH DRE VRAS.

Ar Politikerezh Ofisiel evel m'eo displeget e 6-vet pennad al
 levr " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales" (1),
 embannet e 1953, n'en deus ket kemmet abaoe " Welsh in Education and
 Life " , embannet e 1957, li. Language Teaching in Education and Li-
 fe", embannet e 1945. Setu eñ : ar c'hembraeg a zlefe bezañ keletet en
 holl skolioù evel kentañ pe eil yezh, diouzh ma tegouezh dezhañ bezañ
 yezh c'henidik ar skolidi pe get . (2)

Ur wech degemeret ar bennaenn-se e
 klask an danevell diskoulmañ un nebeut kudennoù .

1° Pehini eo ar yezh c'henidik ? Da zibab a oa etre 4 termenadur her-
 vez " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales": (3)

- 1-ar yezh divizet gant ar gerent .
- 2-ar yezh anavezet ar gwellañ gant ar bugel.
- 3-yezh implijetañ ar bastell-vro .
- 4-ar yezh implijetañ en tiegezh. An termenadur-mañ a voe degeme-
 ret dre ma laka anat an darempred a zle bezañ etre ar gêr hag
 ar skol. (4)

2° Ur gudenn all da ziskoulmañ : Pego, ulz kregiñ gant studi an eil
 yezh ? Abred a-walc'h p'emañ an aergelc'h a-du ; ar c'hembraeg abre-
 toc'h eget ar saozneg ; n'eus forzh penaos pa'z eo antreet ar skolidi
 er "Junior school" (7 vloaz) (5)

(1) Ul levr a 112 pajenn in 4°, anezhañ danevell un enklask sevenet
 gant ar " Central Advisory Council for Education " etre 1949 ha
 1951 hag embannet e 1953. Un diverradur hepken a oa bet embannet e
 Kembraeg en abeg d'ar vent ha d'ar priz .
 Un daolenn glok eus ar pennadoù hag ar rambennadoù, niveren-
 net holl, moulet e derou al levr, a sikour al lenner, pe ar furcher, da
 zizoleiñ diouzhtu ar pezh a glask.

- (2) E SKOL niv.1, rummad kozh, ez eo displeget hir ha resis a-walc'h.
- (3) op.cit.p.56, niv.265.
- (4) Disheñvel eo an termenadur degemeret gant azerien an danevell
 diouzh an hini a oa bet roet d'ar vistri-skol war ar follenn-enklask
 kaset dezho.
 Evit an follenn-enklask, ar yezh kentañ eo an hini anavezet
 ar gwellañ gant ar bugel ha komzet gantañ an aesañ , op.cit.p.103 .
 Fentus a-walc'h eo kement-se, met aes da gompren en abeg d'an daou sav-
 boent disheñvel.

(5) Bodadeg vloaziek an U.C.A.C. e 1958 a c'houlennas ma vefe desket
 ar c'hembraeg d'ar skolidi dindan 7 vloaz dre ma n'eo ket un havelep
 den kelenn ar c'hembraeg hag ar saozneg evel eil yezh ha dre ma'z eo
 gwelloc'h deskñ an eil yezh d'ar bugel kentañ m'heller . (Y FANER,
 24.4.58)

3° An danevell a veul labour ar Skolioù Kembraek Nevez a zo "skolioù e pastelloù-bro saoznekaet. Kenteliet e vez enno dre ar c'hembraeg ar vugale a zo ar c'hembraeg o yezh c'henidik; ar saozneg a vez kelennet evel eil yezh. (1)

Ar saoznegerien vihan n'hellont ket bezañ degemeret dre ma vefe kontrol d'ar benmaenn-diazez: yezh ar skol a zle bezañ ar yezh c'henidik. Ouzhpenn, ur riskl bras a c'hellfe bezañ evit sergelañ ha yezh ar skol. Anzav a reer koulskoude e c'hell skolidi dezho un sergelañ kembraek-tre bezañ degemeret.

Ar skolioù kembraek o deus an hevelep gwirioù hag ar skolioù all e-keñver pep tra, zoken al lojeiz hag an dezougen, hag hen degas a reer da sorj groñs d'ar Pennadurezhioù le-c'hel, daoust d'an dispignoù. (2)

Un nebeut alioù a roer ivez evit kelen - nadurezh eil derez bugale ar skolioù kembraek: krouñ ur gevrenn evit ar gembraegerien, o c'has d'ur skol-etre en ur bastell-vro gembraek, pe digeriñ ur skol eil derez kembraek gant ur banñion.

4° Ar gelennerien brizusañ a zo evel just ar re divyezher. Da c'hortoz ez eo ret ober gant kelennerien-red ("peripatetic Welsh teachers") daoust ma'z eo un diskoulm fall evit ar mestr - ur vicher skuizhus - , hag evit ar skolidi dre n'ha deus ar yezh darempred ebet gant oberoù all ar skol. Gwelloc'h e vefe kaout e pep skol ur c'helenner kembraek hag a c'hellfe plediñ gant danveziou all.

5° An arnodennoù hag an enklaskoù implijet da zispartiañ ar skolidi e diwez an derez kentañ a zle derec'hel kont eus an divyezhegezh dre reiñ poentoù-gounid evit an eil yezh ha dre zibab gant evezh bras tãstou a heter mut.

B. AL LAKAAT DA DALVEZOUT .

Ar pennad VII eus " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " a ziepleg penaos lakaat pennaennoù ar politikerzh displeget uheloc'h da dalvezout dre alioù hag erbedadennoù a bep seurt strollet dindan un nebeut istitioù :

Stummadur ar Vistri-Skol . Pouezañ a reer war talvoudegezh stummadur ar vistri-skol da gelenn ar c'hembraeg evel kentañ hag eil yezh, hag ar saozneg evel eil yezh.

Goulenñ a reer ma vefe roet en unan eus ar skolioù Normal ur gelennadurezh dre ar c'hembraeg penn-da-benn. (3)

(1) Ofis ar skol, hag a zo ret hervez " Education Act " 1944, a zle bezañ e kembraeg pe e saozneg hervez al lec'h, pe tro-ha - tro e kembraeg hag e saozneg er pastelloù kemseek.

Ar gelennadurezh relijiel a vez roet e kembraeg pe e saozneg. ("The Future of Secondary Education in Wales", 1949, p. 53).

(2) An dezougen d'ar skol a zo ur gudenn a-bouez evit ar c'helioù.

(3) Re a vistri a zo e Kembre, ha re nebeut e Bro-Saoz. Ur gudenn lu-ziet-kenañ ha diaes da ziskoulmañ, met n'eus forzh penaos ne vefe nac'het mestr ebet gant ar Pennadurezhioù saoz en abeg d'e anaoudegezh eus ar c'hembraeg.

Kelennerezh an eil yezh. Un bern alioù a gaver er rannbennad-se diwar-benn kelennerezh an eil yezh, hag a dalvez, dreist-holl, evit ar c'hembraeg ken krefiv ez eo dre-holl levezon ar saozneg a-drugarez d'ar radio, d'ar pellwel hag d'ar c'helaouennoù. O vezañ ma'z int anavezet dija tamm pe damm gant va lennerien e venegin hepken un nebeudig anezho. (1)

Erbediñ a reer evel just implijout ar yezh e pep degouezh, er porzh, ar skol; dibab levrioù diouz doare ha oad ar skolidi; deskiñ frazennoù kentoc'h eget gerioù; deskiñ komz a-raok de - kiñ lenn. Darn eus sinerien an danevell a gondaon an troidigezhioù a varmont dinaturel.

Ar c'hentelioù kembraek skinet gant ar radio a zo daou seurt anezho: ar c'hentelioù war ar yezh hag ar c'hentelioù war an danveziou all. Levrioùigoù a vez embannet gant ar B.B.C. ha gou - lenn a reer studiañ ar c'hentelioù talvoudusañ a-raok ha goude ar skinadennoù.

Enklask . Amañ e tispleger dre ar munut ur roll-labour evit ar vistri a garfe studiañ an divyezhegezh er skol. Al labour a- vat a rankfe bezañ urzhiet, kenurzhiet ha skoazellet gant un Ensa- vatur bennak dezhañ live ar skol-veur. (2)

(1) Siwazh re hir e vefe adskrivañ an holl alioù roet diwar-benn al levrioù-skol saoznek hag al levrioù-gidusañ kembraek. Erbediñ a reer deskiñ d'ar vugale karout al levrioù. " Ujhevr mat a zo bet, en un doare ispisial, e-pad pell buhez hor broad; daoust m'hor eus paouezet da vezañ ur bobl dezhi ul levr hepken - mar domp bet ur wech bennak - hor skolioù lennet ganto da vezañ, n'eo ma vo sikouret hor bugale gant al levrioù lennet ganto da vezañ, n'eo ket hepken paotred ha merc'had mat, met ivez kembreiz vat, kurkoulz all." op.cit. p. 69, n° 336.

(2) Ezhomm a vefe eus kenlabour ar Skol-Veur, ar "Cyd-Bwyllgor Addyg" ("Welsh Joint Education Committee"), hag an Ensaevatur Bro- adel evit an Enklask war an Deskadurezh ("National Foundation for Educational Research") en deus pladet hepken betek-hen gant kudennoù all.

kendalc'h notenn 3 ar bajenn 8. Menozioù heñvel d'ar re displeget er memorandom meneget uheloc'h a c'helled lenn dindan sinatur Victor J. Jones er gelaouenn "Y Faner" gant an talbenn : "Cyfle i achub y Gymraeg", niv. eus ar 17.2.54 hag ar 24.2.54.

Ur skrivagnerez - unan eus ar re wellañ e Kembre - a damalle, n'eus ket pell, d'an divyezhegezh noazout d'ar c'hembraeg skrivet; ar skrivagnerien gembraek a anavez gwelloc'h ar saozneg. " Ha mar deo ar skrivagner re zizek pe re lezirek da grouñ ur stumm-skrivañ dezhañ penaos e c'hellfemp fiziout en e varnadennoù nag en e varregezh da grouñ un dra bennak, en e varregezh da brederiañ, mar kirit ? " Kate Roberts, " Y Faner ", 24.12.59

Emzalc'h ar Gannuiezh. Berzh ar Politikerezh divyezhek a vo diouzh an degemer a vo graet dezhañ gant ar gannu-
niezh: ar gerent, (4) ar vistri, pennadurezhioù an deskadurezh, Kenguzul an Deskadurezh (Welsh Joint Education Committee) (5), ha Ministrerezh an Deskadurezh (6). Ur galy ispisial a reer d'an holl veradurezhioù stad ha prevez evit ma taolint evezh ouzh ampartiz o danvez-implijidi war ar c'hembraeg ha nann hepken war war ar saozneg.
Meuleudi a roer d'ar Skol-Veur evit he labour war dachenn ar yezhoniezh hag al lennegezh kembraek en ur c'houlenn diganti digeriñ ur skola; hag a rafe gant ar c'hembraeg evel benveg-kelenn. (7)

C. DIFENN AR POLITIKEREZH - SE .

Sinerien an danevell " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " o deus rakwelet tammalloù enebourien an divyezhegezh " ofisiel" (8), anezho, hervez an danevell e-unan, unyezhegourien : ur rummad a-du gant ar saozneg hepken, hag ur rummad all hag a vefe a-du gant ar c'hembraeg hepken.

D'ar re gentañ e responder gant daou seurt arguzennoù : ar guzennoù kulturel hag arguzennoù pedagogel.

E, pennad V, " The Cultural Argument " , e tisleger holl sterioù ar ger Kultur, talvoudgezh ar C'hultur evit an den, an darrmpredoù etre ar c'hultur kembraek hag ar yezh. Diaes, hogos dic'hallus zoken, eo klask diverrañ seurt skridoù gant aon da zistummañ mezoù an aozer pe da dremen war arlivioù a-bouez.

Ur menoz hag a bouezer ar muiañ warnañ moarvat eo talvoudgezh buhezgezhel ar c'hultur, e dalvoudgezh e-keñver ar vuhez. (9) "Met goude bezañ sellet ouzh ar C'hultur war-un-dro evel un herezh hag ur striv war-du un uhelbal, ez eo dereat plediñ gant e roll hag e dalvoudgezh evel benveg. Er ster-se e c'heller gwelout er c'hultur n'eo ket hepken ur pal ennañ e-unan met un doare da virout ha da zistplegañ buhez oberiant ha sevenaet ar Gevredigezh denel hag ar brevizidi. Bus ar savboent-se ez eo posubl chom hep teurel evezh ouzh talvoudgezh klok pe diglok ur c'hultur bennak.

(4) Pouezañ a reer war " C'hembraeg ar gêr " ("Welsh of the hearth") evit berzh ar politikerezh. (Met re anat eo e vo emzalc'h tud ar bobl diouzh al lec'h a vo roet d'ar yezh er vuhez. A. ar C'h.)

(5) Gwel. paj. 1.

(6) Implijidi Departamant Kembraek Ministrerezh an Deskadurezh a rank gouzout Kembraeg.

(7) Favar Skolaj ("College") a zo e Skol-Veur Kembraek: reoù Aberystwyth - ar c'hoshañ - , Caerdydd, Abertawe, ha Bangor .

(8) A-ratozh-kaer ez implijan ar ger "Ofisiel", rak un doare all a zo da intent ar ger divyezhegezh.

(9) Pajemadoù dedennus diwar-benn an hevelep kudenn a vo lennet el levrig " The Curriculum and the Community in Wales " ha diwar-benn lec'h an istor hag an douaroniezh en deskadurezh.

Mar deo sellet ar C'hultur evel un doare evit ar bugel da blantañ en douar gwiriziennoù don ha magus, ez eo talvoudusoc'h gwelout, en ur c'hefver, pegen efedus her gra kentoc'h eget pegen pinvidik ez eo drezañ e-unan.... N'eus forzh pegen bihan ez eo al liorz eomp galvet da c'hounit, ne labouromp ket evit hon displegatur, nag hol le-venez, nag evit pinvidigezh ar broioù ouzh e lezel da vont e fraost dre hol leziregezh. (1) ha pelliñ'h " Mar domp hep gwirizioù n'omp ket troc'het hepken diouzh un andon a vuhez, met prest ez omp da gemmañ menoz hervez ar c'hiz pe hor froudennoù ".

Er pennad IV, "Bilingualism, some Psychological Considerations", ez eo studiet an divyezhegezh eus savboent ar psikologiezh hag ar pedagogiezh.

Galloud ar vugale da zeskiñ un sil yezh a vefe diouzh o barregezh personel hag ivez diouzh nerzh an aergelc'h. Hervez tud 'zo, ar bugel divyezhek a vefe skortoc'h e c'heriadur en e yezh c'henidik ha diwezhatoc'h ne c'hounezfe aezamant en ur yezh ne-met diwar goust eben. Hervez tud all, hag o deus bet aozet studiadennoù pizh e c'hellfe ar bugel kaout un anaoudegezh ken mat eus div yezh, (1) ha zoken eus 4 yezh, hag eus unan hepken. (2)

(1) op.cit. niv. 233, p. 50 : " But apart from being, at the same time a heritage and the pursuit of an ideal, it is appropriate to think of the functions, and of the instrumental value of culture. In this sense culture may be conceived not as an end in itself but as the means of maintaining and developing the active and civilised life of human society and of particular individuals. If culture is conceived as the means whereby a child can begin to send down deep and sustaining roots, it is more important in one respect to consider how efficacious it is doing so rather than how great or rich it may be in itself... No matter how limited and circumscribed may be the garden we are called upon to cultivate, it is no contribution either to our own development and our own joy, or to the wealth of nations to let it grow rank and foul by our disregard "

(2) Ronjat, J. "Le Développement du Langage observé chez un enfant bilingue", Champion, Paris, 1913. Al levr-se am boa apprestet e 1954 digant Levraoueg Rannvroel Friesland ha lennet pen-da-benn. Ronjat en doa eveshaet e-pad bloavezhioù ar gomz gant e vab, desavet, adalek e gavell, e galleg gant e dad hag en alamaneg gant e vamm.

(3) Castillejo! "Modern Languages in an International School", The new Era, 1953. "Skol g-Castillejo e Bro-Spagn a zegemere paotred ha mers-c'hed etre 3 ha 5 bloaz hag o c'helenne e spagnoleg, saozneg, galleg hag alamaneg. An holl skolidi a veze kenteliet bemdez en o yezh c'henidik hag e div yezh all d'an nebeutañ. Un nebeudig a vez degas - ket dezho 4 yezh. Ar vugale a zae eus tiez uhel; war-dro 15 skoliad, d'ar muiañ, a veze e pep klas hag ar roll-labour a oa bet krennet. Pep mestr a zlee implijout hepken e yezh er c'hlas, war ar porzh, er sal-debriñ. Diwar-se e kemere ar bugel ar c'helenner hag e yezh evit an hevelep tra, hag e tiwalle da veskañ yezhoù disheñvel... Ur paotrig a 5 bloaz n'helle ket lavarout d'e vamm pe saoznek pe c'hallek e oa ar c'hanaouennoù. Displegañ a rae evel-hen : setu hini ar mestr blev melen, ha setu hini ar mestr blev gell." op.cit. niv. 200, p. p. 42/43. (Doarvat e veze degemeret ar vugale etre 3 ha 5 bloaz hag e kendalc'hent meur a vloavezh gant o studioù tri pe bevaryezhek. Kas- set da skolioù all war-dro 6 ha 7 vloaz o defe ankounac'haet buan ar yezhoù desket betek neuze en tu-nont d'o yezh c'henidik. A. ar C'h.)

N'eus forzh penaos da l'c vloaz ur bugel reizh divyezher en deus tizhet en e yezh c'henedik, da nebeutañ, geriadur ur bugel reizh unyezher; ouzhpenn, boas e vo da zispartiañ ur menoz diouzh ar ger - pezh a zo dic'hallus da galz a dud - hag aezamant en devo da zeskiñ yezhoù estren.

Hag a-zivout diorradur-spered ar vugale ez eo ar furañ lavarout n'e deus an divyezhegezh ul levezon na mat na fall warnañ. War ar pcent-se ez eus dizunvaniezh vras e-touezh ar glaskerien o deus studiet ar gudenn.(1)

Setu evit ar re a gondaon an divyezhegezh en anv ar psikologiezh pedagogel pe war zigarez n'eus ken ezhomm eus ar c'hembraeg.(2)

Ur rummad tud all, an danevell ne ro anv ebet dezho, a gondaon an divyezhegezh en anv ar c'hembraeg. " Talvoudegezh ar c'hembraeg diwar an divyezhegezh-se a zo ken izel ma ne dalv ket ar boan klaek d' saveteiñ ar yezh. Ur politikerezh divyezhek a vo ur politikerezh saoznekaat hag a seuiio a-benn da beurlazhañ ar c'hembraeg. Ar politikerezh reizh, emezo, a zo ober gant ar c'hembraeg un danvez ret evit an holl. " An danvez kentañ evit ur bugel e Kembre a zlefe bezañ ar c'hembraeg, zoken ha pa ne vefe ket a orin kembreat.(3)

(1) op.cit.niv.218 ,p.48.

(2) " a dying language " e-giz ma lavare din ur saoz eus Prestatyn, Sir Y Fflint .

(3) op.cit.p.52.niv.247. Ar frazenn-se a zo lakaet etre kloc'hoù en danevell. Dav eo teurel evezh e lavar : " the first compulsory subject " (an danvez ret kentañ) ha nann : " the only compulsory subject " (an danvez ret nemetañ) .

Tennet eo bet moarvat eus ur memorandum kaset d'ar strollad-enklask gant ar Gostezenn Vroadel (" Y Blaid Genedlaethol Cymru "), rannbennad niv.52,p.22. Pelloc'h e tispleg ar Gostezenn Vroadel e menoz diwar-benn an divyezhegezh. " Diouzh ar pajennoù a-raok ez eo sklaer n'emaomp ket a-du gant ur politikerezh divyezhek da badout, met kentoc'h a-du gant ur politikerezh diyezhek da c'hortoz e-sell da adkrouiñ, an abretañ ma vo gallet, un unyezhegezh kembraek e Kembre a-bezh, gant ar saozneg evel eil yezh, e-giz ar galleg e Flandrez hag an eil yezh er c'hantonioù helvetiat. Ar sistemoù divyezhek-se a zo disheñvel diouzh an hini a glasker tizhout e Kembre hag a laka pep den ken barrek war ar saozneg ha war ar c'hembraeg. (op.cit.p.25,niv.55)

Ur menoz damheñvel ouzh hini aozerien an danevell "The Place of Welsh an English in the Schools of Wales" a gaver en ul levrig embannet gant Kenlabour renerien "Y Blaid" 1956. "Dominion kembre en devo div yezh, dezho gwirioù kevatal. N'hell ket bezañ keloù eus dilezel ar c'hembraeg, ha n'hell ket bezañ keloù eus dilezel ar saozneg. Bez' ez eo yezh naturel ul lodenn vat eus hor pobl hag a vefe diaezet ma vefe ret dezhi implij ur yezh ha n'eo ket nec'h hini. Hep he skoazell n'hellfe gouarnamant kembreat ebet seveniñ e labour. Pep kembread a vo dieub da gomz ar yezh dibabet gantañ ha da skoliata e vugale er yezh-se." " Our Three Nations: Wales, Scotland, England." p.p.33-34, embannet gant Plaid Cymru, The Scottish National Party, The Common Wealth Party .

Lenn kendalc'h an notenn-mañ war ar bajenn 5.

- 8 -

An danevell a respont gant teir arguzenn hag a zo pell diouzh kaout an hevelep talvoudegezh.

1- Un arguzenn douaroniel : re dost eo Kembre da Vro-Saoz evit argas pep levezon.

2- Un arguzenn gulturel : al levezonioù a ra o reuz e Kembre n'int ket holl saoz ; bez' ez eus ivez reoù ar c'hultur bedel, hag ar saozneg a zo ur yezh vedel.

3- Ret eo dreist-holl implij ar yezh c'henedik e-pad bloavezhioù kentañ ar skol, ha setu aze an arguzenn bedagogel .(1)

Klozañ a ra ar pennad V gant un arguzenn all ouzhpennidgemeret fall e vefe gant al lodenn vrasañ eus ar bobl an skolioù kembraek unyezhek.(2)

Gwir eo ez anzav sklaer an danevell ez eo re vras levezon ar c'hembraeg e Kembre hag ez eus daou riskl bras: ne vefe anavezet kulturioù ar pobloù all nemet dre hanterezh ar saozneg hepken hag e vefe mouget tamm-ha-tamm ar c'hultur kembraek gant an hini saoznek.(3) Anzav a ra ouzhpenn ne vo ket roet d'ar c'hembraeg al lec'h a zo dleet dezhañ er c'hantonioù hag er speredoù nemet pa vo roet dezhañ ul lec'h kevatal da hini ar saozneg er vuhez politikel ha kevredigezhel.(4)

(1) op.cit.p.52.niv.248. Danevell "Y Blaid" a zispleg kement-mañ: " An desavadurourien a lavar ez eo talvoudus kelenn ar bugel en e 'vammyezh' (mother tongue) . Touellus eo komz eus ar 'vammyezh' en degouezh-se evel pa vefe kaoz hepken eus ar yezh komzet gant an hinienn a zo e vamm. Ar 'vammyezh' a zo kalz brasoc'h eget yezh ar vamm; enni e kaver holl skiant-prenañ dastumet a-stroll pe hini-ha-hini gant gouern ha broad ar bugel". op.cit.p.p.22.23 niv.54.

(2) Ar spered a oportunouriezh ne ra ket diouer da zanves-kannaded "Y Blaid" evel m'hen anata ar diskleriadur-mañ: " Hon politikerezh-ni a zo ober gant ar c'hembraeg hag ar saozneg yezhoù ofisiel ha deskiñ an div yezh peurvat da holl vugale Kembre. " Mr Iowan Bowen Rees, danvez-kannad e kerc'hiad-votih Conwy. (" Y Faner", 1.10.59) Moarvat ne vefe ket dislavaret gant hini ebet eus sinerien an danevell ofisiel a studiomp.

(3) op.cit.p.51.niv.240.

(4) op.cit.p.p.52.53.niv.249.

kendalc'h notennoù ar bajenn 10.

(6) E 1956, e kontelezh Ceredigion e tibabas 138 skoliad ar saozneg evel yezh ; ha 132 a tibabas ar c'hembraeg. Pezh a lakae ar Benadur Lewis da lavarout e tlefe ar Poellgor taerast e politikerezh yezhel, zoken ha pa c'hwitfe."

An Dr Henry Jones, Rener an Deskadurezh, a lavaras e oa ar c'hembraeg yezh naturel ar vugale. Kement-se a oa anat diouzh o stumm-skriavañ.

(Dic'hallus eo din reiñ lec'h an arroudeun-se. Va leunerien va digarero .)

- 9 -

D . STAD AR YEZH ER SKOLIOU.

Stad ar yezh er skolioù a zo displeget er Pennad III ha dre gartennoù ha taolennoù embarnet e-giz stagadennoù.(1)

- Politikerezh^{ioù} ar c'hontelezhioù er skolioù izel a zo pevar anezho:
- 1° tamm kembraeg ebet .
 - 2° ar c'hembraeg a vez kelennet mar bez gouennet gant un niver bras a-walc'h a skolidi.(2)
 - 3° kembraeg kelennet d'an holl skolidi a asant .E-pad 10 vloaz ez eo bet kelennet en holl skolioù Caerdydd nemet pemp ha da 60 % eus ar skolidi. (3)
 - 4° ul lec'h kevatal d'an div yezh.(4)

Arnodenn-antren er skol-etre. E Breizh-Veur e rank ar vugale tremen un arnodenn a-raok mont d'ar skol-etre.Ar re a vez kavet barrek a ya d'ar " Grammar school ",hag ar re all d'ar skol-etre modern. (5)

Un dra diveizus d'un den a zo kustum d'ober gant doareoù ar stad c'hall eo gwelout en deus hogos pep kontelezh e arnodenn dezhañ.Henket eo bet an arnodennoù dishervel-se e pemp rummad gant aozerien an danevell :

- 1° Ar pennadurezhioù a implij arnodennoù heñvel ouzh re Vro-Saoz, hep tamm kembraeg:kêr Caerdydd,Kêr Casnewydd ha kontelezh Maesyfed.
- 2° Pennadurezh kêr Abertawe a varn diwar an notennoù bet er skol hag an têstoù tremenet da 7,9 hag 11 vloaz e saozneg hag e kembraeg.
- 3° Seizh kontelezh :Merionydd,Dinbych,Caerfyrddin,Môn,Penfro, ha Morgannwg a embann holl destennoù an arnodennoù e kembraeg hag e saozneg.(6) Ret e vez ouzhpenn,e darn anezho,respont da c'houlennou en eil yezh evit kaout an notenn uhelañ.

E kontelezh Brycheiniog ne vez ket a baperennoù kembraek evit ar jedoniezh.

- (1) Appendix I.Maps:unan evit pep kontelezh (p.p.75-89) gant un daolenn vras embarnet evit Kembre a-bezh.
- Appendix II.Tables of statistics (p.p.90-102)
- (2) An danevell a ra un evezhiadenn verr met reizh-kenañ:pennadurezh an deskadurezh n'emañ ket en e garg hepken pourveziñ met ivez stummañ. ("the authority should be not merely a 'providing' but also an 'educational' body".) op.cit.p.32,niv.146.
- (3) Hener an deskadurezh en ur kontelezh bennak en doa skrivet en e zanevell kement-mañ:"Ober gant un danvez bennak un danvez da zibab a zegas d'e heul,er skolioù izel da vihanañ,un dañjer bras:aellat e vo outañ evel ouzh un dra a eil renk hag a vez argaset eus ar roll - labour gant traoù all pouezusoc'h ." (op.cit.p.33,niv.151)
- (4) Pelloc'h hor bo tro da zisplegañ al labour urzhiet-mat prientet e kontelezhioù Caernarfon,en hanternoz,hag e Morgannwg,er c'hreisteiz.
- (5) Ar skolidi a zibab mont d'ar skolaj teknikel a chom ur bloavezh ouzhpenn er skol izel evit prientiñ o arnodenn. Dres evel e kalz a zepartamantoù e Breizh hag e Bro-C'hall.

kendalc'h an notennoù war ar bajenn 9.

- 4° Kontelezh Caernarfon a c'houlenn respontoù en div yezh evit bezañ degemeret.Ar saoznegerien nevez deguezhet er vro hepken a vez diskarget eus ar boelladenn kembraek.
- 5° E kontelezh Y Fflint hag e hini Ceredigion e vez roet poentoù ouzhpenn d'ar re a ra ar poelladennoù kembraek,poentoù hag a c'hell o skoa-zellañ da vezañ degemeret.

Statistikoù diwar-benn yezh ar skolidi etre 5 ha 19 vloaz.

E miz mezheven 1950 e oa bet kaset ur c'houlennadenn d'an holl skolioù,rannet evel-hen : (1)

- A - Rannadur ar skolidi hervez ar yezh .
- 1- darempredoù etre yezh ar gerent ha hini ar vugale .(Ar yezh kentañ amañ eo an hini anavezet ar gwellañ gant ar skolidi.)
 - 2- anaoudegezh ar vugale eus an div yezh . (2)

B - Politikerezh Yezhel ar skolioù.

Dacust ma oa bet esaset ar c'houlennadenn,ha kemmet zoken war-lerc'h un taol-arnod, e chome diaes evit meur a abeg :

- 1-ar c'houlennadenn a rekisa kalz a evezh hag a amzer a-berzh ar vistri.
- 2-respontoù ar vistri a zo alies subjektivek .
- 3-n'ouzer ket bep tro peseurt kentelioù tennañ eus an niveroù.

Dacust da se ez eo talvoudus an enklask dre ma kinnig memes tra un diaez e c'heller labourat warnañ.Ha setu amañ an div daolenn a zo bet savet diwarno,gant un nebeut evezhiadennoù.

- (1) op.cit.Appendix III,p.p.103/105
- (2) Setu amañ doare an daolenn a oa da leuniañ.

oad.	Skolidi savet e Kembraeg.				hollad	Skolidi savet e Saozneg.				HOLLAD BRAS .
	A	B	C	D		A	B	C	D	
4.5										
5.6										
6.7.										
7.8										
(...)										
16.17										
17.18										
Hollad										

- A = niver ar skolidi n'o deus anaoudegezh ebet eus an eil yezh.
 B = niver ar skolidi a zo barrek da gompren an eil yezh hepken.
 C = niver ar skolidi a zo barrek da gompren kentelioù e'n en eil yezh diwar-benn an istor,an douaroniezoù pe studi an natur,ha da zivi-zout un tammig en eil yezh.
 D = niver ar skolidi a gomz fraez an eil yezh.

KARTENN AR C'HONTELEZHILOU.
hag un nebeut kêrioù .



Tablenn I. (savet diwar al lodenn A 2 eus an Enklask.)
Niver ar vugale etre 5 ha 15 vloaz er skolioù-izel hag er skolioù-
etre hag a zo barrek da gomz ar yezh.

Pennadurezh	niver ar skolidi	kembraegerien . A B C D kemb. + C D saoz.	dregantad.	eil dregantad. A B C D kemb. + D saoz.hepken.
Anglesey	6 668	5 650	84,8 %	79,1 %
Breconshire	6 926	1 624	23,4 %	17,9
Caernarvons	15 065	12 163	80,7 %	74
Cardigans.	6 755	5 521	81,6	76,1
Carmarthen.	20 754	14 466	69,7	62,1
Denbighsh.	22 178	6 803	30,7	24,8
Glamorgan	92 065	9 566	10,4	7,2
Merioneth	4 801	4 288	89,1	83,1
Monmouths.	43 249	344	0,8	0,2
Montgomery.	6 039	1 662	27,8	24,6
Pembroksh.	2 720	2 632	22,1	20,5
Radnorshire	11 935	38	1,4	1,2
Cardiff	30 754	498	1,6	0,4
Merthyr	8 265	209	2,5	1,6
Newport	12 426	9	0,1	0,1
Swansea	19 755	1 816	9,2	4,5
hollad:	329 408	69 275	21,0	17,7 (1)

Setu aman un nebeut statistikoù evit ar c'hontelezhioù o deus dal-
c'het d'ar yezh ar gwellañ.

	Anglesey	Caernarvonshire	Cardiganshire.
1936	88 %	1934 81 %	1932 85 %
1950	85	1950 81	1950 82

Aet eo avat niver ar gembraegerien yaouank war goazhañ e Carmar-
thenshire, 84 % e 1936 ; e Denbighshire, 38 % e 1935 ; e Pembrokeshire,
48 % e 1927.

Er pastelloù ijinerzhel ez eo diskennet ar muiañ. E derou
ar c'hantved e komze an holl kembraeg e Merthyr (9 % e 1924; 1;6 %
e 1950) hag er Rhondda Valleys (15 % e 1928, 7 % e 1937, 3 % e 1942.)

Tablenn II .

Skolidi etre 5 ha 15 vloaz renket hervez an darempred a zo etre o
yezh kentañ hag an hini a zo komzet gant o c'herent .

oad	skolidi dezho kerent kembraegerien	skolidi dezho un tad kembraeger.	skolidi dezho ur vamm kembraeger.
5-6	75,5 %	7,9 %	14,8 %
6-7	73,9	6,0	13,9
7-8	72,4	5,7	10,6
9-10	71,5	4,9	10,9
10-11	67,7	4,4	8,3
11-12	68,6	5,8	9,0
12-13	66,7	7,3	10,1
13-14	67,1	7,2	10,3
14-15	67,9	6,4	8,7
en holl :	- 70,0	6,1	10,5 (1)

(1) op.cit.p.p.56.58

Un nebeut evezhiadennoù diwar-benn an daolenn II.

- 1 - re anat eo pegen talvoudus eo d'an tad ha d'ar vamm bezañ kembraegerien ;
- 2 - muioc'h a gembraegerien a-vihanik a gaver pa vez ar vamm ur gembraegeriz ,met padusoc'h eo levezon an tad ;
- 3-- dre ma kosha ar bugel e tigresk levezon ar gêr hag e kresk hini an diavaez.N'eo ket d'ar skol hepken e c'heller,bremañ da vihanañ,tamall koazhadur ar yezh .

An daolennig-mañ a ziskouezo nerzh an aergelc'h :

Kontelezh	Dregantad ar skolidi a zo ar c'hembraeg o yezh kentañ o tont eus tiegezhioù e-lec'h ma komz		
	tad ha mamm ar yezh :	tad hepken	mamm hepken.
Kembre	70 %	6 %	11 %
Merioneth	96	19	43
Caernarvonshire	91	20	39
Glamorgan	42	4	7

Bugale Merioneth ,dezhio ur vamm gembraegeriz hepken,o deus kement a chañs da zeskiñ ar yezh ha bugale Glamorgan (Morgannwg) dezho un tad hag ur vamm kembraegerien !

Derez an divyezhegezh gant ar skolidi etre 5 ha 15 vloaz .

Ar gembraegerien a zesk kalz gwelloc'h an eil yezh eget ar saoznegerien .Setu amañ war-lerc'h an dregantadoù evit

oad	ar gembraegerien a-vihanik :		evit ar saoznegerien :	
	unyezhek	divyezhek (D)	unyezhek	divyez.
5-6	43 %	21 %	90 %	1 %
11-12	1 %	82 %	70 %	4 %
Ha setu bremañ an dregantadoù evit div gontelezh e-keñver an divyezhegezh :				
Kembre	5-6	21 %		1 %
	11-12	82 %		4 %
Caern	5-6	13 %		4 %
	11-12	76 %		32 % (1)
Glam.	5-6	48 %		1 %
	11-12	81 %		3 % (2)

An daolennoù a-us a ziskouez splann pelec'h amañ ar gudenn : kelenn ha deskiñ ar c'hembraeg evel eil yezh d'ar saoznegerien,ha pegen aes eo hen ober en ur gontelezh gembraek evel hini g-Caernarfon .

- (1) 53 % gant ar rummad C ,rummad ar skolidi barrek da heuliañ kentelioù aes en eil yezh .
- (2) 4 % hepken gant ar rummad C.

III . LABOUR UN NEBEUT KONTELEZHIOÙ.

An danevell ofisiel,hir,klok,resis,hon eus studiet e-doug ar pennadoù a-raok aas bet sevenet etre miz du 1949 ha miz du 1951,kaset d'ar C'hentañ Ministr da geñver gouel St Dewi e 1952 - lañ a viz meurzh - hag embannet e 1953.

Er pennadoù da heul am befe c'hoant da sellout a-dost ouzh labour un nebeut kontelezhioù hag a zo en gwirionez e beg ar stourm evit ar C'hembraeg ar Skol.

War-un-dro e vo gwelet penaos ez eus bet klaeket lakaat da dalvezout menozioù hag alioù " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " etre 1952 ha 1959,dreist-holl war dachenn ar skolioù izel.

A. KONTELEZH CAERNARFON .

Kregiñ a rin gant Kontelezh Caernarfon dre ma 'z eo unan eus ar re embraekañ ,dre ma'z eo gourdrouzet gant lanv ar Saozneg (1), ha dre ma stourm Pennadurezh an Deskadurezh en un doare speredek ha pennek.

Stad ar Yezh . An niveradegoù ofisiel a ro ar sifroù-mañ :

- e 1944 , 74,6 % a oa barrek da gomz kembraeg ;
- e 1948 , 73,3 % a gomz kembraeg er gêr,er skol pe er porzh-c'hoari,
- e 1952 , 77,2 % a gomz pe a gompren kembraeg .

Evit daco abeg e chom uhel niver ar gembraegerien :
 1° politikerezh divyezhek efedus ar skol ,
 2° ar vuhez relijiel ha kulturel war ar maez hag er c'harioù a zo diazezet war ar c'hembraeg :chapelioù,ilizoù ,eisteddfod-où, c'hoariva ha kevredigezhioù lennegel ,kluboù yaouankiz ha skolioù-noz,lec'hioù-labcur .

Met evit kompren pegen kalet ez eo ar stourm ha pegen kreñv nerzh ar saozneg,ez eo a-walc'h ober ur sell ouzh stad ar yezh e kêr Bangor .En ur skol dezhi war-dro 150 skoliad : (2)

- (1) Gwelout an daolenn pajenn a gomz drezi hec'h-unan .
- (2) Tennet eus ur pennad embannet gant Y FANER ,9.1.58 ,ha sinet gant an Ao.H.Parry Jones .
 Lavarout a ra c'hoazh:" Gwanidigezh ar saozneg a ya war-un-dro gant gwanidigezh ar c'hembraeg."

11 a gomz ar yezh ,
40 a zo barrek d'he c'hompren madik a-walc'h ,
68 a gompren un tammig ,
34 tamm ebet .

173 (1)

32 o deus kerent , tad ha mamm, saoznegerien ,
20 a ya d'ar skol-sul kembraek ,
58 d'an hini saoznek . (2)

Ar Skolioù Kembraek Kozh . Pa gomzer eus Skolioù Kembraek e soñjer
ataw er Skolioù Kembraek Nevez digoret abaoe
1947 er c'hornbroioù soaznekaet.

Arabab ankounac'haat evit-se talvoude-
gezh ar Skolioù Kembraek Kozh hag o deus kenlabouret da virout ar yezh
er c'hontelezhioù kembraek ha diazezet tamm-ha-tamm ar c'helenneriezh
dre ar c'hembraeg. "N'eus ket meuleudi re vras evit ar skolioù-se hag
o deus difraoetet an dachenn" . (3)

Niver ar skolioù .

E 1948 e oa snezho 105, hag, e 1952, 112. Ar c'hresk-se a zo dleet
d'un diforc'h e termenadur ar yezh c'henedik. E 1948 e selled evel
kembraeger ar bugel a gomze mat ar yezh; e 1952, an hini a gompren ar
yezh. (4)

"Pehini eo yezh c'henedik ur bugel hag a gomz saozneg gant e
vamm, ha pa gomz-hi kembraeg gant an tad ha tud all ar familh? Ar vu-
gale-se a zeu d'ar skol etre 4 ha 5 vloaz, hep bezañ barrek, war a se-
blant, da gomz kembraeg, ha setu perak e vezont sellet evel saoznegerien
umyezhek. Fall eo kement-se rak distagañ a ra ar bugel diouzh aergelc'h
kulturel ha relijiel an tiegezh, distrujañ ar yezh er c'horn-bro
ha mirout outañ da genlabourat diwezhatoc'h a-du gant ar vuhez kembre-
st." (5)

Bez' e oa etre 1948 ha 1950

12 031 skoliad, dezho kerent kembraegerien ,
1 737 skoliad, dezho un tad kembraeger ,
1 236 skoliad, dezho ur vamm kembraeger ;

war-dro 80 ha 100 % a gembraegerien a oa er skolioù-se . (6)

"An holl vistri a zo kembraegerien hag ar saoz-
negerien vihan hag a bleustr ar skolioù-se a vez kelennet an o yezh
ken n'o devez deket a-walc'h a gembraeg evit heuliañ ar c'hentelioù!"
(7)

(1) an hollad ne ro ket 150, met 173: darn a zo bet niverennet div wech
moarvat .

(2) Ar skol-sul a zo ar c'hatekiz . Ar re all n'eont ket d'ar c'hate-
kiz, moarvat ; er skol e vez roet d'ar holl - nemet ha diskarg a
vefe bet goulennet gant ar gerent - ur selennadurezh relijiel dia-
zezet ledan degemeret gant an holl ilizoù nemet gant an hini gato-
lik .

(3) "The Place of Welsh..." p. 34, niv. 154.

(4) "Third Language Survey" p. 9

(5) id. p. 13. (6) id. p. 5. (7) id. p. 10 pe 11 (divyezhek eo al levr)

(2) Levezon ar skol-sul war ar yezh a zo bet bras meurbet en 19et
hag e deroù an 20et kantved . Deket e veze d'ar re yaouank lenn o yezh
e levr ar Bibl . An droidigezh a oa flour ha degemeret dre ar vro a-
bezh .

- 16 -

Danvezioù kelennet . (1)

Dre ar c'hembraeg .

Infant school : jediñ, lenn, skrivañ,
labourioù-dorn, kanañ, displegañ kontadennoù .
"Ar vugale a zesk komz gant aezamant ha plijadur
o yezh c'henedik" .

Junior school : studi ar yezh hag al lennegezh,
douaroniezh, skiantoù naturel, labourioù-dorn, acne-
rezh, relijion.
"Ar vugale a zesk skrivañ o yezh en un doare reizh
ha gant fiziañ" .

Dre ar saozneg .

Infant school : rimadelloù ha kanaouennoù, gwech an amzer .

Junior school : kelennerezh ar saozneg eun;
eus 7 da 9 vloaz: komz, lenn ha skrivañ ;
eus 9 da 11 vloaz : saozneg evit ar jedoniezh;
an div yezh evit an embregerezh-korf
ha douaroniezh ar bed .

"Labour vat-kenañ a vez graet er skolioù-se dre an div yezh ha neo
ket souezhus o defe dedennet gweladennerien eus ar broioù estren e-
doug ar bloavezhioù diwezhañ . E 1951 e oant deuet eus Hongkong, ar
Gold Coast (Ghana, bremañ), Pakistan, India, Nova Scotia (Kanade), Ougan-
da, Jamaika, Malaya, Su-Afrika, an Enezenn Vaez hag Iwerzhon" . (2)

Ar Skolioù Kembraek Divyezhek . 22 skol a zo er rummad-se: 7 ne-
beutoc'h eget a-raok en abeg d'an doare nevez da niveriñ ar gembrae-
gerien. Bez' ez eus etre 30 ha 80 % a gembraegerien enno .

Ar skolidi a vez dispartiet hervez ar yezh evit an holl gen-
telioù pe hepken evit ar c'hentelioù kembraek. Deut e vezer a-benn da
seveniñ labour vat war dachenn ar yezh, zoken pa vez bihanoc'h niver
ar gembraegerien ha daoust ma vez trec'h ar saozneg er c'hoarioù. (3)

Ar Skolioù Saoznek Divyezhek .

Er skolioù-mañ, 16 snezho, ez eus enno
etre 0 ha 30 % a gembraegerien . Darn anezho a zisparti ar skolidi her-
vez ar yezh, pe hepken evit ar c'hentelioù kembraek pa vez implijet ar
saozneg evel benveg-kelenn.

Gwellat eo bet kelennerezh an eil yezh, met
daoust da se n'eo ket ken barrek skolidi an arvor war an eil yezh ha
reoù ar maezioù.

Ar gerent n'emañ ket enep ar c'hembraeg en abeg
d'al lec'h nevez roet dezhañ en arnodenn-mont er skolioù-stre hag
e-touezh danvezioù ret ar skolioù-stre . (4)

(1) op.cit. p. p. 8/11 (2) op.cit. p. p. 10/11

(3) An danevell venegat a displeg e teak ar c'hembraeger bihan o'hoari
e saozneg en ur ober 15 deiz, ha goulenn a ra ma vefe implijet ar
c'hoarioù evit kembraekaat ar saoznegerien vihan dre implij er gari-
adur darbaet ganti er pajennoù 46, 47 ha 48 . (op.cit. p. 12 pe 13)

(4) op.cit. 13.15.

- 17 -

Kelennerezh an Eil Yezh ; arnodenn ar Skol-Etre.

E Kontelezh Caernarfon ez eo ret ac'zañ poelladennoù en div yezh en arnodenn-antren er skol-etre .
 Daou rummad "paperennoù" a vez (1) , hervez ar yezh pen-
 nañ dibabet . Er yezh c'henedik e vez ret respont d'un nebeut goulennoù
 hag ac'zañ un danevell goulennoù en eil yezh a vez diazezet war ur
 roll-gerioù embannet gant Pennadurezh an Deskadurezh. (2)

Kembraeg.		Saozneg .		
lodenn gentañ	266 ger	Evit skolidi { dindan { 12 vloaz .	lodenn gentañ	222
eil lodenn	309		eil lodenn	226
	575		trede lodenn	337
				785
trede lodenn	247	Evit skolidi { 12 vloaz { pe goshoc'h .	pevare lodenn	251
	522			

Ar goulennoù e kembraeg a vez diazezet war al lodennoù 1 ha 2
 eus ar seriadur eun hag ar goulennoù e saozneg war al lodennoù 1, 2, 3.
 Ar skolidi a vez rasket evit ar c'hembraeg hepken a dremen ouz-
 penn un arnodenn dre gomz . (4)

Ar gudenn a seblant bezañ kenderc'hel gant ul la-
 bour bouc'het ken mat er skolioù izel ... Un nebeut klemmoù a lenner
 en ul levrig divyezhek embannet e giz respont d'ur c'helic'hliher kaset
 e 1942 gant Departamant Kembraeg an Deskadurezh: " Awgrymiadau Athrawon
 Sir Gaernarfon - Suggestions on Language Teaching in Caernarvonshire ".
 "Kustum e vezer da sonjal ez eo bet krouet ar skolioù-izel evit darbar
 studierien d'ar skolioù-gramadeg daoust ma ne dint ket pleustret gant
 al lodenn vrasañ anezho ." Ha pelloc'h c'hoazh : " E tro-war-droioù ar
 c'hêrioù e vez ar saozneg alies ar yezh gentañ hag ar c'hembraeg a vez
 kelennet evel eil yezh . Labour vat er c'hevvar-se a zo bet sevenet din-
 dan renerezh akuit an Dimezell Jennie Thomas . Ret eo eta ma vefe ken-
 dalc'het er skolioù-etre gant al labour vat bouc'het er skolioù izel".
 (5)

- (1) Anvet e vez "paperenn" (paper e saozneg ha papur e kembraeg) ur
 follennad-boelladennoù evit an arnodenn .
 Abaoe 1950 e heulier ar reolennoù-se . op.cit.28 pe 29.
- (2) op.cit.p.p.65/80.
 Er "Brezhoneg Eün" ez eus 1 502 ger , mouladur Brest 1942.
 Siwazh ! n'eo ket stank e Breizh ar re o deus maizet talvoudgezh an
 oberenn-se evit kelenn ar yezh .
- (3) op.cit.p.p. 18/19 ha 20/21 .
 An danevell ha na zoug bloavezhiañ ebet, a oa bet azoet gant
 tri ezel eus "Undeb Cenedlaethol yr Athrawon" (Unvaniezh Vroadel
 ar Vistri) .
- (4) E 1951 e teue al lodenn vrasañ anezho eus "skolioù prevez", op.cit.
 p.28 pe 29. (Skolioù katolik, moarvat , anezho div : Skol Santez He-
 len e Caernarfon , 62 % a gembraegerien e 1950 ; ha hini Bangor, 0 %
 a gembraegerien .

B. KER CAERDYDD .

Goude bezañ sutdied ar gudenn e Kontelezh Caernarfon e tis-
 kennimp betek penn all ar vro, betek Kontelezh Morgannwg. Kregiñ a ra-
 imp gant Caerdydd, ar gêr-benn . (1)

Niver ar Gembraegerien a-vihanik. E kêr Caerdydd ez eus war-dro
 250 000 a dud, en o zouezh 25 000
 a gembraegerien. Diwar 30 754 skoliad etre 5 ha 15 vloaz, e oa sellet
 hepken 73 anezho evel gembraegerien a-vihanik, ha c'hoazh en em ga-
 ve 64 anezho en ur skol izel, ar skol gembraeg, moarvat . (2). Pezh a ra
 0,24 % hepken .

Kelennerezh ar Yezh . Ar c'hembraeg a vez kelennet evel danvez diret,
 gant aotre-dre-akrid ar gerent, da 80 % eus ar
 skolidi .

Junior schools . D'an nebeutañ 4 c'hentel a 30 mn bep sizhun; ar
 pal a zo ur gentel bemdeiz . (3)

N'eus ket a gembraeg en arnodenn saoznek ar
 "scholarship examination" (arnodenn-antren er skol-etre), mat tu
 a zo da dremen an arnodenn e kembraeg penn-da-benn .

Er Secondary Modern Schools , anezho 24 , e vez roet 4 c'hentel a 45 mn
 bep sizhun , pe 3 eurvezh .
 Klask a reer en em glevout gant Pennadu-
 rezh Morgannwg evit digeriñ ur skol-etre gembraeg .

En dek Secondary Grammar Schools ez eo ar rener a ziviz . En 8 anezho
 e-pad ar bloavezh gentañ, ha zoken e-pad an daou vloavezh gentañ e
 wechoù .

Kudenn ar gelennerien . E 1956 e oa 46 mestr gouestlet hepken da ke-
 lennerezh ar c'hembraeg . Gounidoù a zo oc'h
 implijout spesialisted pe arbennigourien : tantanet e vezont , anavezout
 a reont o danvez , gouzout a reont kelenn un eil yezh ha morse ne
 vez dilezet ar gentel gembraeg evit unan all .

Di-houidoù ivez : ar c'hembraeg a vez peur-
 vuiañ bevennet en eurvezhoù gouestlet dezhañ ha netra ken, daoust ma
 'z eus ivez : mistri hag a-car a-walc'h ar yezh evit hec'h implij
 tamm pe damm .

(1) Caerdydd a zo abaoe un nebeut bloavezhioù kêr-benn Kembre .
 Danvez ar pennadig-mañ a zo bet roet din , e deroù gwengolo 1956 ,
 e-kerz un interview gant an Ao. Philipps, eñ-unan, eil-rener an deska-
 durezh ha karget eus kelennerezh ar c'hembraeg .

(2) " The Place of Welsh" p.96.

(3) 30 mn . 6 = 3 eur . E Kembre n'eo ket anavezet ehan-akol ar yaou !
 Ur wech ma oan o vale e Caerdydd gant sekretour an U.O.A.O. e
 oa bet lakaet dezhañ ur baperenn tell-gastiz en e garr-tan . Pa oa o
 loc'hañ e tostaas ar poliser da lavarout dezhañ : " Ma daolit ket e-
 vezh ouzh ar baperenn-se... Gwechall hoc'h eus bet kelennet din ar
 c'hembraeg !" - 19 -

C. KONTELEZH MORGANNWG .

En danevell " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales," veuler al labour embreget e Kontelezh Morgannwg - a zo saoznekaet-mat - evit adc'hounit tamm-ha-tamm an tachennou kollet gant ar yezh : hadañ er c'halonou ar c'hoant da zeskiñ ar yezh, sikour ar skolidi a gompren ar yezh d'he c'homz ha reiñ ur gelennadurezh kembraek d'ar gembraegerien .(1)

E Kontelezh Morgannwg e oa e miz eost 1956 :(2)

- 12 skol gembraek kozh, dezho ur "Junior Department" kembraek ;
- 9 skol gembraek nevez (3) ;
- 1 gevrenn gembraek klok ,anvet e saozneg ar "Welsh Stream ";
- 35 kevrenn kembraek evit ul lodenn eus ar gelennadurezh (partial Welsh Streaming) (4) ;
- 3 c'hlas kembraek dindan velli rener ur skol saoznek .

Da 3 000 skoliad,pe war-dro,e veze roet ur gelennadurezh dre ar c'hembraeg .

Politikerezh yezhel Morgannwg a zo anavezet-mat dre m'he deus embannet e c'hwevrer 1949 ul levrig d'he displegañ : " The Teaching of Welsh as a second Language in Primary Schools - Dysgu Cymraeg fel ail iaith newn Ysgolion cynradd " .

Respont a ra dro ar munud d'un nebeut goulennoù a c'hellfe kregiñ gant ar gerioù-mañ : PERAK ? PEGOULZ ? PENAOS ? PIV ? PELEG'H

PERAK ? Ar c'hentañ tra d'ober a zo gounit ar vistri-skol,ar skolidi hag o c'herent ;setu perak e tigor al levrig gant un nebeut prederiadennou diwar-benn talvoudegezh ar c'hembraeg .(5)

Talvoudegezh kulturel da gentañ,evel just :

- 1° ret evit kompren istor ha douaroniezh Kembre ;
- 2° talvoudegezh an anaoudegezh eus div yezh ;
- 3° 6 pe 7 vloaz a gembraeg a zigor an nor war tehzorioù e lennegezh.

- (1) Dre vras ez eus nebeutoc'h eget 10 % a gembraegerien er skolioù. Met bez' ez eus ivez tachennadoù - stok ouzh kontelezh Caerfyrddin - dezho etre 80 ha 100 a gembraegerien .
- (2) Interview gant an Ao. Angell, enseller, 19 e viz eost 1956 .
- (3) 10 anezho e 1958 , "Y FANER" 15.5.58.
- (4) " An disparti hervez ar yezh c'henidik a zle pedout da vihanañ 2 vloaz er "Junior School" mar n'hell ket kenderc'hel betek an diwezh. Neuze zoken e vo gounid ouzh e virout vit kentelioù ' zo : yezh, relijion, istor ha douaroniezh ,ha naturouriezh e-lec'h ma tle ul liamm chom etre yezh ar bugel hag e aergelc'h " .op.cit.p.10.
- (5) op.cit.p.p.4,5.

Erbediñ a reer ivez studi ar c'hembraeg evit abegoù danvesel; n'int ket ken uhel hag ar re gulturel moarvat,met pouezañ a reont muioe'h war speredoù kalz :

- 1° un niver bras a implijoù a c'houlenn bezañ barrek da gompren ar c'hembraeg ;
- 2° ar c'hembraeg a zo un danvez ret en holl arnodennou an implijidistad (1) ;
- 3° ur gounid evit ar skolidi a danzen ar " School Certificate " ,pe arnodennou damhefvel .

PERAK ? Ur gentel bemdeiz a 30 mn diouzh ar beure, en ur gemer d'abardaez etre 5 ha 10 mn evit adwelout .(2)

- PENAOS ? 1° kelenn ar geriadur en un doare recliek ha diaesoc'h-diaesañ;implijout geriadur ar B.B.C. (3) ;
- 2° kreskiñ ar framm-yezh a yelo dale'hmata war zisheñvelaat ha war ziasasaat ;
- 3° kreskiñ ar galloud da gomz sklaer ha reizh ;implijout rimadelloù ha c'hoarioù-gerioù (4).

GANT PIV ? Gant ar mestr e-unan pa vo tu ,ha, diouzh ezhomm, gant mistri-gantreerien .
Ar pal a zo lakaat e pep skol 50 % a vistri dezho un testi bennak war ar c'hembraeg .(5)

PELEG'H ? En holl "Junior Schools" d'an holl skolidi o deus tizhet o 7 vloaz,nemet d'ar re a vefe re warl-erc'hiet evit tennañ gounid eus an divyezhegezh .

Evel e Caerdydd ez eus tu da dremen arnodenn ar " Scholarship Examination " penn-da-benn e Kembre,met evit ar mare,n'eus ket a gembraeg evit ar re a zibab ar "pennnoù saoznek".(6)

Ne oa bet kemm ebet c'hoazh e 1956 dacust ma vefe ar pal rediñ ar saoznegerien vihan d'ober un tamm poelladem e kembraeg ;hag ar gembraegerien,unan e saozneg ,diwar skouer Kontelezh Caernarfon .(7)

- (1) E miz eost 1958 e klasked e Kontelezh Drefaldwyn ur Rener evit an Deskadurezh barrek da gomz kembraeg flour .(Y GLORIANVDD ,13.8.58)
- (2) op.cit.p.8. Hervez an Ao.Miller, rener-skol e Maesteg,e vefe aliet ar gerent d'ober muioe'h mar gellont.
- (3) Ar B.B.C. a embann levrioùigoù evit heuliañ ar c'hentelioù a vez skinet.
- (4) op.cit.p.13.
- (5) "The Place of Welsh" p.33. Kentelioù war ar c'hembraeg a vez roet e-pad an ehanou-skol e Dyffryn house,e traonienn Morgannwg.(ib.)
- (6) " As far as this examination is concerned no change is to be introduced at present in relation to the teaching of Welsh : op.cit.p.9
- (7) Ar gwir hon eus da soñjal e vo tu d'hen ober hep dale paogwir Kadoriad Kuzul an Deskadurezh, an Benadur Llywelyn Heyrock a displege e-kerz Bisteddod Yauankiz Morgannwg e raed kement er gontelezh hag e n'eus forzh peserit kontelezh all war dachenn ar c'hembraeg .(Y FANER ,10.10.57)

Ne vefe ket hep abeg, rak, re alies, siwazh, e vez studiet ar c'hembraeg e-pad an daou vloavezh kentañ ha neuze e vez dilezet tamm-ha-tamm evit choukañ e pennoù ar skolidi saozneg ha jedoniezh e-sell an arnodenn .(1)

Ar vistri-skol entanetañ a anzav int o-unan n'eo ket aes kelemn ar c'hembraeg evel eil yezh. Diaesat e vefe bet zoken e lec'h 'zo gant digoridigezh ar skolioù kembraek o defe lammet diganto o gwellañ skolidi hag a oa ur skoazell evito, mistri, hag evit o c'hendiskibien .(2)

Evit o skoazellañ ez eo bet embannet gant ar " Rhondda Committee for Education " (3) ul levr-dorn : " Cymraeg yn yr Ysgolion Cynradd ".(4)

Enebet e vez gant mistri ' zo - izili eus An "National Union of Teachers " - enep ar politikerezh-se, met n'eus netra d'ober peogwir ne reer nemet heuliañ war ar poent-se an hini erbedet gant Ministrerezh an Deskadurezh hag o deus grataet harpañ ! (5)

(1) op.cit.p.12. Gwelout ivez Y FANER, 10.10.57.

An hevelep klemmoù a oa bet graet din e 1956 gant an aotrou enseller Angel .

(2) En ur skol bet gweladennet ganin en em gave, a-raok digoridigezh ur skol kembraek e-kichen, dindan an hevelep toenn zoken , 4 strollad c'hoarierien hag a brienta a-benn an Eisteddfod Broadel 2 bezh kembraek ha 2 jestradez tennet eus ar folklor.

(3) Kontelezh Morgannwg a zo rannet e 9 "district ".

(4) Bet em boa bet al levr etre va daouarn , met ne oan ket deuet a-benn da bourchas unan evidon , ha setu perak n'hellan ket komz hiroc'h diwar e benn .

An Ao. Miller, rener-skol e Maesteg, en doa embannet a-raok se ul levrig liesskrivet evit e skol . E bal a oa deskiñ ar frazennoù implijetañ er vuhez peldeziek .

(5) Ul lodenn vat eus mistri Kembre a zo bodet e-diabarzh an U.C.A.C. (Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru) . O c'hannadig a zo anvet "Undeb - Unity"; divyezhek ha trimiziek eo .

Gwelout war Y FANER eus an 10.10.57 respont kevrenn Y Barri eus an U.C.A.C. da glemmoù izili an N.U.T. Hervez an hevelep kazetenn ne vez kaoz e bodadennoù mistri an N.U.T. nemet eus goprou, savadurioù hag o deverioù e-pad an amzer-verronañ , Y FANER, 24.4.58 .

D . KONTELEZH Y FFLINT .

Kontelezh Y Fflint a zo deuet da vezañ brudet abaoe 1956 gant div afer : krouidigezh ur skol-etre kembraek e Y Rhyll hag ar stourm a-du gant ar c'hembraeg er skol e bro y-Maelor . En gwirionez, an div afer-se - hag a vo displeget dre ar munud pelloc'h - ne dint nemet disoc'hoù ar politikerezh yezhel a glasker seveniñ er skolioù abaoe 1946 .

Stad ar yezh a zo fall eno . E 1950.51 en em gave 19 053 a skolidi ha ne nivered en o zouezh nemet 10,4 % a gembraegerien ; 1 986 a'ar mutiañ : kembraegerien a-vihanik + saoznegerien ar rummadoù B ha C eus an Ensklask .(1) En hanter eus ar kontelezh n'eus ket 10 % a gembraegerien hag en hanter all ez eus etre 10 ha 40 % .

Evit stourm ouzh lanv ar saozneg (2) setu peseurt raktres-labour a oa bet divizet e 1946: (3)

1^o sevel skolioù kembraek pa vo goulenn warno ; pemp a oa anezho e 1958 ;(4)
2^o pa n'eus ket tu da grouiñ ur skol kembraek, rannañ ar skolidi e div gevrenn : ar gevrenn saoznek hag an hini kembraek ; pezh a oa graet e 5 skol ;
3^o kelemn ar c'hembraeg evel eil yezh en holl skolioù dre ur gentel bendeiz . Ar c'hembraeg a vez graet gantañ diouzhtu ma c'heller e-giz ur yezh vev .

Frankiz a vez lezet gant ar c'halenner ; daou dra hepken a c'houlenner digantañ : bezañ entanet a-walc'h evit implij ar yezh er skol hag en diavaez ha krouiñ mutiañ ma c'hell un aergelc'h kembraek e-sell da hadañ er skolidi ar c'hoant gwirion da zeskiñ ar yezh .(5)

4^o sevel skolioù-etre divyezhek. Div a oa dija digor e miz c'hwevrer 1957, e Y Rhyll hag er Wyddgrug , hag unan all a zleed digeriñ e Nae-lor e gwengolo 1957. (6)

(1) Gwelout pajenn 11 eus ar studiadennoù-mañ, an daolenn hag an disple-gadennoù .

(2) Kontelezh Y Fflint en em gav war arvor an hanternoz hag a zo evit ar saozn ur wir riviera . Eno e teucnt da ziskuizhañ e-pad o va-kañsoù, en o bungalow pe en o c'haravan , ha da dremen o c'hozhni . E miz eost 1958 en em goulennet digant ur marc'hadour kelaouennoù eus Prestatyn ar gazetenn Y FANER ; marse n'en doa klevet komz anezhi !

(3) Danvez ar pennad-mañ a zo bet pourchaset en ur brezegenn graet gant an Ao. Haydn Williams, rener an deskadurezh, en Eisteddfod Aber-dâr e 1956 , en un interview roet din gant an Ao. Jenkins, H.M.I. en Y Rhyll , hag en ur pennad eus ar gelaouenn Y FANER , 13.2.57 .

(4) Hervez Y FANER e veze sevenet labour vat-kenañ e teir skol all : Trelogan - an boa gweladennet e 1958 -, Trellanwyd ha Rhualt . (12.12.57)

(5) An Ao. Jenkins en e interview a boueze kalz war ar " Welsh atmosphere " . " The school should be a centre of Welsh culture and Welsh language " .

(6) Y FANER , 13.2.57 .

5^o N'eus ket a arnodenn gembraek penn-da-benn evel e Caerdydd pe e Kontelezh Morgannwg, met goulennet e vez digant ar skolidi o deus studiet ar c'hembraeg arzañ un tamm poelladenn ar yezh-se.

Ar poentou gouezet aze a dalvez dezho evit bezañ degemeret. Gant ar saozneg e c'heller gounid 150 poent ha gant ar c'hembraeg 40. (1) Diouzh ar poentou gouezet er boelladenn gembraek e vez rannet an arnodennidi degemeret etre ar skolioù-etre saoznek pe gembraek. (2)

Skol Gembraek Trelogan .

War-un-dro gant an Ao. Jenkins, H.M.I., em boa bet ro da wela-denniñ skol Trelogan. A-drugarez da bennegezh ar rener, an Ao. Caradog Williams, a zo eno ebaoc 1925, ez eo ur skol gembraek kozh daoust ma z eus er gêriadenn 75% a saoznegerien a-vihanik, ul lod vat anezho saozn. N'eus skol all ebet hag evel-se n'eus ket da zibab.

En Infant Department e vez desket d'an holl komz kembraeg a zo yezh ar c'helennerzh; ar saozneg a vez implijet evel eil yezh hepen. Komzet em boa e kembraeg gant ur plac'hig arvet Linda, merc'h da anezho eus Liverpool. Neozh e kendalc'h ar vugale da gomz saozneg e-treze er porzh-c'hoari.

Afer v-MAELOR .

Afer v-Maelor a ziskouez pegent taer eo ar politikerezh yezhel embraet er kontelezh. He danevellin a rin war he hed dre m'he c'havan kentellus.

Maelor a zo ur c'horn-bro saoznekaet ennañ 5 350 a dud bodet e 9 kêriadenn. Bez' o deus nav skol izel hag ur skol-etre daou-duek, modern ha grammar school war-un-dro.

An trouz a strakas pa fellas d'ar bennadurezh kelenn ar c'hembraeg evel eil yezh. En ur vodadeg dalc'het e Hammer e voe enebet ouzh ar politikerezh-se gant an abegoù-mañ : (3)

- 1^o ar skolidi o deus re a labour dija gant o "scholarship examination" na zeu ket re vat ganto !
- 2^o ur c'holl amzer ;
- 3^o ar saozneg a zo ur yezh vedel ;
- 4^o al lodenn vrasañ eus ar gerent a zo a-enep : 88,8 % enep, ha 11,2 % a-du (4).

(1) "The Place of Welsh ..." p.35, niv.163 hag interview an Ao. Jenkins. An doare-ober-se a gavan speredek a-walc'h. Hep bihanaat chafis ar saoznegerien e kresk hini ar gembragerien. Met ur si en deus ivez : en abeg d'an arnodenn-se e vez pouezet war ar saozneg er skolioù kembraek adalek an Infant Department, en doa anzavet din an Ao. Jenkins. Hini Caernarfon a seblant taeroc'h peogwir e redier an holl saoznegerien d'ober ur boelladenn gembraek. Ar saoznegerien o devez c'hwitet war o c'hembraeg a vez lakaet da dremen un test dre gomz.

Pouezañ a ran war gudenn ar "scholarship examination" en abeg d'al lec'h bras en deus kemeret e prederioù ar gerent e Breizh-Veur. Evit kalz, c'hwitañ an arnodenn-se a zo c'hwitañ e amzer-da-zont, ha netra ken !

(2) War c'houlenn e gerent e c'hell ur skoliad bezañ lakaet er skolioù-etre saoznek.

(3) Y FANER, 30.1.57.

(4) En editorial Y FANER eus an 13.2.57, e lened kement-mañ : "un danvez da vesañ divizet diwar e benn gant ar gerent eo ar c'hembraeg; un danvez da vesañ divizet diwar e benn gant gouarnamant Londrez eo ar saozneg."

- 24 -

En ur vodadeg all, dalc'het e Bangor-Is-Y-Coed, e krogas un ezel eus ar c'huzul-parrez e brezeenn gant ar gerioù dizoujañs-mañ : "Gwelout a ran amañ dremmoù estren, gant piv ez int bet pedet ? - Ganin-me-geme an Ao. W. A. Peters, eus Kuzul ar Kontelezh. An dud-se a oa : an Ao. Haydn Williams, rener an deskadurezh er Kontelezh... ha nac'het e voe outañ ar gwir da gomz. (1)

An trec'h a yeas gant Kuzul an Deskadurezh war-lerc'h ur vodadeg en doa prietet en Yr Wyddgrug (Mold, e saozneg.) Setu amañ an arguzennoù pennañ displeget eno :

- 1^o politikerezh Ministrerezh an Deskadurezh eo a glasker seveniñ, ha degemeret eo bet gant Y Fflint evel gant meur a kontelezh all ; (2)
- 2^o n'heller ket kemm ar politikerezh-se evit ur c'horn ;
- 3^o n'eo ket d'ar gerent eo ar roll-labour met da bennadurezh an Deskadurezh ;
- 4^o siwazh n'eus ket bet tu da zisplegañ ar politikerezh-se da dud Maelor .

An Henadur H.R. Thomas, en anv ar "Welsh Joint Education Committee" (Kenguzul kembreat an Deskadurezh) a zisklerias : " Gounit a reomp tachenn er Kontelezh-mañ hag e Kembra a-bezh dre ur politikerezh a basianted hag a gendrec'h. N'eus risk ebet o teskiñ un eil yezh d'ur bugel. Ar Priif Charles a zo o teskiñ teir ! " .

Hervez an Ao. Jenkins, H.M.I., e oa klozet-mat an afer e 1958 hag aet an trec'h gant Kuzul an Deskadurezh .

(1) Y FANER, 13.2.57.

(2) pezh n'eo ket gwir hervez al " Liverpool Daily Post ", a vez lennet kalz en hanternoz kembre. (Y FANER, 16.5.57)

(3) Y FANER, 7.3.57 .

(kendalc'h notennoù ar bajenn 27)

(7) Y FANER, 11.6.59.

An Ao. B.B. Evans a lavare kemend-all en ul li-zher d' Y FANER embannet e " Llais Y Wlad " (Moush ar Vro) : " Bez' ez eo, emezañ, un doare fall p'emañ ar yezh en argoll. Meuliñ a rae koulskoude labour Kontelezh Y Fflint. (Y FANER, 28.5.59)

IV. AR SKOLIOU KEMBRAEK NEVEZ .

SKOL LLUEST .

En ur rummad pennadoù anvet "Portread" ez eo bet taolennet gant ar gelaouenn "Y Faner" personelezh ha labour an Dimezell Norah Isaac, renevez gantañ ar skol gembraek gentañ. (1)

"Goulennet e voe digant, e miz gwengolo 1939, ober war-dro ar vu-gale a felle da gerent 'zo reñf dezho un deskadurezh dre ar c'hembraeg pa lakas repuidi eus Liverpool ar saozneg da yezh pen-nañ e skolioù Aberystwyth. Ar seizh bu-gel-se a voe derou skol gembraek Aberystwyth ha frouezh kentañ emsav ar skolioù kembraek e Kembre.

Hep skiant-prenañ e oa war dachenn ar skoliata - tremene e oa bet hepken dre ar Skol Normal - ha fall a-walc'h he yec'hed... (2) Evit kalz a dud en Aberystwyth hag e Kembre e oa un hufvre komz eus deskadurezh kembraek ha kembreat dre ar skol izel hag e tiouganent e lakae an avantur-se amzer-da-zont ar vu-gale en argoll.

An Dimezell Norah Isaac ne glaskas ket tabutañ dirak an holl hag er c'helaouennoù. Ur respont welloc'h a reas dre gender-c'hel da vont war-raok, dre arrouñf ha krouñf ur seriadur evit kelenn ar jedonezh hag ar skiantoù naturel, an douaroniezh... dre levezon-niñ ar vu-gale hag ar gerent a zeue daviti betek lakaat tiegezhioù a-bezh a-du gant ar c'hembraeg. Ha pa dizhas ar vu-gale o ll vloaz e voent gwalet o lammat aes, a-dreuz an arnodenn, er "grammar school" hag o chom eno betek ar skol-veur.

A-grenn diouzh ar c'hiz e oa en Aberystwyth kas ar vu-gale d'an Dll Norah Isaac e skol Yr Urdd e Lluest. Diouzh ar c'hiz e oa, un tammig snobel zoken, paeañ evit an deskadurezh dre ar c'hembraeg. Ar gerent a oa lorc'h enno gant brud vat ar skol ha levezon ar renevez yaouank war o bu-gale". (3)

(1) Y FANER, 6 a viz mezheven 1957: "Portread, Norah Isaac".

(2) Implijet e oa e sekretourva an emsav yaouankiz "YR URDD" (An Urzh) en Aberystwyth. Ar skol a oa bet digoret en ti-se anvet "Lluest"; ac'hano an anv: SKOL LLUEST.

An Dimezell Norah Isaac a zo ur plac'h vihan, nammet, pezh na vir ket outi da vezañ laouen, bev-kenañ, na da vleniañ he c'harr-tan gant ampartziz.

Evit he zrukarekaat ez eo bet anvet "Master of Arts", Honoris Causa, gant skol-veur Kembre ha kinniget dezhi ur garg a eil-kelenner ("lecturer") e skol-vistri Y Barri.

(3) Bihan souezhus da gentañ, niver ar skolidi a yeas bep bloaz war greskiñ. 1939 : 7, 11, 14. 1940 : 30. 1950 : 117 (5 mestr). 1951 : 130.

An danevell "The Place of Welsh..." a lavar kemend-all e berr gomzoù: "An hini gentañ a voe digoret e 1939 en Aberystwyth, hag eno, a-drugarez da skoazell an "Urdd" ha da bennegezh ha da labour ramzel ar renevez hag ar vistri e reas berzh vat an taol-esa".

E-pad 12 vloaz e chomas Skol Lluest ur skol brevez dizalc'h, "Independent School". E 1951 e voe degemeret evel ur "County School", ur skol-stad, gant Pennadurezh an Deskadurezh e Ceredigion.

EMLEDAN AR SKOLIOU KEMBRAEK NEVEZ.

E 1947 e voe digoret an eil skol gembraek e Llanelli gant Pennadurezh an Deskadurezh e kontelezh Caerfyrddin. Abaoe ez eo aet o niver war greskiñ bep bloaz:

1950	:	15	skol	gant	696	skolidi	(1)
1953	:	26	"	"	2000	"	(2)
1959	:	38	"	"	3558	"	(3)

Kontelezh Morgannwg a zo e penn gant 19. Londrez, Liverpool e Bro-Saoz o deus bep a hini hag Abertawe div ! (4) Komz a reas eus digeriñ skolioù all e Dinbych (60 skoliad war ar roll), Y Drenewydd (40 war ar roll), Rhuthun ha Llangollen (5). Goulennet e vefe bet un nan ivez e Caer (Chester e Bro-Saoz) hag e Glyn Ebbwy (Ebbw Vale)

(6) En ur ober 9 bloaz, eus 1950 da 1959, en deus kresket niver ar skolioù div wech hanter; ha niver ar skolidi, 7 gwech. Kembreiz int a gav ez eo re c'horrek an emsav. Bodadeg vloaz "Undeb Rhieni Ysgolion Cymraeg" (Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek) a damall d'ar Pennadurezhioù lezel an intrudu gant ar gerent ha pa 'z eo dezho-int e gener.

AR SKOLIOU BABIGED .

Gwalet hon eus dija e oa difennet degemer nam-gembraegerien er skolioù kembraek dre ma tle ar yezh c'henidik bezañ yezh ar skol. Gwalet hon eus ivez e vez roet d'ar ger "Yezh C'henidik" ur ster ledan a-walc'h hag e meur a skol e vez degemeret bu-gale dezho er gêr ur "Welsh Background" (un serjeic'h kembreat) hepken.

(1) "The Place of Welsh..." p.35, en daolenn. (2) SKOL I. Rumad kozh, p.16.
(3) Y FANER, 26.2.59

(4) Evit skol Londrez gwelout Y FANER, 16.5.57; evit eil skol Abertawe, Y FANER, 2.10.58.
"Digoret e vo ur skol gembraek e Londrez, eme ar Parchedig Meic Parry, ha pa vefe ret din mont da werzhañ alumetez". Y FANER 21.8.58.

Kuzul Kontelezh Londrez a nac'h aozañ ar c'helenneriezh dre ar c'hembraeg evit ar vu-gale koahoc'h eget 7 vloaz. Ar gerent a glemaouzh en em harpañ war ar rann 8 eus Education Act 1944. (Y FANER, 19.11.59 ha 12.12.59)

(5) Y FANER, 11.6.59 ha 18.6.59.

(6) Kêr c'henidik ar politiker Aneurin Bevan M.P. (Member of Parliament). (En Ristredod Glyn Ebbwy, e 1958, e oan bet kemeret evit un den eus eno gant kembraegerien eus Londrez en abeg d'an c'hembraeg fall !) (gwelout an notenn 7 war ar balenn 25.)

Gweladennet em eus hini Y Barri e sekreteri chapel Salem (1). Un d'usen bennak a familhoù a gase o buhalioù eno. (2). Ar skol a zo prevez ha na zegemer skoazell ofisiel ebet. Bevañ a ra diwar skodennoù ar gerent, profoù ha kermesoù. (3). E-pad ar 5 bloaz kentañ, eus 1951 da 1956, e oa bet displeget 600 lur saoz (4). Ur madoberour pinvidik, ur c'henverzher, a ra dezouzen ar vucale d'ar skol en unan eus e girri-tan (5).

YEZH AR SKOLIDI.

" Ar skol a zo dior d'ar baotred ha d'ar merc'hed a c'hell komz kembraeg. Zegemer a reer c'hoazh bucale ha na gomzont ket kembraeg pa vezont dindan 5 vloaz, pe, zoken koshoc'h, pa gomzont ar yezh. (6)

E skol kembraek Nantiffylon, e Maesteg, e tegemerer: (7)

- 1º ar vucale o deus un tad pe ur vamm kembraeger
- 2º ar re ableustr un iliz pe ur chapel kembraek (8);
- 3º bucale ar saoznerien dedennet gant ar c'hultur kembraek.

Zegemeret e vezont er skol etre 3 ha 7 vloaz ha goulennet digant an tiegezhioù kembraek ober un tamm war o zro. Darn a oa bet distroet d'o familhoù dre ma ne oant ket skoazellet a-walc'h da bleustrif war ar yezh. Met daoust da se - pe en abeg da se, mar kirit ! - al lodenn vrasañ eus ar skolidi a gomz saoznek war ar porzh-c'hoari (9).

- (1) Ur skol vabied a zo bet digoret d'an 22 a viz gwenegolo 1959, e sekreteri ur chapel e Church Village, e-kichen Caerdydd, gant 10 bugel. Ur vodadeg a zo bet dalc'het ivez e Rhiwbina, en hanternoz da Gaerdydd, e-sell da zigerifi unan all. (Y FANER, 1.10.59)
- (2) d'ar 7.9.56 e oa 7 bugel bezant; war-dro 20 a oa enskrivet.
- (3) bep tiegezh a bae 2/6 bep miz (2 shilling, hanter ; el lur saoz ez eus 20 shilling). E 1956 e oa bet gounezet 150 lur saoz gant ur c'hermes.
- (4) war-dro 600 000 lur gall d'ar mare. An holl sifroù-se a oa bet roet din gant an Ac. Raymond Edwards, eus Y Barri, sekretour Kevredigezh Kerent ar Skolioù Kembraek.
- (5) Tad an Ac. Gwynfor Evans, rener ar Gostezenn Vroadel, a gav din.
- (6) " Beth yw Ysgol Gymraeg ? ", p.10.
- (7) E 1955/56 e oa er skol 130 buhal, 1 renerez ha 4 mestr ; e 1956/57, 150 skoliad, 1 renerez ha 5 mestr, 3,75 % eus skolidi ar gerenni 8 skol ha 4 000 buhal etre 4 ha 11 vloaz.
- (8) iliz an Anglikaned pe ur chapel protestant.
- (9) er skolioù saoznek n'eus ket ar gwir da zegemerout ar vucale a-raok 5 vloaz. Kerent 'zo a gas o bucale d'ar skol kembraek evit en em zizober diouto abretoc'h ; ar skolioù-babied a zo rouez-kenañ ivez.

E skol kembraek Cwmdar avat e komzed eus lakaat ar maez ar vucale dindan 5 vloaz dre zizouer a leo'h. (Y FANER, 23.5.57)

E skol kembraek Landudno, Sir Gaernarfon, "labourat ha c'hoari en kembraeg ken naturel ha ma vefent en ur skol e kalon ar vro" (Jennie Thomas, op.cit.p.11.

Skol kembraek Y Barri a oa pleustret gant 60 skoliad lodennet e 3 c'hlas: dosbarth 1, 5-6 vloaz; dosbarth 2, 6-7 vloaz; dosbarth 3, 8-11 vloaz (1).

Setu amañ e c'helled rannañ skolidi an daou klasad uhelañ hervez o yezh c'henidik : (2)

	saoznek	kembraeg	div yezhek 50 %	hollad.
dosbarth 2	4	6	5	15
dosbarth 3	(3) 5	8	7	20

LEC'H AR SAOZNEG ER C'HELENNEREZH.

Hervez an Dimezell Cassie Davies e tlefed ortoz an oad a 7,8 vloaz a-raok kregiñ gant su studi ar saoznek, ha dre gomz hepken. D'he soñj e vefe dav ortoz an oad a 9 bloaz. Ar skolioù wellañ eo ar re a gelenn dre gomz. (4) Tamall a rae d'ar skolioù kembraek - dreist-holl d'ar skolioù kembraek kozh - kregiñ re abred gant al lenn, a-raok m'eo barrek ar skolidi da lenn mat a-walc'h hag a-raok ma ouzont a-walc'h a c'herioù saoznek. Kement-se en deus un efed fall war an eil yezh hag eben o vezañ ma 'z eo unan fonetikel hag eben nann-fonetikel.

Hag ouzhpenn, pa zesker d'ar vucale lenn saoznek abred, e kemeront buan plijadur el levrioù saoznek a zo kalz niverusoc'h ha morse, marteze, ne garint ar re kembraek.

Setu amañ bremañ pezh a vez -raet resis e div skol am eus gweladennet e kontelezh Mor, annez:

Y BARRI . Eil klas : 1.15 bemdeiz, lenn, skrivañ, kontadennoù.
3de klas : 1.15 bemdeiz, lenn, poelladennoù dre gomz, displeadennoù, skrivañ, reizhskrivadur.

" Dre lealded e-keñver hor skolidi, eme ar renerez, e tleomp ober diouzh ma vo o saoznek kenkoulz, pe dost, ha hini reoù ar skolioù saoznek".

NANTYFFYLON. Iañ klas: 30 mn, kontadennoù gant goulennnoù dre gomz ha dre skrid; lenn pa ves prest ar bugel.

2¹ klas : muioc'h a labour dre skrid; kentelioù ouzhpenn d'ar re walerc'hiet, e-pad ar chentelioù sone-rezh da skouer.

3de klas: 1 hentel e saoznek + labour dre skrid; diazezmant gant ar reizhskrivadur; ar vucale a veak ivez an daou c'heriadur.

4re klas: ?

5et klas: bloavezh an arnodenn : 3 survezh saoznek, bem deiz.

"Ar Jedoniezh a vez kelennet penn-da-benn dre ar c'hembraeg en "infant school". Adalek e seizh vloaz e lakaer etre daouarn ar skoliad al levrioù saoznek" (5)

(1) Un iliz nevez a-walc'h, Sant Francis ar y Bryn, a oa bet adkempennet evit 7 932 lur saoz.

(2) " Ar kembraegerien a zo bucale tud desket", eme renerez ar skoliad, a oa bet unan eus wellañ skoliaderez an Dll Norah Isaac e skol normal Y Barri.

(3) rannet e vese ar skolidi e 3 strollad evit ar saoznek, ar c'hembraeg hag ar jedoniezh.

(4) interview gant an Dll Cassie Davies, H.A.I.

Setu amañ an abegoù displeget din gant renerz Nantyffylon:

- 1^o ar saozneg a zo yezh ar c'henwerzh (1);
- 2^o er skol-atre e vo implijet ar yezh-se hepken evit ar jedoniezh hag ar ventoniezh;
- 3^o an anvioù-niver e kembraeg a zo hir (2);
- 4^o dre ziover a levrioù ivez (3).

TALVOUDEGEZH AN DESKADUREZH .

Danu desteni hepken :

an Dimezell CASSIE DAVIES, H.M.I.

" O saozneg a zo ker mat, morse falloc'h, kentoc'h gwelloc'h... Komz a reont flour a-walc'h ar saozneg evit heuliañ ar skolioù-etre " (4)

RENER UR SKOL-ETRE evit ar baotred.

" Peogwir em eus tu d'hen ober, e karfen lavarout deoc'h peseurt o deus graet ho paotred e dibenn ar bloaz-skol. Unan anezho a zo da gentañ er c'hlas izelañ, 120 skoliad, gant un notenn-etre a 86, an hini uhelañ em befe gwelet biskoazh... Moarvat e vlot laouen o c'houzout o deus graet berzh e saozneg, un anezho gant 88 % a boentoù. An disoc'hoc'h se a brou - mar befe ezhomme - ne vez ket dilañset e saozneg nag en danvezioù all ar skol-etre, ar vugale a zo bet kenteliet dreist-holl e kembraeg". (5)

TAMALLOU .

Gwelet hom eus dija e tamalle mistri 'zo d'ar skolioù kembraek lemel diganto o gwellañ skolidi war ar c'hembraeg ha diaesaat o labour.

Un tamall fentus a-walc'h a zo bet graet ivez dezho gant ur c'helenner skol-veur: magañ snobelezh e bodadegoù ar gerent ! Kement-se a c'hellfe bezañ gwir a-wechoù. En Aberystwyth, an dud a-zoare a gase o bugale d'ar skol kembraek, en amzer an Dimezell Norah Isaac da vihanañ. Klevet em eus-me dimeziled a-zoare o komz kembraeg uhel a-walc'h e straedoù ar gêr-se evit bezañ klevet gant an dremenidi, lod anezho touristed saoz !

(1) ret eo aberzif un dra bennak d'an idoloù !

(2) e skol Y Barri ez implijer en eil klas an anvioù-niverif etnaet.

Da skouer : 35 = tri deg pump, e-lec'h pump ar ddeg ar ugain. An doare-se da jediñ a vefe bet kondaonet, em renerz skol Nantyffylon, gant G.D. Powell, an enseller meur ("Inspector General").

(3) ul levr kembraek a jedoniezh "Llyfr Rhifyddeg Gymraeg", azot gant R.R. Jones hag O.M. Roberts, a zo bet embannet gant Gwasg Aberystwyth. Hervez, e vefe bet difennet ober gantañ. Perak ? evit an abeg displeget en notenn 2 marteze.

(4) e-kerz un interview : " English as good, never worst, a tendency to be better... Fluent enough in English to attend a secondary school".

(5) " Yr Ysgol Gymraeg ", p. 3.

(6) J.R. Webber, eil-kelenner war an deskadurezh e skol-veur Abertawe (Swansea) . Y FANER, 6.6.57.

APARTHEID E PONTARDULAIS.

Un afer iskis a-walc'h c'hoarvezet e Pontardulais, Sir Vorganwg, a roas tro d'an enebourien da zispakañ o zamalloù. Setu an doareoù. O dezrevell a ran dre ma roont tu din da lakaat un tammig pebr ha holen em soubenn hag ivez dre ma 'z eus ur gentel bennak da dennañ (1).

Pontardulais a zo ur gêrig a 7 000 a dud a vev diwar labourat en uzinoù houarn-gwenn hag er poullou-glaou. E miz gwengolo 1956 e roas urzh pennadurezhioù an deskadurezh da zilec'hiañ 300 bugel un "infant school" saoznek evit reiñ plas da 101 deuet eus ur skol kembraek. Ar savadurioù nevez kinniget d'ar skol saoznek ne blijont d'ar gerent. Kavet e oa un digarez brav evit enabiñ ouzh ar skol kembraek.

Tamall a reas d'ar renerz bezañ berzet he skolidi da gomz ha da c'hoari gant ar saoznegerien; ha da gerent 'zo bezañ dispartiet o bugale er straedoù (2). An dispac'h a voe lakaat da redek gant gerioù evel : " Neiltuad, segregation, apartheid " evel e Su-Afrika ! Ar c'helaouennoù a embannas pennadoù gant titloù suezhus ha skeudennoù ; ar mammoù a vanifestas dirak dorioù ar skol kembraek; ar gerent a reas bodadegoù hag a abzas ar c'homite evit klemm ouzh Ministrerezh an Deskadurezh.

Moarvat ne vo ket didalvoud lavarout ouzhpenn e oa bet lakaet e penn ar c'homite ar " vicar ", ar person anglikan; ha war an tu all, evel kadoriad ha sekretour Kevredigezh Kerent ar Skol Gembraek e kaved daou bastor protestant "non-conformist" (3). Unan bennak a damallas c'hoazh d'ar skolioù kembraek magañ danvez broadelourien.

An " News Chronicle " war-lerc'h e bennadoù dezho talbennoù suezhus - ret mat eo dedenn al lennerien ! - a embannas unan raer da zisplegañ petra ' oa ur Skol Gembraek ha da veuliñ al labour vat kaset da benn eno: " Why the queues grow for all-Welsh Schools " , gant Lyn Evans . (4) Ha setu perak em eus eon-jet klozañ ar pennad-mañ gant al lodenn diwezhañ anezhañ .

(1) News Chronicle, 4,7 hag 8 a viz gwengolo 1956 . Ur gelaouenn liberal, a gav din, ha troet mat gant Br.-Gembre .
Y Faner, 5.9.56 hag Y Cymro, un niverenn eus gwengolo 1956.

(2) Fezh a voe nac'het gant ar renerz hag ar gerent .
(3) Komzoù ar Vicar a voe dalc'husat peoc'hus, da vihanañ ar re embannet war ar c'helaouennoù : " Kembraegerien ha saoznegerien o deus bevet betek-hen e peoc'h. Pedomp evit ma c'hellimp kenderc'hel da vevañ e peoc'h " . NEWS CHRONICLE, 7.9.56.

(4) Goude bezañ lavaret ur ger pe zasu eus an droukint, hag ar fa-zioù bet graet marteze gant an daou du, e pouez war dalvoudgezh kelennerezh ar saozneg hag ar c'hembraeg er skolioù " holl-gembraek " en ur ginnig un anv a zerefe gwelloc'h outo : " bilingual schools " .

SUCCESS AND HOPE -- BERZH HA GOANAG .

....Hiziv ez eus ouzhpenn 50 anezho gant 5 000 skoliad da nebeutañ, dindan renerezh Pennadurezhioù Lec'hel an Deskadurezh .N'eo ket re lavarout o deus graet berzh dispar war dachenn an deskadurezh hag ar gevredigezh.Kementad ar skolidi o deus tremenet arnodenn ar "Grammar School " a zo uhel.

Sur on e vefe brasoc'h c'hoazh niver ar gerent a rank ober al lost evit goulenñ plasoù mar anavezfent gwelloc'h o zalvoudgezh...Ar skolioù-se a zo unan eus ar brasañ goanaoù da saveteñ ar c'hembraeg enep gwask panner ar radio, ar skinwel hag ar sinema.Int-i eo skolioù divyezhek gwirion Breizh-Veur .

Pehini eo barnadenn a renerien an deskadurezh hag an deskadourerien ? Salaout pezh a lavar hini Abertawe : " Ar vugale a zo bet degemeret er skolioù-etre a oa barrek a-walc'h war ar saozneg evit heuliañ kentelioù er yezh-se .Seblantout a reont asur,kempouezet-mat hag eürus ".

V. AR SKOLIOU - ETRE .

Gwechall e Breizh-Veur e oa ar skol-etre e-lec'h ma veze degemeret goude an oad a 11 vloaz bugale ar gerent a c'helle paeañ hag ivez ar re n'helle ket o c'herent paeañ p'o deveze tremenet gant berzh arnodenn ar " scholarship examination " (1).Ar vugale na oant ket barrek a chome er skol izel,er "senior department" pe en ur "senior school" pa veze a-walc'h a skolidi evit digerñ unan (2).

Abaoe " Education Act 1944 " ez eus tri rummad skolioù-etre diouzh donezonoù ar vugale :

Grammar School : hag a brient arnodennoù-antren ar skolioù-meur hag ar skolioù uhel,6-7 vloaz studi,etre 11 ha 17 vloaz;

Secondary Modern School : evit ar skolidi na vezant degemeret nag er grammar school nag er technical college ,5 vloaz studi ;

Technical college: evit ar skolidi speredek hervez o donezonoù hag o c'hoant ;

junior department: 5 vloaz studi ,etre 11 ha 16 ;
senior department: 1 pe 2 vloaz studi ouzhpenn . (3)

A-wechoù e vez bodet div pe deir skol en unan hag e vez roet dezhi un anv nevez :

Grammar School } bilateral school ,skol daouduiek. } multilateral sch.
Sec.Modern Sch. } } skol liesduiek.
Technical sch. }

AR C'HEMBRAEG EN ARNODENNOU .

Ar c'hembraeg er skolioù-etre a c'hell bezañ :

- 1º studiet evel danvez ,e giz ar galleg pe al latin ;
- 2º implijet evel benveg kelenn .

An daolenn dindan a ziskouezo penaos en deus kresket kelennerzh ar c'hembraeg kenver-ouzh-kenver gant hini ar yezhoù all etre 1910 ha 1951 (4).

bloaz.	Higher school certificate:				school certificate.			
	latin	galleg	saozn.	kembr.	latin	galleg	saozn.	kembr.
1910	158	140	128	42	1 303	1 357	1 847	460
1951	249	555	997	189	1 425	3 700	6 139	2 179
kresk	57 %	296	678	350	9 %	172	316	373 %.

- (1) alese e teu anv an arnodenn .
- (2) Setu ivez dre vras ar pezh a c'hoarvez er Frañs .
- (3) " The New Secondary Education " ,passim.
- (4) " The Place of Welsh..." p.27. (An dregantadoù a zo bet jedet ganin;arabat eta tamall hini all ebet ma 'z eus ur fazi bennak)

E Kêr Caerdydd e vez kelennet ar c'hembraeg er Secondary Modern Schools 5 eurvezh bep sizhun, 4 c'hentel a 45 mn (1). Ur c'huzulier a c'houlennas ur wech ma vefe kelennet ar galleg kentoc'h eget ar c'hembraeg, talvoudus hepken d'ar re " a labour en hanternoz, er c'hornog hag er B.B.C.!" (2). Rener an deskadurezh, an Ao; Presswood, a respontas, en un doare gwidreus-tre, ne oa ket bet tu d'hen ober (3).

En hanternoz, e Kontelezh Dinbych, ez eus ivez un nebeut skolioù hag a gelenn ar c'hembraeg. Skolioù binan alies, hag a glasker klozañ peurlvusañ evit dilec'hiañ ar skolidi e kêrioù hanter saoznekaet.

Setu ar pezh a c'hoarvez gant " ysgol fodern" Llanrhaseadr, enni 69 skoliad, en o zouezh 60% a gembraegerien. Ar gerent hag an dud o deus klemmet : an dilec'hiadeg-se a vefe ur c'holl relijiel, kevredigezhel hag ekonomikel (4).

E skol-etre Pentrefoelas e vez komzet ar yezh gant 97 skoliad diwar 122, 79% (5). Implijet e vez ar c'hembraeg da gelenn ar skritur sakr, an douaroniezh hag an istor. Ar skiantoù hag ar jedoniezh a vez kelennet e saozneg er c'hlasoù uhelañ. Fellout a rafe da Bennadurezh an Deskadurezh lakaat ar skolidi da ziskenn da Llanrwst e-lec'h n'eo ket ken uhel dregantad ar gembraegerien a-vihanik (6).

AR SKOLIOU - ETRE E CAERNARFON.

En danevell " Third Language Survey " - bet meneget dija meur a wech - eo bet rannet an 19 skol-etre a gaver er gontelezh e 3 rummad:

Ar Skolioù Kembraek, enno etre 80 ha 100% a gembraegerien : 7 grammar schools + 4 secondary modern schools. Ar c'hembraeg eo yezh pennañ ar skol hag implijet e vez evit ar pedennoù, ar bodadegoù, an abadennoù sonerezh, an " eisteddfod-où " hag an darempredoù. Bez' ez eo c'hoazh ar yezh pennañ evit kelenn ar sonerezh, ar relijion, ar c'hembraeg hag e lennegezh, istor Bro-Gembre hag evel yezh-skolaer, diouzh ret, evit an danvezioù all.

Dre ar saozneg e kelennar ar skiantoù, ar jedoniezh, an arz, istor ar bed hag an douaroniezh.

Ar Skolioù divyezhek Saoznek n'o deus ket 30% a gembraegerien ; 3 grammar schools a zo anezho, e Bangor hag e Llandudno. Ar c'hembraeg a vez kelennet evel danvez, implijet ivez a-wechoù evit ar pedennoù ha dalc'hmat evit an " Eisteddfod " hag ar c'hoariva.

- (1) Interview an Ao.T.O.Philipps, eil-rener an deskadurezh.
- (2) da lavarout eo e-lec'h ma 'z eus an nebeutañ a labour ! Ar pastel-loù-se ao taget gant an dilabour hag an divroañ.
- (3) Y FANER, 3.10.57.
- (4) Y FANER (?) Neuze ne chomfe ken er skol-izel nemet 21 bugel.
- (5) etre 80 ha 100 a gembraegerien vihan a gontar e skolioù ar c'horn.
- (6) Y FANER, 26.3.59. Anavezout mat a-walc'h a ran Llanrwst dre 'm em boa tremenet eno ur mizvezh e 1958. Digoret e oa bet eno gant pried ur skolaer ur stal levrioù kembraek hag a rae kalz a aferioù. A-dal d'am c'hembraeg e oa ar marc'had. Ur wech ar sizhun e teue eno ar gouerien da werzhañ o loened, deved peurlvusañ. Ar c'hembraeg a veze neuze yezh an holl.

Ar Skolioù Divyezhek Kembraek, enno etre 80 ha 30% a gembraegerien, schools " lec'hiet war arvor an hanternoz. Rannet e vez ar skolidi e 3 rummad, hervez ar yezh :

- a - ar vugale divyezhek a gomz kembraek ;
 - b - ar vugale unyezhek a gomz saozneg hag a glev kembraeg er gêr ;
 - c - ar vugale unyezhek saoznek hag a glev saozneg er gêr.
- Diouzh ret e vez bodet ar re wannañ c'hoazh en ur pevare rummad.

Kembraeg ar rummad kentañ a zo kerkoulz hag hini skolidi ar maeziou ha spi a zo d' ober labour vat gant an daou rummad all ouz e ziazezañ war ar c'hembraeg eun e-pad ar bloavezhioù kentañ ha gant harp pladennoù.

Arnodennoù. Evit an arnodenn ar " General Education Certificate at the Ordinary Level " (Testeni an derez izelañ) e 1951, 475 o doa tremenet an "English Language", ha 275 gant berzh, 57% ; 244 ' ' ' ar "Welsh Language", ha 171 gant berzh, 70% . An holl skolioù o doa ardenidi evit ar c'hembraeg, ha bez' e oa anezho 51% eus an holl (1).

Evit ar G.E.C. "at the advanced level" (testeni an derez uhelañ) e oa 72 arnodennad evit ar saozneg, 41 gant berzh, 56% ; 39 evit ar c'hembraeg (54%), 31 gant berzh, 79% ! (2) Div skol neozh n'o doa arnodennad ebet evit ar c'hembraeg a oa bet dilezet evit un danvez all : pezh a zo difennet gant politikerezh yezhel ar gontelezh embannet e 1952 (3).

- (1) n'em eus kavet neblec'h niver an arnodennidi, met ar saozneg o vezañ un danvez ret e c'hellan dezastum e oa 475 anezho. (En ul li-zher skrivet din d'an 4.1.60 e lavar an Dil Jennie Thomas kemend-all.)
- (2) op.cit.p.p.16,17 ha 50,51. En hevelep lizher he doa kaset din an Dil Jennie Thomas er statistikoù, evit ar loaz 1955, en ur c'horn bro kembraek hag unan saoznekaet: (G.E.C.at the ordinary level)

	korn-bro kembraek		korn-bro saoznekaet	
	niver hollek	saozneg gt berzh	niv.hollek	saozneg gt berzh.
Caernarf.	106	52	Caerdydd, pacted	156
Brynrefail	62	25	' ,merc'h.	119
Botwnnog	50	12	Cathays, pacted	133
Pwllheli	81	41	' ,merc'h.	93
			Abertawe, pacted	214
				114
				715
	299	130		362
		43,4%		50,6%

- (3) op.cit.p.26 pe 27, art.4.

POLITIKEREZH OFISIEL Y CYD-BWYLLGOR ADDYSG.

Setu amañ bremañ politikerezh ofisiel Kenguzul an Deskadurezh e Kembre:
Skolioù-etre gramadeg : reiñ^{ty} an holl skolidi da zeskiñ kembraeg, zoken
pan n'o deus ket e studiet er skol izel .

pastelloù kembraek : -un danvez ret evit an holl ;
-ur benveg-kelenn evit ar studioù "denel" (istor,
douaroniezh, relijion) e-pad 3 bloaz, hag evit ar
skiantoù hag ar jedoniezh, en derou da vihanañ.
pastelloù kemmesk : aozañ 2 rummad hervez ar yezh c'henidik (1).

Skolioù-etre modern ha teknikel :

pastelloù saoznekaet : d'ar re speredekañ, kembraeg evel eil yezh ;
d'ar re all : kanaouennoù, kantikoù, talvoudgezh
an anvioù-lec'h ha marteze kembraeg eün.

pastelloù kembraek : Ar yezh kelenn a zlefe bezañ ar c'hembraeg ;
ar re speredekañ a studi ar saozneg evel
eil yezh hag ar re all un doare "Basic English"

pastelloù kemmesk : daou rummad hervez ar yezh c'henidik (1).

Skolioù . Bez' ez eus skolioù, evel just, n'o dizanzaver ket, er c'hon-
trol, met klask a reer an tu da dred'hiñ warno :

- 1° diouer a c'herioù teknikel ; ar skol-veur he deus embannet rolloù-
gerioù ha tu a zo da ijinañ reoù all evel ma vez graet en holl
yezhoù. (2) .
- 2° diouer a levrioù ; ne vint moulet nemet pa vo sur an embannerien da
gacut gwerzh evito .
- 3° rekisadurioù an arnodennoù, ha c'hoazh emañ e galloud ar C'henguzul
adaozañ an arnodennoù diouzh ret (3) .
- 4° diouer a vistri barrek , an diaezamant brasañ ; dever ar Skol-Veur eo
plediñ gant ar gudenn hag hen ober a ra (4) .

AARDWYN GRAMMAR SCHOOL , ABERYSTWYTH .

Goude an darsell-se ez eo dav dimp gwelout resis ar pezh a vez
grast en un nebeut skolioù.

Krogomp gant ur skol-etre gramadeg dezhi 2 gevrenn, Aardwyn
Grammar School en Aberystwyth, renet gant ur c'hembread mat , an Ao.
Lewis .

- (1) "The future of Secondary Education in Wales", 1949, p.p.50.52.
- (2) "Termau Technegol", University of Wales Press, 1950.
"Termau Addysg Gorfforol a Mabolgampau", ib.1959 (Gerioù evit an
embregerezh-korf, ar c'hoarioù hag ar sportoù) .
- (3) "Y Cwrs Addysg a'r Gymdeithas yng Nghymru", p.14 pe 84, a c'houlenn
zoken ma vefe aozet rolloù-labour evit ar skolidi a studi ar
saozneg evel eil yezh .
- (4) "Y Cwrs Addysg...." p.p.18.19 pe 71.72 (al levr evel kustum a zo
divyezhek.)

Stad ar yezh e-mesk ar skolidi . Diwar 620 skoliad , 55 % a oa kembraeg-
egerien vat e 1955.56; 95 % a gompran
un tamm. An hanter anezho a heuilh ar gevrenn kembraek (1) .
Gwechall e komz kembraeg war ar porzh, e studiet ar
c'hembraeg evel danvez, met yezh ofisiel ar skol a oa ar saozneg.
Bremañ e vez teir gwech ar sizhun ur servij relijiel
kembraek; ar gelennerien a gomz kembraeg gant ar gembraegerien ; perzh
a gemerer en Eisteddfod ar gêr hag a zo kembraek evit al lodenn vra-
sañ : kanañ, laz-kanañ , gwerzhacouriezh , barzhoniezh, danevelloù (essays) ;
bep bloaz e vez aozet un "noson laouen" e kembraeg .

Kelennerezh ar c'hembraeg . Ar c'hembraeg a zo un danvez ret e-pad an
daou vloavezh kentañ; er bloaz a zeu (56.57)
e-pad an tri vloavezh kentañ ; ha diwezhatoc'h, marteze, e-pad ar 4 bloa-
vezh kentañ, da lavarout eo betek ar " school certificate at ordinary
level " .

E 1955.56 , adalek an 3de vloavezh , e oa bet dibabet ar c'hem-
braeg gant 65 % , ar galleg gant 15 % hag al latin gant 20 % .

Ar skolidi a vez rannet e div gevrenn e-pad an daou vloavezh
kentañ ; bremañ , adalek 1956.57, e-pad an tri vloavezh kentañ . Evit ar
c'hentelioù kembraek e vezont rannet e 3 strollad hervez o deskamant
hag ivez hervez live an arnodenn :

Kembraeg: yezh ha lennegezh	: 0.1	
Kembraeg evel eil yezh	: 0.2	
Kembraeg evel yezh "estren"	: 0.3	(2)

Kembraeg evel benveg-kelenn . A-raok ma oa deuet an Ao. Lewis da Aardwyn
Grammar School, a-raok 1954, ne veze impli-
jet ar c'hembraeg nemet er skol kembraeg . An Ao. Lewis a garfe kelenn
e kembraeg : istor Kembre, istor ar bed hag an douaroniezh, e-pad an daou
vloavezh kentañ. N'eus ket a levrioù met tu a zo da gelenn e kembraeg
en ur implijout levrioù saoznek. E vloavezh kentañ ar gevrenn gem-
braek e vez kelennet ar galleg dre ar c'hembraeg gant levrioù saoznek.
(3)

- (1) Danvez ar pennad-mañ a zo bet pourvezet din gant an Ao. Lewis
e-kerz un interview. 20 % eus ar skolidi a zeu eus familhoù kem-
braek. " Muioç'h a gembraeg a gomzer bremañ eget gwechall. 50 vloaz 'zo
ne oa ket diouzh ar c'hiz komz kembraeg " . (Gwel. p.30 : Tamalloù)
- (2) Gant ar gembraegerien ez implijer, "Llawlifr Dysgu Cymraeg" gant
William Rowland, embannet gant Hughes a'i Vab .
Gant ar saoznegerien , "Dysgu Cymraeg", embannet gant Prifysgol
Cymru (skol-veur Kembre) .
- (3) Ar gembraegerien, emezañ ivez, a gomz gwelloc'h galleg eget ar
saoznegerien .

AR SKOLIOU - ETRE KEMBRAEK .

Krouidigezh ar skolioù-etre kembraek a oa goulennet un tamm
' oa gant an U.C.A.C. (Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru), Undeb Cym-
ru Fydd hag Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek (1).

Erbedet e oa bet ivez gant "The Curriculum and the Communi-
ty of Wales " (2), "The Place of English and Welsh in the Schools of
Wales " (3).

Ar c'hentañ kammed war an hent-se a oa bet graet gant Sir
Y Fflint. E bodadeg veur Kevredigezh Kerent ar Skolioù Kembraek e Borth,
e-kichen Aberystwyth, e tegemennas an Ao. Haydn Williams, rener an deska-
durezh er gontelezh, e oa bet divizet gant Kuzul an Deskadurezh dige-
rif div skol-etre daoudeuek kembraek, unan hep dale e Y Rhyll hag unan
all diwezhatoc'h en Yr Wyddgrug (Mold). E vit danvezioù 'zo e vefe
kaset ar skolidi d'ar skolioù-etre saoznek a gaver er c'hêrioù-se (4).

Ur bodadeg a voe aozet e-doug Eisteddfod Aberdâr, d'ar yaou
9 a viz eost 1956, gant an U.C.A.C., Undeb Cymru Fydd (un doare "Asso-
ciation Bretonne"), hag Undeb Rhieni Ysgolion Cymraeg (Unvaniezh Ke-
rent ar Skolioù Kembraek), dindan renerezh Syr Ifan ab Owen Edwards,
krouer Urdd Gobaith Cymru . (5)

En e brezegenn e taolennas an Ao. Haydn Williams stad ar
yezh en e gontelezh hag ar politikerezh heuliet , ha displegañ roll -
labour kembraek ar skol-etre kembraek daoudeuek a vefe digoret e miz
gwengolo e Y Rhyll. Niver ar skolidi, hag a zise sevel da 400, a vefe 88
er bloaz kentañ . Ar c'hembraeg a vefe yezh ofisiel ar skol, da lavarout
eo e vefe implijet er pedernnoù, er porzh-c'hoari hag en darepredoù
gant ar skolidi. Bez' e vefe ar benveg-keleñn evit ar relijion, al len-
negezh kembraek, an istor, an douaroniezh, ar sonerezh, an embregerezh-
korf, al liorzherezh hag an dere-hel-tiegezh . Ar saoznek a vefe miret
evit ar jedoniezh hag ar skiantoù, war-dro 16 vloaz e vefe ar skolidi
divyezherien glok (6) .

(1) Y FANER, 7.4.50 ; 24.10.53 ; 21.1.54 .

(2) op.cit.p.15, embannet e 1952. (3) op.cit.niv.157,275, emb.e 1953.

(4) Y FANER, 18.4.56.

(5) Degouezhet e Kembre an 8 a viz eost, e oan aet, evel dre c'hañs, an
deiz war-lerc'h da Aberdâr . Heuliet em boa ar prezegennoù penn-da-berñ
ha tu em boa bet zoken da gomz gant Syr Ifan, an Ao. Haydn Williams
hag an Ao. Lewis, rener Aardwyn Grammar school en Aberystwyth.

En-dro da bark an Eisteddfod Broadel e vez savet ur bern
teltennoù bihan a vez feurmet d'ar c'helaouennoù, d'ar varc'hadourien
levrioù ha d'an holl oberoù. Eus stalig Y CYMRO, ur gelaouenn rannvro-
elour, e c'heller mont da weladenniñ hini Y DDRAIG GOCH hag ar WELSH
NATIONALIST, kazetennoù ar Strollad Broadel, eus diskouezadeg THE
CHURCH IN WALES (An Iliz e Kembre), Anglikan, da hini ar Getoliked
Kembraek. E-kichen teltenn vras ar gwelezh e kaver ivez unan vihanoc'h
evit ar bodadegoù a b seurt : kulturel, politikel h.a.

(6) Tro am boa bet da geñveriañ va notennoù gant ar pennadoù embannet
war Y FANER, 15.8.56 ha 22.8.56.

Skol Y RHYLL a voe digoret, ez ofisiel, d'an 19 a viz ker-
zu 1958 gant Syr Ben Bowen Thomas, an Dr Haydn Williams, rener an deska-
durezh hag an Ao. Jones, eil-rener (1). E gwengolo 1956 e oa 94 sko-
liad; e kerzu 1957, 171; e kerzu 1958, 247, war-dro 80 e pep bloavezh (2).

Hervez an Ao. Jenkins, H.M.I. en Y Rhyll, e komz an holl gelen-
nerien kembraeg, ha roet eo bet d'ar yezh al lec'h prometet. Implijet e
vez zoken evit keleñn al latin hag ar galleg, ha spi a zo d'hen ober
evit ar skiantoù hag ar jedoniezh pa vo klokaet ar geriadur .

Ar saoznek a vez kelennet evel eil yezh ha neozh, hervez,
an Ao. Leslie Harries, enseller, n'o doa ar skolidi disezament ebet gan-
tañ. O anaoudegezh eus ar yezhadur kembraek o skoazella da wellaat o
saozneg (3).

Ker pell ez eo aet brud vat skol-etre kembraek Y Rhyll ma 'z
eus bet komzet eus ober ganti ur skol-lojañ a gemerfe skolidi eus
Kembre a-bezh (4). Ne gav ket din e vefe bet sevenet ar menoz .

Embannet eo bet avat e bodadeg diwezhañ Kevredigezh Kerent
ar skolioù Kembraek, 28 ha 29 a viz mae 1959, e vefe digoret hep dale
ur skol-etre kembraek en YR WYDDGRUG (Mold).

Ur strollad kerent en deus goulennet ma vefe digoret unan
ivez e DYFFRYN MAELOR, e-kichen Wrecsam . Respontet eo bet dezho gant
rener an deskadurezh e vo tu d'o harpañ pa vint sur da gacut 50 skoliad
war ar roll evit deracuiñ. Komz a reer ivez eus sozañ ur gevrenn gem-
braek e skol-etre Maesydderwen, e-kichen Ystradgynlais. Hag emeur e gor-
toz da welout kontelezhioù Caerfyrddin ha Morgannwg d'ober un dra ben-
nak war an dachenn-se ivez (5).

E gwengolo 1956 en doa lavaret din an Ao. Angel en em gawe
e " Swansea Valley " div skol-etre tost an eil d'eben - 6 km hepken
etrezo , Ystalyfera ha Pont ar Dewe - hag e vefe posubl ober gant an
hini diwezhañ ur skol kembraek : a-walc'h a vistri hag a skolidi a vefe
kavet (6) .

Lavaret em eus dija e klaske Pennadurezh Kêr Caerdydd en
em glevout gant hini kontelezh Morgannwg e-sell da zigeriñ ur skol -
etre kembraek (7).

E beg ar stourm evit ar Skolioù-Etre Kembraek e kaver an
U.C.A.C. (Unvaniezh Vroadel Kelennerien Gembre) ha Kevredigezh Ke-
rent ar Skolioù Kembraek he deus kaset ur memorandum da Gyd-Bwyllgor
Addysg Cymru (Welsh Joint Education Committee) . (8)

(1) Y FANER, 25.11.1958. " Ar c'hembraeg , eme Syr Ben Bowen Thomas,
a zo un neudenn arc'hant hag hon stag ouzh ar bed klasel , hag ar
seizh skol kembraek a zoheñvel ouzh seizh iliz Azia ? "

(2) Y FANER, 12.11.1957 ha 4.11.1958.

(3) Y FANER, 18.12.58 .

(4) Y FANER, 9.1.58. " The New Secondary Education " , embannet gant mi-
nisterezh an Deskadurezh, a erbed ar Pennadurezhioù da grouiñ
skolioù-lojañ en abeg dreist-holl d'o zalvoudgezh kevredigezhel .
op.cit.p.16.

(5) Y FANER, 11.6.59 (6) Kement-se a oa ur menoz personel leshañ .

(7) gwel ar bajenn 19

(8) Y FANER, 16.5.1957.

Klozañ a rin ar pennad gouestlet d'ar skolioù-etre gant un nebeudig komzoù lavaret gant an Dimezell Cassie Davies, H.M.I. e boda- deg " Cymdeithas Gymraeg Dinbych " (Kevredigezh Kembraek Dinbych) :

" E-doug an ugent vloaz da zont e vo ret ledañ ar c'helennerzh dre ar c'hembraeg e skolioù - etre Kembre . N'eo ket gwell speredek rediañ ur bugel e Kembre da zibab etre yezh e vamm hag ur yezh estren er skolioù - etre .

Bez' e tlefed kas bugale ar pastelloù - bro- di-gembraek d'ar re embraek evit o soubañ er c'hembraeg, met ur Gouarnamant Kembreat hepken a c'hellfe urzhiañ kement-se e Kembre " .
(Y Faner, 25.2.60)

VI. PEDWERYDD AROLWG IAITH ,
SIR GAERNARFON ,
MAWRTH 1960.

Ar " Pevare Danevell diwar-benn ar Yezh " a zo bet savet war-lerc'h enklaskoù graet e c'hwevrer 1957 ha miz du 1959 (1) .

Menegiñ a rin hepken ar poentoù a-bouez evidomp e Breizh: Stad ar Yezh . War zigreskiñ ez a niver ar skolidi ganet diwar gerent kembraegerien o daou daoust m'en deus kresket niver ar skolidi. Tamall a reer an dilabour hag an divroañ war ar maezioù, berzh ar gembraegerien en arnodennoù hag er c'hargoù uhel, an amzer-soudard hag an douristelezh er Park Broadel Eryri, Snowdonia e saozneg . (2)

	1944 1 st danev.	1948 2 ^d danev.	1952 3 ^d danev.	1957 4 ^e davevell.	1959
niver hollek	18 555	17 208	17 785	19 077	19 227
kerent kembraeg.	12 758	11 567	12 031	11 758	11 061
tad kembraeger	1 397	1 339	1 737	2 380	2 517
mamm gembraeg.	998	1 134	1 737	2 380	2 517
kerent saozneg.	3 328	3 168	2 781	2 983	3 470
kerent estren	74	-	-	-	113

Divyezhegezh abred . Ar gembraegerien vihan a zeak an eil yezh kalz abretoc'h eget e 1944 en abeg da levezon ar radio hag ar skinwel.

Ar saoznegerien vihan ivez a c'hell kregiñ gant studi an eil yezh abred a-walc'h ha gant berzh mar bez heuliet an hent reizh hag implijet binvioù ha doareoù-kelenn dereat .

Er skolioù divyezhek o deus gallet ar skolaerien, e klasoù kemmesk, implijout ar c'hembraeg evit ar c'han, studi an natur, istor Kembre, an douaroniezh, ar Skritur Sakr; ha deskiñ d'o skolidi komz kalz gwelloc'h eget gwechall hep damant ebet d'o saozneg.

Skolioù Kembraek . N'eus ken nemet 100 skol gembraek kozh - e 1952 e oa 109 - ha 3 skol gembraek nevez e Landudno, Llandudno Junction ha Bangor.

An doareoù-skoliata a zo dindan evezh pedagourien ha kentelioù a vez roet d'ar vistri e Glynllifon gant ar C'helenner Bruce Pattison hag eil-kelennerien eus al " London Institute of Education " .

(1) divyezhek, e saozneg : " Fourth Language Survey, presented to the Local Education Authority " . 48 pajenn, ment 140 mm . 216 mm .

N'eus ket bet tu din da implijout na venegiñ an danevell-mañ e-kerz va studiadenn er pennadoù dereat, dre ma 'z eo bet embannet hepken e meurzh diwezhañ (1960). Ha gwell a se marteze : en doare-se e vo taolet muoc'h a evezh outañ.

(2) Ret eo bet zoken serriñ skolioù .

" Ar skolioù-se a zo mirourezed ar pezh a zo ar gwellañ e buhez hag e lennegezh Kembre, ha bez' ez int c'hoazh ouzhpenn an nor digor war kultur ar bed, ha sammañ a recnt ur garg pounner war gein ar vistri ". (1)

Skol-hañv Glynllifon. Evel e 1958 ha 1959 e vo bodet e Glynllifon, evit ur sizhunvezh e-kerz miz mezheven, strolladoù kembraegerien diwar ar maez ha divyezherien eus kêr.

Skolioù-Etre. Er skolioù-etre modern ez implijer ar c'hembraeg evit ar relijion, istor Kembre, hag a-wechoù evit an douaroniezh, ar sonerezh, ar viologiezh, ar galleg, ar skiantoù elfennel, an deroù hel-tiegezh, al labourioù-dorn.

Tu a zo c'hoazh da greskiñ lec'h ar c'hembraeg er c'helenneriezh, dreist-holl er skolioù gramadeg bremañ pa c'heller ober gant ar rolloù-gerioù divyezhek embannet gant ar skol-veur.

Politikerezh Yezhel. Er pajennoù 12-17 ez adembanner politikerezh yezhel ar Gontelezh adalek 1960. N'eo ket dis-heñvel diouzh hini 1952 nemet war daou boent.

El lodenn gouestlet d'ar skolioù izel, en artikl kentañ e lenner :

"Dylid dysgu plant ifaino trwy iaith y teulu, gorau oll trwy'r fam iaith".

"Young children should be taught through a home language - preferably the mother tongue".

"Dleout a reer kelenn ar vugale vihan dre yezh an tiegezh, ar gwellañ holl dre ar yezh c'henedik". (2)

E danevell 1952 ne gomzad ket eus " yezh an tiegezh ": "Dleout a reer kelenn ar vugale vihan dre ar c'hezh c'henedik".

El lodenn gouestlet d'ar skolioù-etre ez eus bet lakaet ouzhpenn an artikl 6 : "En arnodenn ar Certificate of Education e Caernarfon e ranko an arnodennidi tremen d'an nebentañ 4 danvez, en o zouezh ar yezh saoznek pe ar yezh kembraek, an niveroniezh pe ar jedoniezh.

Ar c'hembraeg a c'hell bezañ dibabet evel eil yezh gant un arnodenn-dre-gomz.

Tu a zo da respont d'ar goulennoù war an danveziou all en Kembraeg gant ma vo bet en em glevet a-raok".

Div evezhiadenn a rin war an artikl-se :

- 1- N'eo ket ret e Caernarfon kemer ar saozneg evel danvez : un dra nevez eo, gwelout ar studiadenn paj. 34.
- 2- Tu azo e Caernarfon da dremen an danveziou all dre ar c'hembraeg, pe pezh a zo bet divizet dija gant Kenguzul an Deskadurezh, gwel ar studiadenn p. 38, "skolioù".

G.C.E. e 1959. E gwirionez e oa bet lakaet an nevezinti-se da dalvezout 1959. Setu smañ statistikoù diwar-benn 317 skoliad, of Education at Ordinary Level.

(1) op.cit. p. 8 pe 9.

(2) an div destenn ofisiel ne seblantont ket bezañ heñvel-mik.

danvez	arnodennidi	degemeret
Yezh saoznek	307	211
Yezh kembraek	173	132
istor	184	105
douaroniezh	165	118
Skritur Sakr	151	85
lennegezh saoznek	125	76
lennegezh kembraek	87	50
Kembraeg evel eil yezh	41	40

" Paperennoù " (follennoù an arnodenn) an istor, an douaroniezh hag ar Skritur Sakr a oa bet embannet en div yezh : 55 arnodennad a zibabas ar c'hembraeg evit an istor; 2, evit an douaroniezh ; ha 62, evit ar Skritur Sakr. 212 arnodennad a oa bet degemeret.

Rolloù-labour evit an Eil Yezh. War c'houlenn un emvod eus Urzhierien Kelenneriezh ar C'hembraeg ("Trefnydd Iaith, Language Organizer") en Aberystwyth ez so bet embannet, e giz stagadenn^e dibenn an danevell, 2 roll-labour evit kelenn ar C'hembraeg, hag ar Saoneg evel eil-yezhoù e-kerz 6 bloavezhiañ ar skol izel (1).

(1) Ur wech bennak e vo embannet gant SKOL - spi am eus e vo roet an aotreadurioù rekis - ar rolloù-labour hag ar rolloù-gerioù embannet e "Trynydd Arolwg Iaith", aozet holl gant Urzhieriezh Kelenneriezh ar C'hembraeg e Caernarfon, an Dimezell Jennie Thomas.

VII. AR SKOLIQU UHEL .

AR SKOLIQU NORMAL .

Er skoliou normal e pad ar studioù 3 bloaz : 2 vloavezh a studioù boutin hag ur bloavezh evit en em varrekaat war un danvez bennak evel an arz pe al labourioù-dorn, an dero'hel-tiegezh, ar so-nerezh, an danveziou diwar ar maez, an danveziou teknikel.

Ensavadur an Deskadurezh, an "Institute of Education", ennañ dileuridi eus ar skol-veur, ar skol normal, ar pennadurezhioù lec'hel, eo a erbed da Vinistred an Deskadurezh ar studierien del-lezek da vezañ diplomat (1).

A-hed ar studiadennoù hon eus bet tro da welout penaos unan eus pennañ kudennoù kelennerzh ar c'hembraeg hag ar c'helennerzh dre ar c'hembraeg e oa hini ar vistri. An danevell "The Place of Welsh and English in the Schools of Wales" a c'houlenn ma vefe deskañ d'ar vistri penaos kelenn ar c'hembraeg evel eil yezh, ma vefe roet e-doug an trede bloavezh ur c'hour diwar-benn an divyezhegezh ha ma vefe krouet ur skol normal a gelennefep tra dre ar c'hembraeg (2).

Krouet ez eus bet - war-dro 1956, a gav din - ur gevrenn gembraek ("Welsh stream, Prwd Gymraeg"), e skolioù normal Bangor, Caerfyrddin ("Coleg Y Drindod") hag e Wrecsam. E-doug ar bloavezh kentañ, 1956-1957, e oa 32 skoliad e Bangor ha 36 e Caerfyrddin (3).

E skol normal Y Barri e kelenner ar c'hembraeg evel ken-tañ pe evel eil yezh. Ar gembraegerien a c'hell studiañ dre ar c'hembraeg an "danvez kembreat": ar c'hoariva, istor an deskadurezh e Kembre, ha displegañ pezhioù kembraek (4).

Ur gudenn all eo hini ar "QUOTA": pep kontelezh a c'hell dibab e-mesk ar vistri yaouank 1/25 hepken eus he mistri kozh. Evel (5) kalz a vroioù bihan all e vag Kembre re a vistri diouzh hec'h ezhommoù ha bep bloaz e vez ret d'un nebeut re yaouank mont da Vro-Saoz da dremen un toullad bloavezhioù. E giz-se e vez kollet alies ar vistri gwel-lañ - pennadurezhioù Bro-Saoz a zeu d'ober o choaz abred - ha kalz eus ar re varrekañ war ar yezh hag an tommañ outi.

(1) "Becoming a Teacher", p.p. 6.7.

(2) op.cit. p.p. 60.62.

(3) Y FANER, 20.2.57.

Bez' ez eus e Kembre 5 skol normal en tu-hont d'ar 4 "teaching departments" stag ouzh 4 skolañ ar Skol-Veur.

(4) An Dill Norah Isaac.

(5) E Friesland ivez, ha, moarvat, e Breizh.

N'eus ket pell e klamme c'hoazh diwar an divroadeg-se an Ao. Jac. L. Williams, eus Coleg an Drindod, Caerfyrddin. "Ar skolaerien-se, emezañ, a zo kollet evit Kembre. Diazezañ a reont en o bro nevez ha sevel o bugale e-giz saozon. Ha neuze kalz re a zanvez-skolaerien a zo ha re nebeut a studierien war micherioù teknikel hag an impli-jou-stad: emañ renerezh an ijinerezhioù ha zoken al labour-dour etre daouarn estrenien (1). Kement-mañ a zo ur gudenn all, met n'heller ket lavarout n'he deus netra d'ober gant kudennoù amzer-da-zont ar yezh".

E 1950, diwar 162 hag a studiañ ar c'hembraeg e vos anvet 85 e Kembre (2). E 1957, 50 diwar 81, en o mesk, 25 plac'h diwar 48, ha 6 paotr diwar 33 (3).

KUDENN AR SKOL - VEUR .

An danevell "The Place of Welsh and English in the Schools of Wales" a echu gant ur galv ankrezet d'ar Skol-Veur:

"Met n'omp ket laouen o welout ne glask ket ar skol-veur tamm-ha-tamm implijout ar c'hembraeg evit kelenn. Gouzout a reomp e vefe diaes dizoloñ kelennerien ha bodañ a-walc'h a studierien ma f vefe graet gant ar c'hembraeg yezh pennañ, pe zoken dre vras hepken, yezh ar c'helennerzh. Met e kevrennoù 'zo e tlefe bezañ posubl d'an holl studierien hen karfe bezañ kenteliñ e kembraeg. N'eus ket gwelloc'h doare da rentiñ d'ur yezh al lufr a zo dleet dezhi..." (4)

An enebourien a gav da lavarout ez eo ar c'hembraeg ur yezh vihan ha barn ar ouizieien da skrivañ enni a vefe o zoullbañ-hañ. Dezhio e respont ur c'helenner eus skol-veur Bangor:

"Ma 'z eus gant kemiourien kembraegerien un dra bennak a-bouez da zegemenn d'ar ouiziegezh strevroadel e vo gouezet a-raok pell. Souezhus eo gwelout pet eus hon teologourien a boagn da zeskiñ ar svedeg evit gellout ober o mad eus ar gelenadurezh a skriver er yezh-se" (5).

(1) Y FANER, 16.4.59.

(2) "The Place of Welsh..." p.62, niv.290.

(3) Y FANER, 24.10.57.

(4) op.cit. p.74, niv.360.

(5) an Dr Tudur Jones, Coleg Bala-Bangor, Bangor. Y FANER, 15.8.57.

(kendalc'h notennoù ar bajenn 51)

ne vo ken ar yezh nemet un danvez studiet er skolioù.
Kenzoù frealzusoc'h ha gaver el levrig divyezhek "Bilingualism and The Language of Truth", gant an Tad Owen Hardwicke (a zo bet e-pad ur pennad sekretour an Ao. 'n Eskob Petit.), daoust ma 'z eo dreist-holl ur skrid berr enep an "Iliz e Kembre". (1958)
An Eskob, gwir eo, a zo ur saoz; hag ar beleg, ur c'hembread.

VIII . AR C'HEMBAERG ER VUHEZ PUBLIK .

AR RADIO , AR SKINWEL , AR SINEMA .

A bep seurt abadennoù a vez skinet gant ar B.B.C. evit ar gembraegerien : keleier, kaezeadennoù, divizoù, pezhioù-c'hoari, kanaouennoù, ofisoù, skol gembraeg .

Daou rummad-kentelioù a vez evit ar skolioù : kentelioù diwar-benn istor, hengounioù ha douaroniezh Kembre, darvoudoù bras ar bed (1), hag ivez kentelioù war ar c'hembraeg evel eil yezh . E 1939, e selaeue 800 skol ar c'hentelioù war ar yezh hag e 1952 e vefe bet div wech muioc'h anezho (2).

Daou rummad-kentelioù kembraeg, diazezet war ur geriadur ehn, a oa bet skinet etre 1947 ha 1952 (3). Evit pep rummad-kentelioù ez eus bet embannet ul levrig evit ar skolidi. En doare-se ez eus tu da studiañ ar gentel a-raok ha goude ar skinadenn. An holl skolaerien o deus anzavet e oant bet skoazellet en o labour gant ar c'hentelioù-se hag o doa ivez tommet o skolidi ouzh ar yezh (4).

Daoust da se e klemm kalz a gembreiz : fellout a rafe dezho kaout ur Gevredigezh Radio. Tamall a reont d'ar B.B.C. reiñ ul lec'h re vihan d'ar c'hembraeg . (5)

Ur gudenn all eo hini ar Skinwel . Ar binvioù-degemaer a zo niverus e Kembre - gwelst e vez ar stignoù e kornioù pellañ ar vro - ha bras eo levezon ar c'hasadennoù war yezh ar vagale. (6).

- (1) E-pad bloavezhioù , pa oan kure hepken e Ploueg-Ar-Mor, em eus bet selaouet bep sizhun "Cwrs Y Byd " ha kentelioù all .
- (2) "The Place of Welsh ..." p.29, niv.36.
- (3) Erbedet eo bet zoken ar geriadur gant " Dyegu Cymraeg fel ail Iaith mewn Ysgolion Morgannwg", p.p.13.14.
- (4) Skinet e vez ivez e saozneg kentelioù diwar-benn an danvezioù kembreat, v.g. " The Story of Wales ", eus 1954 da 1960.
- (5) N'em eus ket merket lec'h an arrouden, ur gelaouenn bennak moarvat. D'al lennerien d'am digarezif. Setu amañ taolenn an amzer gouestlet d'un nebeut yezhoù estren gant ar B.B.C. e-pad ur sizunvezh :

Arabeg	: 66 eur hanter	Rusianeg	: 15 eur 45 mn.
Alamaneg	: 28 eur 45 mn.	Hongareg	: 14 eur
Spagnoleg	: 21 eur	Poloneg	: 14 eur
Galleg	: 21 eur	Italianeg	: 13 eur 45 mn.

KEMBRAEG : 12 eur.

- (6) Fellout a reer dispenn labour mat ar skolioù kembraek mar da ar vagale d'ar gêr da sellout ouzh an T.V. (skinwel) saoznek eus 18 eur da 22 eur. an Dr Haydn Williams, en ur brezegenn e Londrez, rener an deskadurezh e Sir Y Fflint. Y FANER, 29.10.59

Div Gevredigezh Skinwel a zo e Kembre : ar B.B.C. hag an Independent Television Association , e herr an I.T.A.E-doug ar sizhun a yae eus ar 7 d'an 13 a viz mezheven 1959 e oa bet skinet abadennoù kembraek gant ar B.B.C. : ar sul eus 13 eur da 13.50 50 mn. (1)
bemdeiz eus 13.15 da 13.50 90 mn.
140 mn.

gant an I.T.A. : bemdeiz eus 16.20 da 17 eur
40 mn..7 = 280 mn.

EN HOLL e-pad 420 mn.(7 e.)

D'an 22 a viz ebrel 1959, he deus kroget ar B.B.C. gant ur rummad a 5 abadennoù evit ar skolioù (2). Evit ar mare n'ouzon ket muioc'h diwar-benn ar gudenn.

Met gout a ouzon mat e kav da gembreiz 'zo na vez ket roet ul lec'h dereat d'o yezh war stignoù ar skinwel ha na vo suraat amzer-da-zont o yezh nemet p'o devo ur c'haslec'h evit Kembre hepken; ha moarvat emañ ar wirionez ganto (3).

Setu amañ hervez un enklask embannet gant " Y Gloriannydd ", ar berzh a ra ar skinwel hag ar sinema e-touezh 180 skoliad eus ur skol-etre en unan eus ar c'hontelezhioù kembraekañ, Môn (Anglesey)(4).

Prenañ a reont bep sizhun 276 "comics", gelaouennoù skeudennaouet stank ; 71 a yae d'ar sinema ur wech ar sizhun; 33, div wech; ha 7 teir pe beder gwech . Binvioù skinwel a oa e 40 % eus an tiegezhioù ha 19 eus ar 106 bugel n'o doa hini ebet er gêr a oa kustum da vont da arvestiñ an abadennoù e ti o amezeien .

16 % anezho ne daent da chapel na da iliz ebet evit an ofis pe ar Skol Sul; unan diwar bemp ne oa bet morse en un azeuldi bennak (5). 52 % a gomz kembraeg dalc'hmata; 17 % gwech ar amzer, ha 31 % ne oant ket kembraegerien daoust ma oa o c'herent (5). Betek-hen, 1958, n'eus skol kembraek nevez ebet ha levezon an " Urdd Gobaith Cymru " a zo dister. (7)

- (1) Y FANER , 11.6.59 . (2) ib.23.4.59 (3) ib.17.7.58.
- (4) Y GLORIANNYDD, ur gelaouenn relijiel eus an hantornoz . An doareoù-mañ a zo bet lennet ganin war an "DAILY POST" eus an 1.8.58 din-dan an talbenn : " Welsh Review ", gant Arfon.
- (5) Pezh a rafe 20 % . Em em c'houlen a ran ouzhin va-unan hag-ef n'eus ket bet graet ur fazi.
- (6) 69 % a zeue eus tiegezhioù kembraek. Hervez an enklaskoù ofisiel, "The Place of Welsh" p.90, appendix II , e oa er gontelezh 4 917 skoliad etre 5 ha 15 vloaz diwar 6 668 hag o doa ar c'hembraeg evel yezh kentañ, 73 %.
- (7) Aozer ar pennad a c'houlen digant Pennadurezhioù an Deskadurezh er Gontelezh dihanñ ha digeriñ Skolioù Kembraek Nevez el lec'hioù saoznekaet evel Caerwyn (Holyhead, ur porzh-mor e-lec'h ma lestrer evit Iwerzhon), Beaumaris , Benllech, Amlwch ha Llangefnî; hag aspadif ar bastored ha renerien an "Urdd" da brientiñ ur groaziadeg enep ar saoznekaet hag an amerikanat .

AR C'HEMBAERG ER VERADUREZH .

Mar deo divyezhek ar geleannadurezh e Kembre, ne deo ket ar Veradurezh, en un doare ofisiel, daoust ma c'houlenner digant kalz a implijidi gouzout an div yezh.

Kembrekaet eo bet anvioù al lec'hioù bep gwech ma 'z eus bet tu d'hen ober hep kemm. Met darn evel "Swansea, Cardiff, Holyhead" a zo chomet digemm. Daoust hag ar gwir a zo da skrivañ ar stumm kembrek hepken, Abertawe, Caerdydd, Caerdybi, war goloioù al lizhiri ? Respontet eo bet kement-mañ, dre bellgomz, gwir eo, d'an Dr Iorwerth Peate, rener Mirdi Fokloreel Sain Ffagan: "Pep chomlec'h e kembraeg 'zo direizh ha n'hell ket eta ar Post grataat e tizho al lizher penn e veaj. Skrivañ ar chomlec'hioù e kembraeg a zo klask evit ar yezh-se ar renk ofisiel" (1)

Aze emañ ar gwiridig: degemerout ar c'hembraeg evel yezh ofisiel a vefe rediañ holl implijidi ar stad da zeskiñ ar yezh ! Da c'hortoz an deiz kaer-se, ez eus kêrioù ha kumunioù hag a ra gantañ evel pa vefe ur yezh ofisiel. Kuzul Maezioù Twrcelyn, Môn (Anglesey), (2) en deus divizet embann paperennoù an tailhoù en div yezh. Dijsa e vez dalc'h et ar bodadegoù hag an danevelloù e kembraeg. Danevelloù bodadegoù Kuzul Kontelezh Caernarfon a vez diskrivet ivez en div yezh (3). Er c'hontrol, Kuzul Maezioù Llanelli a nac'h ouzhañ an Itron Trefor Beasley follennoù tailhoù e kembraeg. (4)

AR GWASK EKONOMIKEL .

N'eo ket ar c'hembraeg a vez gwelet o vont kuit, met ivez ar gembraegerien a rank divroañ evit gounit o bara. Etre 1911 ha 1948, en doa kollet Môn 12,4 % eus e boblañs; Sir Gaerfyrddin, 21,23 % ! (5) Ha kenderc'hel a ra ar reuz peogwir etre 1952 ha 1959 ez eus bet serret 9 skol kembraeg war maezioù kontelezh Caernarfon (6). Divroañ a reont d'ar c'hreisteiz met peurvuiañ da Vro-Saoz .

D'an 9 a viz mae 1957 e tisplege rener skol-etre Nantle kement-mañ: E-pad ar brezel 40 skoliad eus Londrez ha Liverpool o doa desket ar c'hembraeg ha tremenet arnodennoù war ar c'hembraeg. Goulenmet e vez digantañ, emezañ, perak ne ra ket gant e skol ur skol-etre kembraeg. Kudennoù al levrioù hag an arnodennoù a zo aes da ziskoulmañ gant an amzer; hini ar geleennerien a zo disesoc'h; ar gudenn startañ eo hini amzer-de-zont ar skolidi: diwar 10 ez a 9 da labourat en ur vro saoznek. "Hor c'hudenn n'eo ket derc'hel bev hor buhez kembraeg. Gwelout a reer ez eo kreñv e pep lec'h, en ofis beura, war ar porzh, er bodadegoù. Hor c'hudenn vras a zo deskiñ ar saozneg d'ar vugale, ar saozneg a vo yezh o bara !" (7)

- (1) Y FANER, 10.7.58. (2) "Twrcelyn Rural Council" a bled gant ar maezioù.
- (3) LIVERPOOL DAILY POST, 29.7.58.
- (4) an afer-se he deus trouz ha mesk e Kembre a-bezh. Nevez 'zo ez eus vet kaset d'ar c'huzul ul lizher sinet gant gelennerien ha 120 studier eus skol-veur Bangor, Y FANER, 31.3.60. Alies e vez komzet diwar he fenn er gelaouenn-se. Me'gav din ez eo bet lakaet zoken ar werzh war darn eus ar rebeuri an Itron Beasley.
- (5) "The Place of Welsh..." p.19, niv.81 (7) Y FANER, 16.5.57.
- (6) Gwelout ar studiadennoù-mañ p.43.

AN ILIZOÙ .

Ma 'z eus nerzhioù hag a labour a-enep d'ar yezh ez eus ivez reoù all hag a stourm a-du. En o zouezh e c'heller menegiñ hini chapelioù ar brotestanted nannanglikan dreist-holl.

En amzer dremenet ar Bibl en doa roet e stumm d'ar yezh lennegel hag e levr ar Bibl c'hoazh e teske gwechall an dud lenn ar c'hembraeg e-kerz ar Skol-Sul. Hiziv c'hoazh zoken, ha pa vez ar yezh en argoll, e talc'h ar bastored d'eo yezh muiañ ma c'hellont, pellañ ma c'hellont: evito " ar Feiz hag ar Yezh a zo breur ha c'hoar" E pep lec'h hogos e vezont e beg ar stourm evit ar skolioù kembraeg hag e penn kevredigezhioù ar gerent (1).

Siwazh ! war goazhañ ez a bemdeiz niver ar re yaouank a heuilh an ofisoù hag a bleustr ar skol-sul. Skrivet ez eus bet ne dae ket ar c'hard eus ar re yaouank d'ar chapelioù. (2) Kement-se ne dalv ket da lavarout e vezont savet digristen gant o zud peogwir e krog pep devezh er skol gant un ofis berr hag e vez roet an holl skolioù kente-lioù war ar Bibl. Met diskouez a ra memes tra e tistag tamm-ha-tamm ar yaouankiz diouzh hengounioù ar vro hag an doare-bevañ kembraeg .

- (1) Gwelout al levrioù-hioù-mañ : (2) Y FANER, 17.10.57, Idwal Jones. " Yr Ysgolion Cymraeg, En Hârwyddocad Crefyddol " (Ar Skolioù Kembraeg, O Zalvoudgezh relijiel), gan Y Parch. Trebor Lloyd Evans, M.A.B.D. 1953.

"Dylanwad yr Ysgolion Cymraeg ar yr Eclwsi" (Levezon ar Skolioù Kembraeg war an Ilizoù), gan Y Parch. J.E. Meredith, M.A. Embannet gant Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraeg. s.d.

" The Foundations of Welsh Education " (Diazezoù an Deskadurezh Kembraeg), an address by the Reverend Canon G.O. Williams, A.A. Llandoverly, at the annual Conference of Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru at Swansea, Wednesday, 13th April 1955.

Bez' ez eus ivez ur moulladur kembraeg " Seilliau Addysg Yng Nghymru " (Ar Reverend G.O. Williams a zo moarvat ur chaloni eus an Iliz Anglikan, " an Iliz e Kembre " .

" Dyneiddiaeth Mewn Byd Technolegol " (Denoniezh en ur Bed a Deknolegiel), gan J.Gwyn Griffiths, M.A., yng Nghyfarfod Cyhoeddus Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru yn Aberpennar, Awst 7, 1946.

Levezon ar gatolikezh a zo bihan evit ar mare daoust ma 'z eo dedennet ganti lod eus ar vrogarourien evel Saunders Lewis, unan eus ar skrivagnerien vrasañ. En eskopti Menevia - al lodenn vrasañ eus Kembre, ha Kembre kembraek hogos abezh - ez eus 21 000 katolik diwar 900 000 a dud; en eskopti Caerdydd, 93 344 diwar 1 772 289, hag ar Pêp an Ao. John E. Petit, eskob Menevia a anavez en ur pennañ embannet gant ar "Catholic Gazette" e 1951, al liammoù kreñv a stag ar relijion e Kembre ouz ar yezh: "... rak soñjal a ran e c'heller lavarout e varv ar relijion e Kembre e-lec'h ma varv ar yezh hag e skuilh he c'hontamm an danvezelouriezh he deus graet kement a zroug speredel e Bro-Saoz. "Pezh na harz ket an Esko. da lavarout emañ ar yezh o vont kuit e-touezh ar yaouankiz ha ma kendalc'h e gis-se (kendalc'h an notennoù p.47) - 51 -

IX. AMZER - DA - ZONT AR YEZH : UNYEZHGEZH PE DIVYEZHGEZH ?

Ne gav ket din e vefe kalz a dud o kredif en divyezhegezh ofisiel evel m'eo bet termenet ha lakaet da dalvezout gant an danevell : " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " Kreisteiz ar vro a vez kembraeket un tamm muoc'h bemdeiz, met an hanternoz a vez saoznekaet un tamm mat muoc'h bemdeiz. Ar pezh a vez gounezet war un tu a vez kollet war an tu all, ha kalz muoc'h c'hoazh.

An Ao. Idris Foster, kelenner war ar yezhoù keltiek e skol-veur Oxford, a skrive kement-mañ e 1954 : " Lavaret ez eus bet ez eo bet kemeret evel pal ar pezh a zefe bezañ hepken ur c'hammed war e du peogwir ar c'hultur kembraek n'hello bevañ ha bleuniañ nemet en ur vro unyezhek (1).

An Dr Iorwerth Peate, rener mirdi Sain Ffagan a zisplegas e savboent war ar gudenn e-doug Eisteddfod Aberdâr e 1956 (1).

E-pad ar c'hantved diwezhañ hag e derou ar c'hantved-mañ - e-keit ha ma 'z eo chomet pep kêriadenn klozet warni hec'h-unan - e oa kreff ar c'hembraeg. Bez' e oa yezh ar pezh a gared hag a zoujed, yezh ar relijion (2). Ar saozneg a oa yezh ar pezh a gasaed. Tamm-ha-tamm e kemmas an daolenn. Ar saozneg a zeuas da vezañ yezh ar berzh danvezel, yezh an arc'hant : yezh ar pezh a gared; met ar c'hembraeg a gendalc'has da vezañ yezh ar pezh a zoujed : yezh ar relijion. Kembraegerien an amzer-se a savas e kêrioù Bro-Saoz trevadennoù nerzhus.

Ar stad-se a voe kemmet gant ar Brezel Bras Kentañ pa bellaas al lodenn vrasañ eus an dud diouzh ar relijion. E-keit-se e oa deuet ar saozneg da vezañ yezh ar berzh danvezel hag ivez yezh an deskadurezh hag ar c'hultur a zoujed. Ar wask, ar sinema, ar radio a bouezas gant o holl nerzh war an emzispiegadur-se.

Un dra nevez a c'hoarvezas : un dornad tud a zizoloas talvoudigezh ar c'hembraeg. Siwazh ne dint nemet un niver bihan e-touezh ar gembraegerien, met evito ar c'hembraeg a zo yezh ar pezh a garer (3).

(1) " Blackfriars ", meurzh 1954. An dastumadenn-se a vez embannet gant an dominikaned, an tadoù du. Renet eo bet, mar ne deo ket ken, gant ur c'hembraeger, an Tad Illtud, am boa kejet gantañ en Aberdâr.

(1") Y CYMRO, eost 1956. (Ur gelaouenn sizhuniek kembraek, ramvroelour)

(2) d'ar mare e oa niverus an dud vunut dedennet gant al lennegezh. Ar saoz Georges Borrow a zeskas ar c'hembraeg hag a veajas e Kembre e-pad mizveghioù. Skrivañ a ran kement-mañ en e levr : " Peseurt di-forc'h, emezon d'am gwreg, etre ur c'hembread hag ur saoz a renk izel ! Petra en defe respontet din mevel ur milliner eus ar Suffolk mar em befe displeget dezhañ gwerzhennoù tennet eus Beowulf pe Chaucer, ha mar em befe goulnnet digantañ un dra bennak diwar-benn ti Skelton ? ". WILD WALES, p.107 ; kement-all a skriv er bajenn 120.

Al levr-se, hag a lenner evel ur romant, a daolenn buhez Kembre e-doug an 19^{vet} kantved.

(3) zoken en hon amzer e kaver tud desket e-touezh ar vicherourien. Nevez' zo ur mengleuzier en deus legadet da skol-veur Aberystwyth 400 levr kembraek prenet etre 1930 ha 1946. Bep bloaz e prene 25 levr ! NEWS CHRONICLE, 24.8.56

N'heller ket distagañ ur yezh diouzh an doare-bevañ. Ret eo ma vefe ur benveg naturel da zisplegañ ar pezh a garer hag a zoujer. Ret eo ma teufe an ezhomm eus diabarzh an den. Ha setu perak ne wel silvidigezh ebet evit ar c'hembraeg nemet en ur vro unyezhek (1).

Peseurt unyezhegezh ? Setu ar gudenn. An Ao. J. Daniel, H.M.I. a lavaras din e 1958 : " Saunders Lewis hag a gomz mat kembraeg, saozneg ha galleg a zo un unyezher dre ma soñj dalc'hmat e kem-braeg " (2). Ret e vefe da gentañ termenañ ar ger-se ha neuze e c'hellfed tostaat ha, marteze, lakaet da gejañ an eil gant - egile daou savboent hag a seblant kontrol-bev.

Setu ar pezh a glask ober an Dr Tudur Jones er pemad-mañ : " Kembre unyezhek eo ar pal, ar pal nemetañ, pe lezel da vervel. Gou-zout a ran e lakay kement-mañ meur a hini da grenañ. Met ar pezh a fell din lavarout eo e tle ar c'hembraeg dont da vezañ yezh buhez, kenwerzh, deskadurezh ha relijion ar vroad.

N'eo ket dre ma 'z eo Holland ur vro unyezhek ne vefe ket enni milieroù a dud barrek da implij ha da gomz yezhoù all " (3).

(1) danevellour Y CYMRO, Harri Gwynn, en en deus spi ne vo ket ar wirionez ken kriz ha poellataerezh an Dr Peate ha kenderc'hel a ra da fiziout en divyezhegezh, pe e kouezho ar vro en un unyezhegezh saoznek.

(2) Saunders Lewis n'eo ket hepken unan eus gwellañ skrivagnerien Gembre, met bez' ez eo ivez - ar saozon hen lavar - unan eus brasañ-dramacourien Breizh-Veur. Ne gomprenont ket avat perak e kendalc'h da skrivañ en ur yezh vihan ha pa c'hellfe ken aes ober gant unar vedel.

(3) an dud o deus graet an disterañ studi a zo barrek da gomz saoz-neg, alamaneg ha galleg. En holl stalioù-levrioù e kaver mouladu-rioù-godell er yezhoù-se da brenañ, hag e pep burev e kejer gant implijidi ampert-kenañ d'ober ganto.

" Pep pennadurezh lec'hel a ziviz penaos e vo dibabet ar vugale -vit e skolioù-etre " (1)

ARNODENN AR " SCHOLARSHIP EXAMINATION " .

A-hed va studiaden em eus bet tro meur a wech da gomz eus arnodenn ar skol-etre gramadeg anvet ar " scho'arship examination " ha da verkañ al lec'h bras a zalc'he e buhez ar skolioù hag an tiegezhioù. Ul lec'h direizh moarvat, m'kaer e vo lavarout hag ober, diaes e vo d'ar bedagogourien kemañ an aergelc'h a helebini hag a en-krez a zo bet krouet. Un nebeut arroudennoù a roio da gompren ster an arnodenn, hec'h efedoù war ar skol, ar skolidi hag ar gerent .

PETRA A ZLEFE BEZAN .

Setu menoz un den a vicher, an Ao.N.P.Alexander, Ph.D, Ed.B., M.A., B.Sc, gwechall rener an deskadurezh e Sheffield :

" Ar bennaenn vras, eo diazezet warni an têtstoù a dalvez da zibab ar re ouest e-touezh an arnodennidi , a zo kentoc'h eun . Ret eo respont da ziv c'houlenn en dibab-se : da gentañ, ha bez' ez eo barrek a-walc'h ? ; d'an eil, ha bez' ez eo desket a-walc'h war an danvezioù retañ evit kregiñ gant studioù-etre gramadeg ?

An div c'houlenn a zo dispartiet hag an div c'houlenn a zlefe bezañ dispartiet. Fall eo, hervez an aozer, meskañ disoc'hoù têtstoù an deskamant ha disoc'hoù têtst ar varregezh. Gwelloc'h eo lakaat tremen têtst ar varregezh da gentañ, evit respont d'ar gouleñn kentañ, ha neuze lakaat tremen an têtstoù war ar saozneg hag ar niveroniezh, hag a zo an danvezioù pennañ , evit respont d'an eil gouleñn. Gounit un nebeut poentoù ouzhpenn e niveroniezh pe e saozneg, ne zlefe ket digoll un notenn izeloc'h evit têtst ar varregezh . Arnodennidi ar "scholarship examination" a zlefe bezañ bugale speredek hag o deus desket ar pep retañ evit kregiñ gant al labour o devo d'ober diwezhatoc'h ! (2)

PETRA A C'HOARVEZ ? .

"Ar vistri ne zleont ket soñjal hepken prientiñ an arnodenn; roll un arnodenn a zo servijiñ ar gumuniezh hag he skolioù ha n'eo ket mac'hañ buhez an eil hag eben betek o gwanaat ha herzel outo d'en em zisplegañ en un doare krefv ha personel " . (3)

"Dre an arnodenn-se e vuzulied dre vras an deskamant daoust ma 'z eus bet graet, hep mar, fazioù enep ar reizhded en abeg d'ar boaz da choukañ traoù er pennoù ha d'an doareoù-kenstrivañ a zo dezhi " (4)

- (1) "Education", p.17 . (2) "Thasset Mental Tests", University of London Press.
(3) "The Future of Secondary Education in Wales" p.10 .
(4) " Y Broblem Ddwieithog ", p.22.

" Ar gerent a zo bet rebachet dezho hiziv e Caerdydd kenderc'hel da vegañ dispriz evit deskadurezh ar skolioù-etre modern. Komite ar skolioù-etre en deus divizet ne vefe ket embannet gant ar Wask anvioù ar vugale degemeret er skolioù-etre gramadeg. An arnodenn-se , eme rener an deskadurezh , an Ao.Robert Presswood, ne oa ket un arouez a verzh pe a zroukverzh, daoust ma oa diskiant a-walc'h kerent 'zo evit hen soñjal pa ne vez ket degemeret o bugale er skolioù-etre gramadeg ! (1)

" Hervez un nebeut danevelloù lennet en ur gelaouenn saoznek e vez drouk kerent 'zo ouz o bugale pa c'hwitont arnodenn ar skol-etre pe ba ne labouront ket ervat er skol. E Pwllheli e oa bet lavaret kement-mañ gant sekretour rannvroel Kevredigezh Diwallerien ar Vugale ("Cymdeithas Atal Creulondeb at Blant") : "Chivousted - spered eus an doare-se , pa vez ar gerent o klask gounit yalc'hadoù ... a oa unan eus kudennoù donañ ar gevredigezh ... Efed fall he doa zoken war yec'hed ar vugale !

(...) En gwirionez, ur c'hart eus ar vugale degemeret er skolioù-etre gramadeg n'eo ket barrek da vont di... Pet eus bugale ar skolioù gramadeg a c'hell ober studioù uhel pa guitaint ? nebeut-kenañ .

(...) Un diazez mat a roed (gwechall) er skolioù izel , ha n'eo ket choukañ traoù er pennoù evit tremen an arnodenn a-rack unnek vloaz. Souezh ebet e kuitafe hiziv ar vugale ar skolioù izel hep anaout ar reizhskrivadur ha hep gellout skrivañ ha lenn ervat. En gwirionez, darn n'ouzont ket hen ober pa guitaont ar skol-etre gramadeg ! (2)

HA KOULSKOUDE ...

" Ur spered lemm dre vras ha plegioù ispisial n'int ket ar faktorioù nemeto a c'hell lakaat d'ober berzh er skol pe er vuhez. Kendalc'husted, nerzh ar youl, ur garantez tomm evit ur gudenn a-bouez, etabilded psi - kologel, hegarated ha perzhioù all eus an tamm-spered a c'hell lakaat un den nebeutoc'h donezonet da skoazellañ muioù h'ar gevredigezh eget un den donezonet-kaer a vank dezhañ an holl berzhioù-se ! (3)

(1) " NEWS CHRONICLE " 7 6.9.56.

(2) Kate Roberts, war Y FANER, 13.2.57 . Meuliñ a ra labour ar skolioù-etre modern. An Itron-mañ a zo unan eus gwellañ skrivagnerien Bro-Gembre. Aozet ez eus bet ganti 3 romant brudet ha dastumadegoù kontadennoù berr a zo bet troet e meur a yezh.

Nevez'zo ez eo bet roet dezhi ur priz a 100 lur saoz - war-dro 1400 lur nevez - gant Kuzul an Arzoù e Breizh-Veur, evit he levr " Te yn y Grug " (Y FANER, 14.4.60)

(3) "The Future of Secondary Education in Wales", niv.35.

STAGADENN II.

TESTENNOU AN ARNODENN WAR AN EIL YEZH

E CAERNARFON .

Caernarvonshire Education Committee .
Secondary Schools Entrance Examination .

Friday , May 1st 1959 .

LANGUAGE PAPER A 2 .

PART I. (MINOR LANGUAGE).

Time : 30 mn. From 2.15 to 2.45 p.m.

Atebwch Y Gwestiynau i gyd .
(Answer all the Questions).

Qwestiwn 1 Llenwch y bylchau yn y brawddegau canlynol .
(Fill the blanks in the following sentences).

- (a)yw eich enw ?
.....enw yw
- (b) Beth yw eich oed ?
Yr wyf ynoed .
- (c) Abrodyr a chwilyrydd?
Oes, y mae gennyf ddau frawd a dwy
- (ch) A ydych yn myndysgol arSadwrn ?
Nac.....

Qwestiwn 2. Gwnewch dair brawddeg gan ddefnyddio 'r geiriau a ganlyn.
(Write three sentences using the following words).

- (a) robin, dyma, goch .
- (b) ar y ddaear, eira, mae .
- (c) robin goch, ar y gangen, mae'r, yn sefyll .

Qwestiwn 3. Gorffennwch y brawddegau hyn :
(Complete these sentences).

- (a) Gwelodd ef
- (b) A gafodd hi
- (c) Yr ydych chiwi
- (ch) Nid yw 'r.....
- (d) Sut

Qwestiwn 4. Darnllewch y darn hwn yn ofalus ac yna atebwch, mewn brawddegau oflawn, y cwestiynau sy'n dilyn :

(Read this passage carefully and then answer, in complete sentences, the questions that follow).

Dyma'r teulu wrth y bwrdd brecwast. Wrth ben y bwrdd y mae 'r fam yn eistedd, ac wrth y pen arall y mae 'r tad yn eistedd. Y mae Mair y ferch yn eistedd wrth y bwrdd ac o'i blaen y mae plat a chwpan a soser, ond nid yw ei brawd yno eto. Y mae llestri a bwyd ar y bwrdd. Ar ganol y bwrdd y mae dysegl fawr â ffrwythau ynnddi. Nid oes dim cig nac wyau i frecwast y bore yma .

- (a) A yw 'r teulu i gyd wrth y bwrdd brecwast ?
- (b) A yw Mair yn eistedd wrth y bwrdd ?
- (c) Ble mae 'r ffrwythau ?
- (ch) Rhwch enwau 'r llestri sydd ar y bwrdd .
- (d) A oes wy i frecwast y bore yma ?

o o o o o
o o o
o

Pwyllgor Addysg Sir Gernarfon .
Arholiad Derbyd i'r Ysgolion Uwchradd .

Dydd Gwener, Mai 1, 1959 .

PAPUR IAITH B.2.

RHAN I. (YR ALL IAITH).

Amser : 30 munud . O 2.15 p.m. hyd 2.45 p.m.

Answer all the questions .
(Atebwch yr holl gwestiynau).

Question 1. Fill the blanks in these sentences with suitable words.
(Llenwch y bylchau â geiriau cyfaddas).

- (a) What isname ?
.....name is
- (b) Howare you ?
I am age .
- (c)you any brothers and sisters ?
....., I have two brothers and two.....
- (d) Do you go.....SchoolSaturday ?
No,.....

Question 2. Make three sentences about moles from these words .
(Gwnewch dair brawddeg am dyrchod daear allan o'r geiriau hyn).

- (a) very, animals, are, interesting, little .
- (b) live, almost, lives, whole, they, underground, their.
- (c) do, well, in, not, see, daylight, they.

Question 3. Complete these sentences .
(Gorffennwch y brawddegau hyn).

1. He saw.....
2. Did she
3. You have
4. Yesterday.....
5. In his spare time ..

Question 4. Read this passage carefully and then answer, in complete sentences, the questions which follow .

(Darllenwch y darn hwn yn ofalus ac yna atebwch, mewn brawddegau c'flawn, y cwestiynau sy 'n dilyn).

Here is the family at the breakfast table. At the head of the table sits the mother, and at the other end sits the father. Mary the daughter is also at the table, and before her is a plate, and a cup and saucer. But her brother has not yet arrived. There are dishes, crockery and food on the table. In the middle is a large dish containing fruit. There is no bacon and egg for breakfast this morning .

1. Are all the family seated at the breakfast table ?
2. Is Mary seated at the head of the table ?
3. Where is the fruit ?
4. Name some of the dishes on the table ?
5. Is there bacon and egg for breakfast this morning ?

Stagadenn III.

URDD GOBAITH CYMRU.

Diaes eo komz eus ar stourm evit ar yezh e Kembre hep lavarout ur ger diwar-benn URDD GOBAITH CYMRU, Urzh Goanag Kembre .

Savet e oa bet e 1922 gant an Aotrou Ifan ab Owen Edwards(1). E spered a zo displeget-mat er bromesa a vez graet gant pep ezel :

" Byddaf Ffyddlon i Gymru, i Syd-ddyn, i Grist !

(Feal e vin da Gembre, d'am ?'henvreur, d'ar Christ.)

Pouezet e vez war anaoudegezh istor, yezh ha kultur ar vro met n'eo ket tamm ebet un emsav broadelour rik evel ar re a oa bet krouet e darn eus broioù Europa goude ar brezel-bed kentañ ha n'eo ket bet kouezet ken-nebent en o faziou.

Al lodenn vrasañ eus an izili a zo kembraegerien met digor eo ivez d'ar saoznegerien.

Dacu rummad kalc'hioù a gaver :

kalc'hioù ar vugale, an "adran", evit ar re yaouank dindan 15 vloaz; stag e vezont peurvuiañ ouzh ur skol bennak ha harp a vez roet dezho gant ar renerien hag ar pennadurozhioù;

kalc'hioù an dud yaouank etre 15 ha 25 bloaz a vez anvet "aelwyd" (aelled) a vez distag diouzh ar skolioù met pa n'o deus sal ebet dezho en em vodont en ur skol; kalc'hioù ar saoznegerien a vez anvet " Young Wales Clubs " .

Bez ez eus 1 000 kalc'h en holl.

Al labour kulturel a vez graet dreist-holl dre brientiñ an Eisteddfod-ou hiniñ ar ger, ar bastell-vro ar gontelezh hag Eisteddfod Broadel an Urzh.

E-goug ar gouelioù sportel ha kampoù an hañv e vez sevenet al labour kevredigezhel ha graet war-dro yec'hed ar c'horioù. Ar vugale a ya da Liangrannog, war an aod, hag an dud yaouank da Glan Llyn, e-kichen Bala, e-kreiz al lennoù. Rep bloaz e teu 2 500 kembread yaouank eno da neuial er mor, da roeñviñ war al lenn, da big-t war ar menezioù ha da zañsal. Ar c'hampoù-se o deus poa; net kalz da adsevel ar c'horoù kocz a oa bet dilezet ha ankounac'haet dindan levezon ar brotestant-tiezh.

Klasket e vez ivez dihiniñ ha magañ karantex ar re yaouank e-keñver ar broioù all e meur a stumm :

1^o bep bloaz e vez skinet d'an 18 a viz mae ur C'hemennadur a Youl vat d'an holl vroioù. Setu amañ troidigezh hini 1960 :

" Hiziv en em gav an deiz a youl vat. Ni, paotred ha merc'hed Kembre, a gas hor gourc'hemennoù kalonekañ deoc'h-c'hwi paotred ha merc'hed an holl vroioù.

Er bloaz-mañ e klask an holl vroioù skocazellañ repudi ar brezel. Fellout a ra dimp kacut eññj en hor C'hemennadur eus an holl bro-tred ha merc'hed a zo hep ti, hep aezamant ha hep goanag .

(1) E 1947 e oa bet roet dezhañ an titl a Varc'heg gant ar Roue evit e drugarekaat. Anvet e vez bremañ Syr Ifan ; e saozn. Syr Ifan . Jubile arc'hant an Urdd en em gave er bloaz-se.

Gellout a reomp ober kalz evito .Gellout a reomp skrivañ dezho ha kas dezho arc'hant ha dilhad.Gellout a refemp c'hoazh o fedif da dremen vakarsou en hon ti hag ober ganto hor mignonad.

En ur ober kement-se e tegasfemp un tamm goanag da lod eus ar re a zo kouezhet en dizesper.

Ha karout a rafec'h dont ganimp,evel izili eus an hevelep tiegezh,da skoazellañ ar repudi er bloaz-mañ ? E-lec'h ma 'z eus dizesper degasomp goanag,hag e-lec'h ma 'z eus trubuilh degasomp levenez."

2^e bep bloaz e vez pedet strolladoù tud yaouank da zont da dremen teir sizhun en un hotel e Borth ha r sizunvezh e tiez prevez.

Divizoù a vez dalc'het diwar-benn kudennoù a bep seurt strollet en-dro d'un danvez-kreiz evel " ar boued hag ar yec'hed er broioù paour?"

3^e bep bloaz ivez e vez kaset strolladoù da weladenniñ ar broioù estren.

An arc'hant a vez pourvezet d'an emsav dre skoazelloù kaset gant Ministrerezh ha Pennadurezhioù Lec'hel an Deskadurezh ,skodennoù an izili,abadennoù sonerezh,ha profoù ar vadoberourien.

Ar C'hembraeg eo yezh pennañ an Urzh.Bez' e vez yezh ar C'helc'hioù pa 'z eus tu ha dalc'hmat yezh ofisiel ar c'hampoù-hafv. Bep bloaz ez a an izili war an hent da werzhañ levrioù a di da di : 50 000 levr a vez ar pal.

Bep miz e vez embannet 4 dastumadenn gant an Urzh :

"Cymru 'r Plant",evit ar vugale ;8 700 skouerenn e 1958,9 000 e 1959(1)

"Cymraeg " e kembraeg eñn,evit ar skolidi a studi ar c'hembraeg evel eil yezh ; 22 300 e 1958, 24 000 e 1959.

"Cymru",evit an dud yaouank;6 700 e 1958,ha 7300 e 1959.

"Yr Aelwyd",evit stourmerien kelc'hioù an dud yaouank; 1 575 skouerenn e 1958,1 600 e 1959.

Embannet e vez c'hoazh,en un doare dizingal,"Blodau 'r Fair" ur gelaouenn diduellus a zo he fal atizañ ar re yaouank da lenn o yezh,hep kontañ dastumadennoù kansouennoù,kantikoù,korolloù,pezhioù-c'hoari.

(1) Y FANER,5.11.59.

Stagadenn IV.

LORD RAGLAN HAG AR C'HEMBRAEG.

E 1958 e klaskas un den a renk uhel afer ouzh ar c'hembraeg : An Actrou Raglan, Lord-Lutaner e kontelezh Mynyw. Nac'h a reas da gentañ kemer perzh en Eisteddfod Glyn Ebwy war zigarez e oa ar c'hembraeg eno ur yezh estren ! (1) Aneurin Bevan,ha na oar ger kembraek ebet met a zo kalz finoc'h,a yeas d'ar gouel evel just hag a gannas meuleudi Kembre hag he yezh .(2) . An holl gelaouennoù a reas goap diouzh al Lord-Lutaner:pezh e lakasa da fulorifi ruz. Pennadoù a skrivas enep ar c'hembraeg ha politikerezh divyezhek ar " Cyd-bwyllgor Addysg Cymreig ".Evitañ , n'aotre ket al lezenn kelenn ar yezh en despet da youl ar gerent...Un deiz eürus evit Kembre pa vo lakaet ar c'hembraeg da ziskuizhañ en ul lec'h dereat,da lavarout eo war estajerennoù an dud desket ! "

Douget e voq,ar breujoù dirak Ti al Lorded e Londrez.An Actrou Raglan a damallas an holl , ar Pennadurezhioù Lec'hel,ar " Cyd-bwyllgor Addysg " ha zoken ar Ministrerezh, harpañ un divyezhegezh fall e-keñver an deskadurezh hag ar psikologiezh.

Dek Lord a gemeras perzh er vrentadeg .Al lodenn vrasañ a damallas d'o c'henvreur feukañ pobl Gembre.Talvezout a ra zoken ar boan dezrevell komzoù darn anezho :

Lord MacDonald ,eus Wauyagor,Kembre : " Un deiz eürus evit Kembre pa vo unanet gant e dadoù ha lakaet e gorf da ziskuizhañ da viken war unan eus estajerennoù an tiegezh ! "

Difenn a ra ouzhpenn politikerezh yezhel ar Pennadurezh lec'hel (3) ,ha goulenñ digant an Ao.Raglan dilezel e garg a Lord-Lutaner mar kendalc'h gant an hent en deus kemeret.

Lord Tenby a gav fentus klevout an Ao.Raglan o lavarout n'hell ket kembraegTien an Henternoz ha re ar C'hreisteiz en en gompren. Hag " ar gwir hon eus ,mezañ ,da lemal digant ar rummadoù da zont teñzorioù al lennegezh kembraek an vint kavet e lec'h all ebet ? "

Ar Gouarnamant,dre vouezh Lord Brecon, a displegas ne oa tamm ebet a-du gant an Ao.Raglan hag e vefe gwelloc'h dezhañ chom hep skrivañ hag embann pennadoù.

N'eus galloud ebet gant ar Gouarnamant da c'houlenn na vo kelennet ar c'hembraeg er skolioù dalc'het gant arc'hant ar gumuniez. Pezh a c'hell eo aliañ deskiñ ar yezh...Displegañ a reas ar politikerezh :

(1) En testennoù ofisiel e lavarer dalc'hmat " Kembre ha Mynyw " evel pa ne vefe ket ar kontelezh-se ul lodenn eus Kembre.

(2) Dre radio em boa selaouet penn-da-benn prezegenn an Ao.Bevan. En e gichen e oa ar c'hener du brudet Robinson ha berzh o doa graet o daou hervez doare. Ar Parlemtad a c'houlennas na ne vefe ket implijet ken an dro-lavar dismegasus " Kembre ha Mynyw " met ar ger "Kembre" hepken .

(3) e kontelezh Dinbych,a gav din,nemet ha faziñ a rafenn .

" implij yezh ar bugel e-pad ar bloavezhioù kentañ ha kelenn an eil yezh, saozneg pe kembraeg, tamm-ha-tamm. E dibenn ar studioù izel e tle pep bugel bezañ barrek da zegemer un deskadurezh dre ar saozneg er skolioù-etre. Kembraeg a zlefed kelenn evel yezh kentañ, pe evel eil yezh, e-doug marevezh kentañ deskadurezh an eil derez.

E kiriegezh ar Pennadurezhioù Lec'hel emañ seveniñ ar politikerezh-se, pezh a zo un dra vat, emezañ. N'eus klemm diazezet ebet o tamall e vefe izeloc'h deskamant ar vugale a zesk kembraeg. Prouennoù e-leizh a zo avat da ziskouez ez eo ur gounid e pep keñver. Aon am eus n'anavez ket Raglan an holl fedoù." (1)

Tamalloù Raglan a reas vad da galz eo dud, ret eo krediñ: " Un den, ha n'eo ket un ezel eus ar Gortezenn Vroadel ("Plaid Genedlaethol Cymru"), en deus kaset 100 lur saoz dezhi e koun Raglan. (2) Ma ne vefe ket bet dihunet ar bobl gant ar Gortezenn e vije bet tagadenn Raglan un taol kalet evit ar yezh hag ar vroad ! (3)

(1) Y FANER, 4.12.58.

(2) war-dro 1 400 Lur Nevez, bremañ !

(3) Y FANER 18.12.58.

TAOLENN.

RAKLAVAR	p. III.
ANAOUDEGEZH VAT.....	p. V.
LEVRENNADUR.....	p. VI.
TAOLENN AN ANVIOU-LEC'HIOU MENEGET, en div yezh	p.VIII.

KORF AR STUDIADENN.

Pennad I.	MERADUREZH AR SKOLIOU.....	p.	1.
Pennad II.	AR POLITIKEREZH OFISIEL		
	A . AR POLITIKEREZH DRE VRAS	p.	3.
	B . AL LAKAAT DA DALVEZOUT	p.	4.
	C . DIFENN AR POLITIKEREZH - SE	p.	6.
	D . STAD AR YEZH ER SKOLIOU	p.	10.
	TAOLENN AR VRO	p.	12.
Pennad III.	LABOUR UN NEBEUT KONTELEZHIOU		
	A . KONTELEZH CAERNARFON	p.	15.
	B . KER CAERDYDD	p.	19.
	C . KONTELEZH MORGANNWG	p.	20.
	D . KONTELEZH Y FFLINT	p.	23.
Pennad IV.	AR SKOLIOU KEMBRAEK NEVEZ		
	SKOL LLUEST	p.	26.
	EMLEDAN AR SKOLIOU KEMBRAEK NEVEZ	p.	27.
	AR SKOLIOU BABIGED	p.	27.
	YEZH AR SKOLIDI	p.	28.
	LEC'H AR SAOZNEG ER C'HOLENNEZH	p.	29.
	TALVOUDEGEZH AN DESKADUREZH	p.	30.
	TAMALLOU	p.	30.
	APARTHEID E PONTARDULAIS.....	p.	31.
	SUCCESS AND HOPE - BERZH HA GOANAG.....	p.	32.
Pennad V.	AR SKOLIOU - ETRE	p.	33.
	AR C'HEMBAEG EN ARNOENNNOU	p.	33.
	AR SKOLIOU TEKNIKEL	p.	34.
	SECONDARY MODERN SCHOOLS	p.	35.
	AR C'HEMBAEG ER SKOLIOU - ETRE	p.	35.
	AR SKOLIOU - ETRE E CAERNARFON	p.	36.

	POLITIKEREZH OFISIEL Y CYD-BWYLLGOR ADDYSG..	p.38.
	AARDWYN GRAMMAR SCHOOL ,ABERYSTWYTH	p.38.
	AR SKOLIOU - ETRE KEMBRAEK	p.40.
Pennad VI.	PEDWERYDD AROLWG IAITH,SIR GAERNARFON,1960..	p.43.
Pennad VII.	AR SKOLIOU UHEL	
	AR SKOLIOU NORMAL	p.46.
	KUDENN AR SKOL - VEUR	p.47.
Pen ^d VIII.	AR C'HEMBRAEG ER VUHEZ PUBLIK	
	AR RADIO ,AR SKINWEL,AR SINEMA	p.48.
	AR C'HEMBRAEG ER VERADUREZH	p.50.
	AR GWASK EKONOMIKEL	p.50.
	AN ILLIZOU	p.51.
Pennad IX.	AMZER-DA-ZONT AR YEZH :	
	UNYEZHEGEZH PE DIVYEZHEGEZH	p.52.

STAGADENNOU .

I .	ARNODENN AR "SCHOLARSHIP EXAMINATION"	p.54.
	PETRA A ZLEFE BEZAN	p.54.
	PETRA A C'HOARVEZ	p.54.
	HA KOULSKOUDE	p.55.
II .	TESTENNOU AN ARNODENN WAR AN ELL YEZH B GAERNARFON.	
	KEMBRAEG	p.56.
	SAOZNEG	p.57.
III.	URDD GOBALTH CYMRU	p.59.
IV .	LORD RAGLAN HAG AR C'HEMBRAEG.....	p.61.

enar- Merour-Mouler : A. Ar C'halvez,Floueg-ar -Mor
 Direct-Cédrapt-Imprimeur: Armand le Calvez,FLOUEZEC C-d-N
 Périodique inscrit à la C.F.F.P sous le numéro 35 323

Stagadenn da SKOL niv.10. Supplément à SKOL N° 10.

DIVANKADURIOU DA NIVERENN 9 SKOL :

KANAOUENNOU SANTEL HA KOMPLIDOU .

Un nebeut faziou a zo chomet e sonerezh niverenn diwezhañ Skol, setu amañ ar re bennañ anezho :

Pajenn 1. Eil linenn, war ar ger haq (e vin gwennoc'h) lenn un notenn grogek.

Pajenn 2. Linenn gentañ, war ar ger dour, lenn un duenn. Eil linenn : war ar ger dehoù, pevare notenn al linenn, e-lec'h la, lenn sol. Pevare linenn, war ar ger Allelouia, notenn eildiwezhañ al linenn, e-lec'h sol, lenn fa.

Pajenn 9 : ar menterezh a zo evit gwir ur 5/4 reoliek (3+2). Gwelloc'h e vefe bet notañ evelse, ha breizhekoc'h.

Pajenn 17. Eil linenn, diw notenn gentañ al linenn a zo liammet, mont a reont gant an hevelep silabenn.

Pajenn 22. Linenn gentañ : juntrañ an diw notenn gentañ, a gouezh war an hevelep silabenn gentañ.

Pajenn 30. Merkañ d'an alc'hwez ur pevare bemol, re. Anat eo dreist holl gant an antifonenn gentañ.

Pajenn 43. Mar bez astennet notenn diwezhañ pep gwerzenn, hon eus evit gwir ur menterezh 7/4 (4+3) evel-henn :



haq en doare-se penn da benn.

Pajenn 44. Eil linenn, notenn diwezhañ ar ger lugernus, e-lec'h ar sol, lenn la.

Evit an ASPERGES ME, eo bet ankouaet notañ eo bet savet an ton gant an aotrou Gwasdoue, kelenner e Sant Joseb Lanuon.

A-hend-all n'hon eus ket notet bepred eus pelec'h e teue an dra-mañ pe an dra-se. Pajenn 6, Kirie 1, a zo bet savet gant an oberour. Allelouia ar pajenn 7 a zo diwar kanaouennoù poblek breizhek. Evel pajenn 13, Gloar deoc'h-c'hwil, a zo diwar ar c'han dastumet gant M. Glanndour e Gouareg, nemet eo bet adveret awalc'h. An tonioù gregorian a vo anavezet hep diaesamant, nemet marteze hini ar bajenn 12, a zo bet adstummet diwar ur brozenn eus al liderezh gallikan. Tonioù ar pajennoù 27, 43, 44, a zo bet savet gant an oberour, evel antifonenoù ha kan-displegañ ar pajennoù 30-31. Kan ar bajenn 39 a zo un dra kaer meurbet bet dastumet en evez Eusa.

Met marteze n'eo ket ret diskuliañ an holl sekredoù...

LENNIT E BREZHONEG KAERAN LEVR AR BED : AR BIBL .

Aviel Sant Mazhe	: 4,50 lur.	Levr ar Furnez	: 3 lur
Aviel Sant Mark	: 4	Koheleth	: 2
Aviel Sant Yann	: 4	Habakouk, Hobdia, ...	: 3
Diskuliadur Sant Yann	: 3	<u>Prizioù Franko</u>	.

Da vezañ embannet hep dale : Aviel Sant Lukaz .

Kas an arc'hant d'an Dll Saint Gall de Pons, Keresperz, LOUANNEC. C D N.
K.R.P. : Roazhon , 519 40.

LEVRAOUEG " BARR-HEOL " :

Seurez Kerwenan ,gt Dom Duchauchix	: 2,50 lur .
Mervel da Vevañ ,gt Y.F.Ar Gow	: 4,50
Otello,gt Skakespeare,troet e Brezhoneg gant Klerg	: 5,00

Kas an arc'hant da Rener ar gelaouenn

BARR-HEOL , a vez " lonket " bep trimiz gant e lennerien .

Pa vez bet lennet ur wech e koumananter raktal en ur
gas 5 lur nevez d'ar Rener : Abbé LE CLERC, BUHULIEN,
C D N.K.R.P. Rennes , 91 764.

LENNIT C'HOAZH :

bep miz : AR BED KED KELTIEK ,renet gant Roparz Hemon .

K.R.P. Ar Bed Keltiek, 1907 07 ,Rennes.

bep trimiz : AR VRO ,renet gt Pêr Denez, e galleg hag e brezhoneg,
K.R.P. J.Desbordes ,Nantes ,1493 79 ; 10 L.N.

PREDER : renet gt an Dr Etienne, 14 L.N.
K.R.P. Dr Etienne, 16 093 13, Pariz.

HOR YEZH :renet gt J.Piette, lenner e skol-veur Aberystwyth
K.R.P.Dll QUEILLE, 1240 22, Rennes; 10 L.N.

ha bep daouviz, evel just : AL LIAMM . 12 L.N.

K.R.P. P.Le Bihan ,Pariz, 5349 06.